

AL LIAMM 4

Nevez-Amzer Hanv 1947

Nnn 4

TAOLENN

KENEMGLEV, gant Andrev-L. Latimier	3
DIVROEREZH AR GELTED EN AMZER-VREMAN, gant Yann Boupinod	6
AR Skolioù DRE LIZHER, gant Andrev Merser	13
SKOLIOU KEMBRAEG E BREZHONEG, gant « Skol Ober »	14
WALES, gant Per Denez	17
BRO AN TORGENNOU, SIR DREFALDWYN, gant R. S. Thomas (tr. P. Denez)	19
KELAOUENNOU HA KELC'HGELAOUENNOU E BRO-GEMBRE gant L. T	20
YEZHOU, gant Thomas Gwynn-Jones (tr. F. E.)	21
AR PAOTR FALL, gant Dik Trevan (tr. F. E.)	27
AN IWERZHONEG, gant O Mac Uilis	33
SKEUD UN TENNATAER, gant Kerlann	36
UN DARVOUD ETREKELTIEK	37
AR GEMBREIZ E SANT-BRIEG	38
GAILCK ELLAN VANNIN	41
BODADEG « AL LIAMM »	44
Notennoù	46

KENEMGLEV

« War-raok bepred, a-stroll
Gant reizh, 'vit mad an holl »

Pa vo skrivet en amzer da zont Istor an Emsav Breizhek, moarvat e vo merzet splann pouezusted ar bloavezh-mañ en adc'hanidigezh a zo deut war-lerc'h ar brezel. Prest eo a-benn bremañ an emsav da adkemer war bep tachenn ar stourm evit hor bro. Hag an dra-se a zo anat d'an holl, d'hon enebourien, koulz ha d'hor c'heneiled. Eus tu ar re gentañ hon eus gwelet n'eus ket pell nac'hadenn Naegelen, ministr Deskadurezh Vro-C'hall, d'ur goulenn nevez graet e sell reiñ ul lec'hig d'hor yezh e skolioù hor bro (implijet e vez c'hoazh, a-hervez, ar « simbol » gant skolaerien 'zo...) Daoust da se, ar C'hallaoued a zo bet eeun a-walc'h evit pediñ un toullad kelennerien a vro-Gembre da zont du-mañ d'ober un enklask., diwar-benn stad ar brezhoneg, ha frankiz ar menozioù e Breizh. N'ouzomp ket c'hoazh penaos eo bet danevellet o zroiad gant an dileuridi gembreat, hogen spi hon eus e vo an degouezhadoù anezhi frouezhus-kenañ evidomp. A-hend-all, embannet eo bet gant Plaid Genedlaethol Cymru ul levrig e saozneg da zisplegañ darvoudoù ar bloavezhioù diwezhañ: ur skrid a dalvoudegezh, a dleer strewiñ ar muiañ ar gwellañ e-touez holl saoznegerien ar bed (1). Laouen omp bet ivez da zegemer an Ao. Young, rener Strollad Broadel Bro-Skos ; unan c'hoazh hag a vo pouezus e levezon en e vro hag e lec'h all, hag a-du-krenn ganeomp evel-just. Gant skoazell an dud vat-se, - hon eus ar blijadur da drugarekaat amañ en anv an holl Vretoned - gallout a reer goanagiñ e vo anavezotoc'h ha brudetoc'h kudenn Vreizh er broioù estren, ha dre se e vo ret marteze da Ouarnamant Bro-C'hall paouez un tammig gant e waskerezh, ha plegañ da reiñ deomp un nebeut bruzunennoù.

4

(1) BRETON NATIONALISE. Swyddfa Plaid Cymru, 8 Queen Street, Cardiff,(South Wales).

Evel-se e vez gwelet pegen talvoudus e c'hell bezañ evidomp darempredoù hegarat gant hor breudeur tramor, hag evel-just evit ma teuio da vezañ frouezhusoc'h-frouezhusañ an darempredoù-se, ret eo deomp tapout deskadurezh war an danvez keltiek, hag a-hend-all ober bruderezh, ar muiañ ar gwellañ, en-dro d'hon emsav. Rak-se, sklaer eo emañ an avel o kregiñ da c'hwezhañ war hoñ tu, hogen evit ma tennimp gonid diwar an darvoudoù, evit ma c'hellimp trec'hiñ, ret eo deomp chom unanet en hor stourm. N'eo ket bremañ e tleomp disrannañ an emsav, war skeud hon eus, ouzhpenn hor c'harantez-vro, menozioù diwar-benn ar Gevredigezh, diwar-benn ar Relijion, diwar-benn ar Brederouriezh,... ha me 'oar ! Un torfed, ur gwir daol-trubarderezh e vefe, pa welomp an emsav oc'h adsevel, disrannañ anezhañ e meur a gostezenn iset an eil re a-enep ar re all. Ar ger-stur kozh « Na ruz na gwenn, Breizhad hepken ! » a zo hiziv gwiroc'h eget biskoazh. Taolomp pled ; pouezomp war ar pezh a zo ouzh hol liammañ, tavomp war an traoùigoù a c'hell lakaat enebiezh da sevel etrezomp. BREIZH A-US DA BEP TRA ! En arvar evel m'emañ ene hor bro, tonkadur hor gouenn, buhez hor sevenadur, netra na dle bezañ pouezusoc'h evidomp eget al labour e sell dasorc'hidigezh hor broadelezh.

Lennet e vo pelloc'h an danevell a zo bet displeget gant merour Al liamm dirak izili kevrenn Bariz hor c'hevredigezh, bodet e Kêr-Vreizh, da Yaou-Bask, 15 a viz Mae, hag ivez ar pezh a zo bet divizet e-kerz ar vodadeg-se. Ar pep pouezusañ a zo bet en em glevout diwar-benn doare-skrivañ ar

gelaouenn. Hogos holl izili Al liamm a zo a-du gant

ar brezhoneg peurunvan, neuze, diwar vremañ e vo graet gant reizhskrivadur Emglev an 8 a viz Gouere 1941. Lavaromp diwar-benn-se e oa poent diskoulmañ ur gudenn deut da vezañ kasaus ha skuizhus evit an moll, ha paouez gant rendaeloù diziwezh ha nec'hus-kenañ. Koulskoude, soñjent hor c'heneiled o deus keuz d'an doare-skrivañ kozh e tleer lakaat a-us da bep abeg all youl start hag anat darn vuiañ ar vrogarourien da welout hor yezh unvanet, ha reiñ harp da grouiñ ur gwir sevenadur breizhek-rik e lec'h koll amzer o tabutal.

A-hend-all, gant an niverenn-mañ ez echu hogos an holl gomanantoù. Pediñ a reomp pep hini da gas diouzhtu e skodenn evit an eil rummad a beder niverenn, hep gortoz ul lizher a-ratozh. N'eo nemet gant arc'hant e c'heller sevel un dra bennak talvoudek. Posubl e vefe kreskiñ niver ar pajennoù, ha dont er-maez aliesoc'h, ma vefe daougementet niver ar gomananterien. Ouzhpenn se, goulenn a-reomp ivez keleier ha diskleriadurioù digant hor c'henvroiz o pleustriñ war ar c'hudennoù keltiek (ha stank-awalc'h int bremañ, a-dra-sur).

5

Pep hini anezho a zo gouest da sevel, diouzh e c'hoant, pe ur studiadenn, pe ur skridvarnadenn, pe un droidigezh diwar ur yezh keltiek (gant ma vo berr a-walc'h, plijus ha kentelius) h.a. Pennadoù ar seurt-se a c'hell bezañ dudius-kenañ ha talvezout da greskiñ deskadurezh keltiek an holl vrogarourien, ha ivez teurel da grouiñ e brezhoneg un diellaoueg fonnus diwar-benn ar geltiegezh, pezh a ra kement diouer bremañ, rak e gwirionez, an hini a fell dezhañ studiañ pizh war an dachenn-se, a dle tremen dre ar Saozneg, an Alamaneg, pe ar Galleg. Ac'hanta, ret eo ma vo a-benn un nebeut bloavezhioù skridoù embannet e brezhoneg, ken dudius, ken pouezus ha ken talvoudus hag ar re estren. Ha moarvat e vo an oberennoù-se kalz plijusoc'h evidomp eget ar re all, rak ne vint ket savet hepken diwar-benn Keltia, hogen evit Keltia, gant karantez outi ha youl da brouiñ perzhioù dibar hor gouenn.

Rak-se, pezh a c'hoantaomp, an holl ac'hanomp, a zo unvaniezh ha kenlabour. Eno, hag eno hepken emañ diskoulm ar c'hudennoù ramzel hon eus bet, ni brogarourien Vreizh an XXvet kantved, ar gefridi da ziluziañ. Hogen, ma fell da reoù 'zo en hon touez lakaat a-us d'ar garantez ouzh ar vro ur menoz all, n'eus forzh pehini, ne ziwano diwar se nemet dizurzh ha kengasoni. Ac'hanta, ret-holl eo deomp bezañ aketus ha reizh e-keñver an emsaverien all, ha neuze, hep mar ebet, e teuo evidomp mare an trec'h. Breizh da gentañ !

Andrev-L. LATIMIER

DIVROEREZH AR GELTED EN AMZER-VREMAÑ

A-holl viskoazh, ez eus bet tud o tivroañ. Anat eo diwar lenn oberoù Herodotos, Thucydides, Titus-Livus ha Kaezar.

Koulskoude, meur a abeg a zo kiriek d'an diannezadurioù-se.

- Abegoù natur : evel an naonegezh pe an darvoudoù fall : (Iwerzhon e 1846, Bro-Sina a vare da vare).

- Abegoù kevredigezhel liammet alies gant ar politikerezh : (heskinerezh ha harlu Scylla e Roma, dinac'hidigezh Lezenn-Veur Naoned, Dispac'hoù Bro-C'hall ha Bro-Rusia).

- Abegoù arboellerezhel (mengleuzioù kavet, goprouù uhel er broioù nevez, touellerezh ar c'hêrioù bras:

- En diwezh, menegomp : nerzh an armoù ; aloubadeg Enez Preden gant ar Saozon a redias lod eus an Henvreizhiz da vont d'ober o annez e Bro-Arvorig er 5vet kantved.

A-gevret gant an abegoù disheñvel-se, ret eo lavarout ivez ez eus, e gwirionez, meur a zoare a zivroerezh. Menegomp :

- An divroerezh dibad : da skouer hini labourerien-douar Bro-Gernev o vont d'ober an eost er v-« Beauce ».

- An divroerezh-trevadenniñ, alies evit mat : da skouer hini Gouerion a Vro-Boc'her o vont d'ar Saskatchewan.

- En diwezh, an divroerezh enep ar youl. « Dilec'hiadur » Bretoned a Vro-Arkadia hag an Douar Nevez er 18vet kantved, kaset kuit gant ar Saozon a zo ur skouer anat, lieskementet hiziv en un doare sebezus da heul feur-emglev Potsdam.

Ar c'hudennoù savet diwar se a zo luziet-kenañ. Bro-Japan, poblet-stank, o paouez koll he zrevadennoù, a en em gav gant re a annezidi ; ne blij ket kalz d'ar Japaniz divroañ, hogen ret e vo d'ul lodenn anezho mont kuit en ul lec'h bennak. - Bro-Iwerzhon o koll bepred tud, daoust da abegoù kentañ an divroerezh bezañ aet da get abaoe pell 'zo, a c'houzañv un « diwadadur » fall-kenañ.

Ne dalv ket ar boan adlavarout ez eo lodenn wellañ ha yac'hañ ur Vroad a ya kuit evelse. Ha, abaoe krouidigezh ar bed, an DEN e-unan eo, a zo bet ar binvidigezh kentañ. Mat e c'hell bezañ an divroañ pa laka ur vro da alanat aesoc'h, hogen p'he gwelomp er c'hontrol o koll dibaouez he gwad, n'eus a-benn an diwezh nemet ar marv eviti.

Aesoc'h eo bet lakaet da vezañ an divroañ gant ganedigezh ar Veaj Veur (Kevredigezhioù hentoù-houarn ha bigi) dre ma oant gouest da gas buan ur bern tud eus an eil lec'h d'egile. Lavaromp ouzhpenn ez eo an ijinerezh, zoken e lec'hioù 'zo, geotenn ebet enno evit bevañ loened, ul lonker tud, ha meizet e vo pegen stank eo bet an divroañ e-pad an 19vet kantved ha derou an 20vet.

1780-1939 a zo daou benn un amzervezh e-pad ma oa an divroerezh un darvoud dieub hag a youl-vat (keit ha ma c'heller lavarout groñs ez eo « dieub » hag « a youl-vat » un divroerezh). Bez' e oa, e gwir, ar frankiz evit an den d'ober ar pezh a blijed dezhañ, hogen abaoe feur-emglev Versailles ar frankiz a oa bet tamm ha tamm lamet digantañ evit mad ar Stad o ren anezhañ. En diwezh, war nes an eil brezeladeg vedel, e oa eus un tu serret ar Stadoù enbroañ hag eus un tu all, ar Stadoù divroañ a vire ouzh an dud da guitaat o bro.

Marteze e vo gwelet divroerezhioù o tiwanañ goude ar brezel - a-benn bremañ endeo e c'heller o merzout - hogen disheñvel e vint diouzh ar pezh a oant a-ziagent. Pep Stad a raio he seizh gwellañ evit chom mestr warno ha ren anezho war-du tachennoù-bro dindan he beli. Diwar neuze e vo disheñvel-krenn an divroañ, rak-se e kemerimp an amzervezh adal diwezh an 18vet kantved betek kreiz an 20vet, e sell keñveriañ divroidigezhioù Iwerzhon, Bro-Skos, Bro-Gembre ha Breizh.

Luskoù ha Kreskidigezh-Poblañs klok : Bro-Skos.

Skouer wellañ ur boblañs o kreskiñ, en ur welout ul lodenn anezhi o tivroañ hag ul lodenn all oc'h ober hec'h annez e lec'hioù resis, a vez roet deomp gant Bro-Skos a roe bod da :

1.300.000 den e 1750

1.608.000 den e 1801

2.888.700 den e 1851

4.472.100 den e 1901

5.011.000 den e 1946

Liammet-kenañ eo al luskoù-se. Adal ma voe piaouet gant Landlorded kreiz an 18vet kantved, douareier ec'hon diwar goust tieion dister, e sell krouiñ tachennoù anvet « sheep walks », ret e voe d'an Uheldiriz en em ober ouzh ur vuhez nevez. Evit ur c'halz anezho ne voe nemet divroañ (d'ar C'hanada an darn vuiañ).

8

Goude bezañ kavet an ijinerezh diwar ar glaou, buan ne voe ket a-walc'h a c'hloan gant deñved Bro-Skos, evit gwiadurioù pouezus-meurbet nevez-krouet. Bro-Australia, gant he gallusteroù divent e-keñver ar sevel-deñved a oa dieub. Diwar neuze, e 1851, divroerion Vro-Skos a yeas daveti (berzh daougementet evit al Landlorded o devoa endeo skrapet o douaroù diganto). Lakaat a rejont an Enez Vras da deurel frouezh. Ha goude e teuas tro ar Stadoù-Unanet, e-lec'h ma c'heller sellout ouzh New-York evel kêr gentañ Bro-Skos... Hervez ar c'hontoù graet, adal 1853 da 1913, ur milion hanter a Skosiz o deus divroet, o kas ganto perzhioù mat o gouenn hag o pinvidikaat ul lodenn vras eus ar broioù e dalc'h Breizh-Veur pe a yezh ganti.

Hogen e-pad an amzer-se, kreskiñ a rae evelkent poblañs Bro-Skos, evel ma 'z eo bet diskouezet gant an daolenn a-us. Se en abeg da gavidigezh ha gonidigezh ar mengleuzioù-glaou, hag ivez d'an ijinerezhioù stank a reas o annez en Izeldirioù, evel ar savadurezh-listri (labouradegoù stêr Clyde, ar re vrasañ er bed a-bezh) hag ar gwiaderezh. Neuze an holl Skosiz n'o devoa nemet nerzh o divrec'h evit bevañ a ziskennas diwar o menezioù. E 1801, ne oa e Bro-Skos nemet :

8 kêr etre 5.000 ha 30.000 den ar boblañs anezho.

2 gêr etre 30.000 ha 50.000 den ar boblañs anezho.

E 1921, e oa :

7 kêr etre 30.000 ha 50.000 den ar boblañs anezho.

6 kêr etre 50.000 ha 200.000 den ar boblañs anezho.

1 gêr etre 200.000 ha 500.000 den ar boblañs anezhi.

1 gêr ouzhpenn ur milion a dud enni.

Homañ Glasc'ho he devoa kresket evel-se :

674.000 den e 1881

776.000 den e 1901

1.034.000 den e 1921

1.130.000 den e 1946

Neuze, an divroerezh stank-se : war-dro 25.000 den pep bloaz, n'en doa ket miret ouzh Bro-Skos da greskiñ. Gwelout a reer ne oa nemet 10 Skosad war 100 divroer eus Breizh-Veur e 1878, hogen 12 e oant e 1901, 18 e 1907 hag 20 e 1912.

E-pad an hevelep amzervezh, Bro-Skos he doa gwelet he foblañs o kreskiñ a hogos 2 vilion a dud, o kaout evel-se neuz ur vro en he barr.

Divroerezh diabarzh a-ziwar ar maez davet ar c'hêrioù : Bro-Gembre.

Ar pezh ez omp o paouez gwelout diwar-benn Bro-Skos a zo marteze anato'h evit Bro-Gembre, e-lec'h ma oa diouer a wir gêrioù e deroù an 19vet kantved. Ar vro-se, kouezhet dindan beli ar Saozon dre vezañ dalc'het gant soudarded, a zo chomet troet ouzh al labour-douar nemetken betek deroù an 19vet kantved. E-kichen an aod edo, an holl vourc'hiou bras a-walc'h.

9

Abalamour d'an hevelep abeg hag e Bro-Skos, kavidigezh glaou dispar, e voe dispennet pep tra gant an ijinerezh.

Kontelezh Vorgannoug he devoa 70.880 annezad e 1801. Bez' e oant 1.250.000 e 1921, da lavarout eo 600 d'ar c'hilometr-karrez (niver diwir, rak an uhelennoù a zo diannez-krenn ha kreizennet eo an dud e kêrioù diyac'h ha divalav-meurbet. Pastell-vro kêr Rhondda a gont 1720 den d'ar c'hilometr-karrez).

Kerdiz, e 1801 ur vourc'h vihan dister, 1.020 den enni, he devoa 18.000 annezad e 1851, 165.000 e 1901 ha 230.000 a-benn an diwezh. War an divout-mañ, jedet eo bet er eus bet, abaoe 1841, 10.000 annezad ouzhpenn evit pep kreskadenn a ur milionad tonnad e kasidigezh ar glaou.

Barry, ur gêriadennig a 100 den e 1871, he devoa endea 13.000 e 1891 ha bremañ 40.000.

N'heller ket kavout ur skouer wellañ a greskidigezh evit ur vro dre an ijinerezh, ha war un dro, ur skouer a zivroerezh diabarzh, rak mar deo diogel ez eus bet estrenion dedennet gant kreskidigezh kontelezhioù ar C'hreisteiz, ar greskidigezh-se a zo bet da gentañ holl kembreat.

Ret eo lavarout a-hend-all ne gaver nemet nebeut a Gembreiz en estrenvro, pezh a zo souezhus.

Divroerezh diwar ar maez gant degouezhioù fall : Iwerzhon.

Paour kaezh Bro-Iwerzhon, a zo ar vroad gentañ er bed... e-touez ar broioù lakaet en arvar

gant an divroidigezh. N'eo ket un divroerezh, hogen ur walenn.

Boazet omp da lavarout ez eo an naonegezh hag ar verouriezh-vro a zo pennabegoù an divroerezh e Bro-Iwerzhon. Gwir eo, hogen abegoù all a zo, ha, arabat eo isprizout ar c'hudennoù arboellerezhel. Rak, pa oa poblet ar muiañ, bez' e oa test da 585.000 labourer-douar dilabour e-pad ouzhpenn tregont sizunvezh, en abeg d'an douaroù gwellañ chom fraost.

Kounaomp kemmoù niver an dud :

1.100.000 e 1672

2.373.000 e 1750

5.395.000 e 1801

8.175.100 e 1841

5.174.800 e 1881

4.229.000 e 1921,

4.293.000 e 1946

Spontus eo ur seurt diboblidigezh, ha diouti e sav marteze ar c'hudennoù luzietañ a zo er peder broad keltiek.

10

Troet war al labour-douar eo Bro-Iwerzhon : h'eus labouradegoù dellezek da vezañ meneget nemet e Bro-Ulad (reoù Dulenn ha Korkaig a zo dister). Rouez-kenañ eo ar c'hêriou e Bro-Iwerzhon ; e 1.801, da skouer, ne oa nemet :

9 c'hêr, etre 5 ha 30.000 annezad enno.

2 gêr, etre 30 ha 50.000 annezad enno.

3 c'hêr, etre 50 ha 200.000 annezad enno.

Hag e 1921 e oa:

9 c'hêr, etre 5 ha 30.000 annezad enno.

3 c'hêr, etre 30 ha 50.000 annezad enno.

1 gêr, etre 50 ha 200.000 annezad enni

2 gêr, etre 200 ha 500.000 annezad enno

Koulskoude, hervez ar broioù dibabet gant an divroerion e verzer e kav gwelloc'h Iwerzhoniz ar re e lec'h ma 'z eo al lezenn Saoz ledanoc'h eget en trevadennoù. Ha se abaoe pell 'zo, rak an 30.000 divroer eus deroù an 19^{vet} kantved a zo aet kentoc'h d'ar Stadoù Unanet dre ma ne oa ket disheñvel kalz an doare-bevañ en trevadennoù Saoz diouzh hini o bro. Da skouer e 1820, komz iwerzhoneg e Bro-Aostralia a oa a-walc'h evit tapout hanter-kant taol skourjez ; chom hep mont da glevout ar prezeg protestant (zoken evit Katoliked evel darn vuiañ an Iwerzhoniz) a gase war-eeun d'an toull-bac'h. (Eveljust ne dalv ket ar boan menegiñ an hopadennoù a vije bet laosket gant Frankizourion Vro-Saoz en amzer-se ma vije bet graet seurt tra d'ar Brotestanted en ur vro gatolik).

Mont a reer muioc'h-mui war-du ar Bed Nevez, etre 1831 ha 1841 daoust d'an naonegezh bezañ diragwelus. Ar broioù saoznek all a dap tud ivez, hogen nebutoc'h. Ha niver an divroerion a diz 214.000. E-kerz an 20 bloavezh da heul, 2.500.000 a dud a ya kuit, 250.000 anezho evit 1851 hepken.

Etre 1841 ha 1901, kollet eo bet gant Bro-Ulad 33 % eus he foblañs, 41 % gant Bro-Lahin, 45 % gant Bro-Moua ha 57 % gant Bro-Gonnac'ht.

Boston, New-York, Chicago, Buffalo, da skouer a zo kêrioù iwerzhonat, un darn vras eus pep hini d'an nebeutañ ivez Melbourne, Sydney, Capetown.

E deroù an 20vet kantved, 30.000 den a zivroe pep bloaz. E 1920, 16.000 hepken. Abaoe Krouidigezh ar Stad Dieub, strivoù start a vez graet e sell stankaat ar gouli. Hogen - ur boaz hag ur blijadur eo evitañ - an Iwerzhonad a zalc'h da vont kuit, war-du Amerika hag ivez war-du Breizh Veur, e lec'h ma vez kavet trevadennoù stank e porzioù-mor Glasc'ho, Liverpool ha kêrioù ijinerezhel ar Middland.

11

An hent arvarus : Breizh.

Abaoe pell' zo e tivroer eus Breizh, ha - kontrol eus ar pezh hon eus gwelet e lec'h all - muioc'h-mui. Da gentañ, abalamour ma'z a Kelted tramor war-du ur stad estren, e-pad ma chom an darn vuiañ eus hon divroidi dindan beli ar Stad C'hall.

A-hend-all, ret eo anzav n'eo ket ar Breizhad divroet ken tuet d'ar stourm hag ar Skosad pe an Iwerzhonad. Rediet da guitaat ur vro hep gallusterioù evit bremañ, mont a ra ar Breizhad war-eeun da Bariz e-lec'h ma'z a re alies da greskiñ niver ar werin izel, ha nann e-touez an dibab...

Dic'hallus eo neuze d'an trevadennoù breizhat ober berzh kement hag an Iwerzhoniz er Stadoù Unanet pe ar Skosiz e bro-Aostralia ha Zelanda Nevez.

Kresket eo poblañs Vreizh abaoe 1800 emezoc'h-hu ? Abaoe ouzhpenn 100 vloaz e tivroer, hogen ar boblañs a gresk, dres evel e Bro-Skos. Ya, hogen chom a reer war dachenn ar Republik, hag eno emañ an dalc'h. Rak ur Breizhad er C'hanada a vo ur Breizhad, hogen e Colombes pe Glichy... nebeut a dra. An divroerezh breizhat - graet e gonid Bro-C'hall - a c'hell bezañ rannet e daou skourr : Pariz, hag ar peurrest. Kemeromp ar rumm kentañ: Un enklask war ar stern a ro da c'houzout ez eus 5% evit an dibab hag ar Vourc'hizion, 31 % evit ar renkadoù-kreiz, ha 64 % evit ar werin. (En ur gevredigezh reizh, ar sifrennoù a zo 11 %, 41 %, 49 %...). Pezh n'eo mat nag evit ur vro a goll he bugale wellañ, dellezek gant perzhioù o gouenn eus ur stad welloc'h, ma vefent renet mat.

Evit ar re all, pep hini a oar pegen diaes eo d'an aluzenerezh breizhat e bro-Akitalia a-benn mirout d'an 12.000 Breizhad divroet n'eus ket pell en « Dordogne » ha war-dro, ur bersonelezh divoutin hag ar yec'hed-spered ret a-benn ren ur vuhez talvoudus.

Evit an trevadennoù, daoust hag e c'heller komz a zivroerezh evel ma vez graet. Eveljust ne soñjomp tamm ebet e disprizout strivoù hor c'henvroiz en Afrika an Hanternoz, er Viet-Nam hag all... hogen bez' ez int dreist-holl moraerion pe gargidi, na chomint ket da viken el lec'h ma 'z int : heñvel evit ar Soudarded. Ha Breizhiz Bizerte, Saigon Hanoi, Dakar a zo, evit an darn vuiañ, moraerion, kargidi a-berzh stad ha soudarded.

N'eus - nemet taol-arnod ar Perigord - divroerezh renet ebet. War 600.000 divroad o chom e Bro-C'hall, Kêr Bariz hag he bannlev a gont marteze 400.000, ha n'int ket ur skouer, dre ma 'z int diren.

12

Goude daou vrezel spontus o deus lazhet tost da 300.000 Breizhad e-touez ar re wellañ, gwelout a reomp an divroerezh breizhat, gwechall 15.000 den pep bloaz (2 baotr e-keñver 3 flac'h) o vont war washaat muioc'h-mui.

Digreskiñ a ra endeo niver ar boblañs evit abegoù a vo displeget ur wech all hag a laka en arvar dazont ar Vro. A-hend-all, kontrol eus Iwerzhon, kêrioù 'zo o devoa kemeret ul lodenn eus ar boblañs, hogen distrujet int, darn anezho ha pep hini a oar ne vint ket adsavet diouzhtu...

Da echuiñ, ret eo lavarout o deus divroet dre vras Kelted tramor - hag i alies o stourm a-enep Bro-Saoz - er-maez eus Bro-Saoz; ha krouet o deus broioùigoù dezho o-unan en tu all d'ar mor bras. A-hend-all, daoust d'ar gouarnamant saoz kas kentoc'h ar soudarded skosat ha kembreat d'an argadadoù marvus, n'eus ket kement-se a dud lazhet, rak ar spered saoz a gav ez eur talvoudusoc'h bev eget marv.

Kelted an Douar Bras ne stourmont ket a-enep Bro-C'hall, gant an armoù d'an nebeutañ. Kontrol eus Bro-Saoz, o tipoblaat emañ Bro-C'hall, hag eviti Breizh a zo un arboellad-tud e-lec'h n'eus nemet puñsañ. Se ne vefe ket ken fall ma talc'hfe Breizh da vont war-raok. Siwazh, ni a oar ne ra ket. Neuze n'eo ket frealzus tamm ebet studiañ kudennoù an divroerezh breizhat : soñjal a raer diouzhtu ez eo un divroerezh damrediet e-lec'h un dra natur.

Ar Breizhad, rediet da guitaat e vro abalamour da stad direizh ar Gevredigezh hag an Arboellerezh, ne gav mad ebet oc'h ober se. Buan e dalvoudegezh-den a ziskenn, ha gwashat tra, an nerzhioù-kuzh kiriek da se n'int ket gouest da dennañ gonid o-unan eus seurt stad, o soñjal n'eo ket ar Breizhad un den gouest da ren pe d'en em ober e-unan.

Evelkent, arabat eo ankouaz ez eo ster don ar ger divroañ mont e lec'h all e-sell krouiñ ur vro nevez heñvel-mik ouzh an hini gentañ, gant ar spi da zont en-dro un deiz pe d'an nebeutañ gant ar youl d'he skoazellañ bepred. Diwriziennerzh ha dilec'hiegezh a c'houlenn temzioù-korf ha spered heñvel ouzh re al lec'h nevez. Daoust ma n'eo ket en abeg da se ne da ket da vat an divroerezh breizhat ?

Ret eo kounaat ivez ez eo an divroidi vreizhat divroet div wech, teir gwech zoken ma talc'her kont eus an Istor. Hor pobl a zo bet kaset kuit eus Breizh Veur er 5vet kantved, he renerion a zo bet harluet en 10vet kantved e-pad dalc'helezh an Normaned. Hon divroidi-vremañ o deus divroet e daou daol ; kemeromp ur skouer : e dibenn an 19vet kantved, ur c'houer en deus kuitaet Skrignag evit labouradeg vutun Montroulez. Hogen goude bezañ dimezet ha ganet dezhañ pevar bugel, n'eo ket gouest da reiñ dezho pep a vicher c'honidek, ha ret eo bet dezho mont da Bariz. Eno, diampart ma oant, n'o deus gallet nemet lakaat postoù-houarn en S.N.C.F...

13

Daoust ha ne vije ket bet treuzkemeret evit ar pezh a sell ouzhimp, Divroerezh ha Diwriziennerzh ?

Yann BOUPINOD.

Ar Skolioù dre Lizher

Skol « Ober » a vez anavezet mat gant pep hini a ra war-dro an Emsav. Kreizenn ar studioù keltiek eo e Breizh, kalz muioc'h eget Skol Veur Roazhon. Siwazh, ne vez desket en hor skol dre lizher nemet ar Brezhoneg, en un doare dispar a-hend-all, gant an Dimezell Gourlaouenn, an Ao.Ao. Stefan, Tomaz, h.a., hag ar C'hembraeg gant an Ao. 'n Abad Klerg. Sellomp bremañ ouzh ar pezh a vez graet e Keltia tramor.

E Kernev-Veur e oa gwech-all ur skol dre lizher evit deskiñ ar c'herneveg. N'eus ken anezhi.

E Bro-Alba ec'h eus « Sgoil Eolais na h-Alba » (Skol anaoudegezh Alba). Sed amañ roll an traoù a c'heller deskiñ drezi :

- a) Gouezeleg Alba : Pemp skol, unan evit ar re a grog gant studi ar yezh ; un eil evit ar re a oar dija, un drede evit en em wellaat, ur skol etre, hag ur skol veur. N'eus nemet 24 a gentelioù enni. D'hor meno, re luziet int ha dreist-holl ec'h eus re a draoù e-kichen ar yezh.
- b) Teir skol evit gouezeleg Enez Vanav hag ur skol Keltieg (Alba, Manav, Iwerzhon) a zo ivez, ha bremaik e vo krouet ur skol evit ar yezhoniourien.
- k) Div skol evit studiañ Istor Alba, unan evit lennegezh Keltia, ha setu « Sgoil Eolais na h-Alba »:
Pell omp endeo eus hor skol vihan-ni.

E miz Genver ez eus bet savet e Kerdiz ur skol nevez dre lizher : « Coleg Glyndwr ». Tregont skol ec'h eus enni : Kembraeg, e lennegezh hag e istor ; Bro-Gembre, gouarnamant, arboellerezh, douaroniezh ; Istor Europa ; Brezhoneg hag istor Breizh ; Gouezeleg Alba, hec'h istor hag he lennegezh ; Yezh, lennegezh hag istor Iwerzhon ; Galleg hag Alamaneg ; h.a.

14

Pelloc'h omp c'hoazh amañ diouzh « Ober », eget ma oamp gant « Sgoil Eolais na h-Alba ». Un dra all ez eus da verzout. Evit netra e vez roet deskadurezh gant « Ober », ha ret eo paeñ evit heuliañ skolioù tramor (ul lur saoz hanter). Gant piv ar gwir ? Alies e vez kavet didalvoud ar pezh a roer evit netra. D'hor meno, ar gwellañ d'ober a vefe : reiñ evit netra skol gentañ ar brezhoneg ha goulenn digant an dud paeñ ar skolioù all.

Kresket e tleo bezañ « Ober ». Mat e vefe stagañ outi kentelioù diwar-benn Istor ha Douaroniezh Vreizh, eil skol ar C'hembraeg, Istor ha lennegezh Vro-Gembre, istor, yezh ha lennegezh pep bro geltiek, ha marteze ivez Saozneg hag Alamaneg, peogwir eo ret gouzout ar yezhoù-se evit ober studioù diwar-benn Keltia. Kelennerien a vefe kavet aes a-walc'h. Evidon-me, prest on da harpañ kreskidigezh « Ober ». A-benn tri miz, e c'hellin reiñ kentelioù diwar-benn ar C'herneveg hag e lennegezh.

Goulenn a reomp digant pep Breizhad a gar e vro reiñ deomp e ali. Eus unvaniezh ha nerzh an holl eo e vo adsavet hor bro.

Andrev Merser.

G. S. - Skrivet e oa ar pennad-mañ pa 'm eus gwelet ganedigezh « Skol an Triskell ». Mat-tre e hañval bezañ ar skol-se, ha marteze e vefe mat dezhi en em lakaat a-gevret gant « Ober » - N'ouzon ket avat ha graet e vez e brezhoneg, ret eo evit bezañ staget ouzh « Ober ». Bez' ez eus ivez S.A.Y. - N'ouzon ket kennebeut penaos e vez graet.

Skolioù Kembraeg e Brezhoneg

Araok ar brezel-mañ e oa bet savet gant an Aotrou G.B. Kerverzioù ur « Skol gembraeg dre lizher » (Skogem, gouez dezhañ). Ar pezh a glasked e oa deskiñ yezh Kembre dre ar brezhoneg ha gant ar brezhoneg hepken, hep tremen na dre ar galleg na dre ar saozneg. Betek ar bloaz 1940 pe 41 e talc'has ar Skol-se de vont endro, hogen mac'homet 'vel ma oa gant e labour a-hend-all e rankas ar rener anezhi ehanañ e-pad ur pennad. Neuze avat e voe savet skolioù kembraek all ; skolioù dre gomz ar wech-mañ ha neket dre lizher ken : Skol Uhel Ermil Ernod e Roazhon, Kêr-Vreizh e Pariz.

15

E penn-kentañ ar bloaz 1944 e voe krouet ur skol all e Ti Breizh Lanuon ; 5 a dud a roas o anv, met daou hepken a zalc'has betek miz Gouere da heul ar c'hentelioù - abaoe avat o deus bet kendalc'het da studiañ ha bremañ ez int barrek da lenn ervat ha da skrivañ kembraeg hep ober re en holl a fazioù.

E miz Eost 1944 e voe skubet pep tra. Kerkent ha ma kredas « Skol Ober », e mizioù kentañ 1945, adkregiñ sioulik-sioulik gant he labour brezhonek, goude ur reuziad aon ha spont, e voe staget outi ur « Skol izel ar C'hembraeg ». Dre un taol-chañs dibar en doa bet amzer an Aotrou Kerverzioù gant sikour Abeozen da embann araok an dispac'h, e levrig prizius « Skol vihan ar C'hembraeg ». Ne oa ket bet lañs d'ober nemeur a vrud endro d'al levr, siwazh ! ha nebeut anezho a gaved e gwerzh e ti ar werzherion-levrioù, pa oa bet lakaet ar siell war holl beadra ha mouladurioù « Skridoù Breizh ». Tamm-ha-tamm evelkent e teuas skolidi d'ar Skol nevez, dreist-holl goude ma oa bet aotreet a-nevez gwerzhañ levrioù « Skridoù Breizh », gant ar gouarnamant. Setu amañ niveroù hag a roio da gompren gwelloc'h eget komzoù al labour sevenet gant ar « Skol izel » abaoe daou vloaz 'zo.

25 a dud o deus bet goulennet doareoù eus ar skol ; 17 o deus bet roet o anv ; 13 o deus bet kroget gant levrig Kerverzioù, 3 a zo paouezet nebeut goude dre na ouient ket trawalc'h a vrezhoneg evit tennañ ampled eus ar c'hentelioù ; eus an dek all : 5 a zo echu gant al levr hag a-raok pell e vo echu ivez gant ar 5 all.

10 eta 'benn nebeut a amzer amañ, a ouio un dra bennak eus yezh Kembre, ha barrek e vint da gompren traoù aezet.

A dra sur n'eo ket kalz a dra an 10-se e skoaz ar c'hantadoù ha miliadoù a Vrezhoneg a zlefe plediñ gant yezh ha lennegezh Kembre. Da vihanañ boulc'het mat eo an erv ha spi hon eus ez ay war greskiñ mui-ouzh-mui niver diskibion ar skol vihan...

Evel m'emeur o paouez lavaret e vez graet kentelioù gant sikour levrig Abeozen-Kerverzioù : « Skol vihan ar C'hembraeg ». Da heul al levrig studi-se e rank ar skoliad kaout ivez eveljust « Yezhadur berr ar C'hembraeg ». Ar pezh a zo an aesañ 'vit pezh a sell ar skol ez eo e c'hell an diskibion kregiñ pa garont, paouez pa garont, degas poelladennoù da reizhañ ken alies ha ma karont. Trawalc'h ez eo dezho merkañ e penn-krec'h o foelladenn, niverenn ar gentel pe bajenn al levr. Gant follennoù liesskrivet avat e vefe un abadenn all ha ret e vefe ober rummadoù gant ar skolidi, dezho da gregiñ ha da echuiñ a-gevret.

16

Daoust d'ar « Skol vihan » bezañ talvoudus hag aes-meurbet e vefe bet gallet ober tammoù gwellaennoù enni. Meur a fazi-mouladurezh a zo chomet enni ; moarvat ne oa ket bet adsellet pizh an amprouennoù... Fazioù all a zo e-keñver ar C'hembraeg hag hep mar ebet an hini gwashañ anezho eo troidigezh ar ger « perseiniol » eus kan broadel Kembre troet e brezhoneg dre « bersonel », pa dalv e gwirionez « flour, heson, brao da glevet».

Un dra all a vank c'hoazh : an distagadur, rak re luziet ez eo ar reolennoù roet gant Abeozén en e « Yezhadur ». Evit gwir, e tu-hont da « **ll** » ha da « **rh** » hag a ranker deskiñ diwar glevet, n'eus nemet distagadur an **y** ha dreist holl an diftongenn **wy** pe **yw** a gement a zo diaes reiñ ar reolennoù anezhañ. Evit an **y** e teuer a-benn hep poan, met evit **wy** ha **yw** e vefe mat merkañ bep tro pe dost.

En e « Yezhadur » ivez en deus Abeozen ankounac'haet reiñ da c'houzout penaos e vez distaget sinoù al lizherenneg kembraek, cf. p. 8. moul. 1942. Un dra vat e vefe bet c'hoazh lakaat e-kichen gerioù kembraek ar « Yezhadur »-se an droidigezh vrezhonek anezho : kement all a c'herioù desket e vefe, na petra...

Arabat klemm evelato, rak gant an daou levr-se e c'hell ur Breizhad brezhoneger kaout un diazez start da sevel warnañ, ma kar, e zeskamant kembraek. Ha ret eo soñjal end-eeun er re a venn peurzdeskiñ yezh Kembre, hag evit-se goveliañ ha kizellañ evito an alc'houez brezhonek aour a zigoro dezho dor an templ skedus m'eo lennegezh ha sevenadur Cymru...

« SKOL OBER »

(Kevrenn ar C'hembraeg)

Notenn - An neb a venn heuliañ ar « Skol Izel », skrivet da Varc'harid Gourlaouen, Douarnenez da c'houlenn doareoù. Evit ur bennozh Doue e vez roet an holl gentelioù.

WALES

WALES, Nnn 23, Autumn 1946, Edited by Keidrych Rhys. - Diaes eo rentañ kont e berr gomzoù eus un dastumadenn ken heverk hag honnezh, enni barzhoniezh eus ar gwellañ doare (gant Gwyn Williams, John Legonna, R.S. Thomas, h.a.) ha pennadoù komzplaen liesseurt. Pouezañ a rin kentoc'h war div studiadenn, talvoudusoc'h, marteze eget ar re all evidomp-ni Breizhiz.

Mont a-enep d'an holl venozioù degemeret diwar-benn istor kozh ar Vrezhoned a ra an Ao. Wade-Evans en e studiadenn « Anglo-Welsh ». Ar menozioù degemeret-se, an holl o anavez : penaos e oa enez Vreizh e dalc'h ar Vrezhoned ; penaos e voe lakaet ar re-se e kabestr gant lejionoù Roma ; penaos e chomjont dizifenn dirak ar Bikted goude ma voe aet kuit soudarded an impalaeriezh ; penaos e c'halyjont an Hensaozon war o skoazell, ha penaos e voent trec'het ganto a-benn ar fin, diberc'hennet eus o strujusañ douaroù hag argaset da Gembre, da Gernev ha da lodoù hanternozekañ ar pezh a zo bremañ Bro-Saoz.

D'an holl vojennoù-se (mojennoù n'int ken, gouez da A.W. Wade-Evans) n'eus nemet un diazez, istor Gweltaz, rak diwar an istor-se o deus labouret Bede, Nennius, Jafrez Menoe, ha diwar levrioù Jafrez Menoe dreist-holl istorourion ar c'hantvedoù tremenet. A-bouez-bras eo enta mont don e studi an **de exidio Britanniae**.

Fazi-Gweltaz, eme A.W. Wade-Evans, a voe treuzkemer ar Vrezhoned evit ar **Britanni** gozh, da lavarout eo annezidi kentañ enez-Preden, da lavarout eo c'hoazh **Predeniz**. Ha, pa wele na oa ket mui an enezenn a-bezh, en e amzer-eñ, e dalc'h ar Vrezhoned, e soñjas e oant bet diberc'hennet eus an douaroù poblet neuze gant Hensaozon. E gwirionez, a zispleg an Ao. Wade-Evans, « tud Kembre n'int ket muioc'h na nebeutoc'h Predeniz eget Uheldiriz Bro-Skos pe annezidi Bro-Saoz. Ar Romaned n'int ket aet kuit... Ne voe alouberezh ebet gant an Hensaozon, rak an Hensaozon o-unan a oa Predeniz, o doa graet e-pad kantvedoù eus o rener-meur (Pa c'hellent kavout unan) **Brytenwealda**, rener Predeniz... O emrenezh, zoken, a oa bet roet dezho gant ur jeneral roman, Aëtius, en hevelep doare ma oa bet roet o hini d'ar Vrezhoned ha da « Dud an Hanternoz » gant Maximus. Ha ne voe ket argaset ar Vrezhoned da Gembre, evel m'en doa hon istorour Gweirydd ap Rhys hen diskouezet ken abred ha 1872...

18

Peogwir ne rae diforc'h ebet etre Brezhoned ha Predeniz eo e treuzkomprenas Gweltaz al lizher da Aëtius, o treiñ « gemitus Britannorum » gant « klemmoù ar Vrezhoned », e-lec'h « klemmoù Predeniz », Predeniz o vezañ proviñsidi ar Vreizh romanek, da lavarout eo Brezhoned koulz hag Hensaozon. « Tri bloaz a-raok (al lizher a voe kaset da Aëtius e-pad e drede konsulerezh, e 446 goude H.S.), evel m'hen desker digant testoù eus an amzer-se, e oa aet dija lodoù eus an enezenn, moarvat ur c'hornad bras er c'hreisteiz d'an Humber, **in dicionem Saxonum**, dindan renerezh an Hensaozon ». Diaes e oa enta d'an nebeut Hensaozon (menegiñ a ra Gweltaz div dilestradeg, traken) deut war skoazell « Breizhiz keizh » gounit war ar Vrezhoned ur vro a oa, abaoe ur pennad amzer mat, **in dicionem Saxonum**.

Pegoulz, avat, e vefe deut an Hensaozon er vro ? N'hen meneg ket A.W. Wade-Evans. Marteze a-walc'h e vefe diskennet o bagadoù en enezenn en hevelep mare hag ar Gelted, oc'h aloubiñ an darn reterañ eus ar vro, tra ma oa ar ar Vrezhoned o kemer an darn all.

Nemeur a lec'h a chom din bremañ da gomz eus pennad R.S. Thomas, « Some Contemporary Scottish Writing ». Dedennet eo R.S. Thomas gant an oberennoù e scots, dreist-holl, hag en emsav scots e klask ur skouer evit e vro. An hevelep kudenn a zo amañ e Breizh : daoust ha gallet e vo, daoust ha mat e ve, sevel ul lennegezh vreizhat e galleg pe romaneg Breizh-Uhel ? Pezh a ra nerzh an emsav lennegel e Scots eo ma'z eus ur barzh bras, hag un den meur, o reiñ lañs dezhañ

: Hugh Mac Diarmid. Pennañ ali Hugh Mac Diarmid d'e ziskibien (un ali mat evidomp-ni ivez) eo deskiñ un niver yezhoù ha dastum ur ouiziegezh vras, e doare da seveniñ c'hoant J.R. Lowell : « yezh ar bobl e genou an den desket ». Da reiñ un tañva eus labour ar skrivagnerien-se, setu ur pennad eus ur varzhoneg gant Sorley Maclean, troet diwar ar gouezeleg gant Douglas Young, ma c'hello Breizhiz prizañ ennañ hesonerezh ar scots :

My een are nae on Calvary
Or the Bethlehem they praise,
But on shitten back-lands in Glesga toun
Whaur growan life decays,
And a stairheid room in an Embro land,
A chalmer o puirtith and skaith,
Whaur monie a shilpet bairnikie
Goes smoorit doun til daith.

19

Ur pennad, eus ar re bouezusañ ivez, o kemenn krouidigezh ur strollad, dindan renerezh arc'heskob Kembre, Dr. T. Gwynn Jones ha Sir Wynn P. Wheldon, evit dastum hengounioù ha kredennoù-pobl Kembreiz.

P. DENEZ.

(WALES, Ty Gwyn, Llanybri, Nr, Llanstephan, Carmarthen, South Wales ; trimiziek ; 11/- ar c'houmanant-bloaz.)

Bro an torgennoù, Sir Drefaldwyn

Re bell deoc'h da welout

Ar preñv, ar vreinantez hag ar c'hontron lart

O krignat ar c'hig war an eskern moan,

Emañ 'n deñved o peuriñ e Bwlch-y-Fedwen,

Strewet ez-romantel en doare boas

War ur skramm moal a reier noazh.

Re bell deoc'h da welout

Ar man hag ar c'hinvi en oaledoù yen,

Al linad o kreskiñ a-dreuz an dorioù freuzh,

Goulo eo an tiez e Nant-yr-Eira ;

Toull-didoull an toennoù soulet gant brizh-heol

Hag ar parkoù distuz o tirienniñ gouez.

Re bell, re bell da welout

Skoelfder e lagad hag ar c'hleñved stag

Oc'h ober e reuz 'dan an dilhad pilh,

'Z eus c'hoazh ur merour e Bryn-y-Fawnog,

Ret e skeudenn skrijus da glokter an daolenn,

An awen war ziwan maro-mik en e vrusk.

R. S. THOMAS

(tr. P. DENEZ)

Kelaouennoù ha Kelc'hgelaouennoù e Bro-Gembre

Setu amañ da heul ur roll - diglok marteze - a ziskouezo mat e pe stad emañ ar wask kembreat.

1. E saozneg hepken.

Western Mail and South Wales News, pemdeziek ,(Tori)

Evening Post, pemdeziek (Tori)

Weekly Mail, sizhuniek (Tori)

Herald of Wales, sizhuniek (Tori)

Welsh Nationalist, miziek (Broadelour)

Wales, trimiziek (Broadelour)

Young Wales, trimiziek (Urdd Gobaith Cymru)

Welsh Review, trimiziek

Aberdare Leader, sizhuniek

2. E kembraeg hag e saozneg.

An hol anezho sizhuniek :

Carmarthen Journal

Welsh Gazette

Cambrian News

Teify-Side Advertiser

Western Telegraph

Llanelli Mercury

Llanelli Star

Gazette (Abertawe)

Amman Valley Chronicle

Y Rhedegydd

Yr Herald Gymraeg

3 E kembraeg hepken.

Baner ac Amserau Cymru, sizhuniek (broadelour)

Y Cymro, sizhuniek (frankizour)

Y Dydd, sizhuniek

Y Tyst, sizhuniek (Dishualidi)

Y Goleuad, sizhuniek (Metodistiz Kalvinat)
Y Ddraig Goch, miziek (broadelour)
Cymru 'r Plant, miziek (Urdd Gobaith Cymru)
Yr Aelwyd, miziek (Urdd Gobaith Cymru)
Y Llan, miziek (Eskobelourien)
Y Cyfaill Eglwysig, miziek (Eskobelourien)
Tywysydd y Plant, miziek (Dishualidi)
Yr Eurgrawn, miziek (Ilizourien Vetodistat)
Y Llenor, trimiziek (lennegel)
Y Fflam, trimiziek (lennegel-broadelour)
Yr Haul, trimiziek (Eskobelourien)
Yr Ymofynnydd, trimiziek (Unanidi)
Efrydiau Athroniaeth, trimiziek
Y Wawr, trimiziek (broadelour, evit ar studierien).

(Roll kaset gant L. T.)

Ganet en e Gwyndrig Uchaf, Betws-yn-Rhos, e kontelezh Dinbec'h e 1871. E dad 'oa pastor. Skoliet e voe Tomas e Coloen hag e Dinbec'h, hogen e-unan penn e c'hounezas an darn vrasañ eus e zeskadurezh. Dleout a ra kalz ivez, war a laver e unan, da Emrys Ap Iwan, marvet e 1906.

E-pad un neheut bloavezhioù e labouras evit kelaouennoù e Kernarvon, en Herald Gymraey, da skouer, ma voe komis-bras Daniel Rees (Sell, Jaffrennoù, Eñvorennoù Yaouankiz, p, 128). Kemer a reas ur garg el Lenndi Broadel en Aberstouez. Ober a reas kentelioù er skolaj diwar-benn lennegezh Kembre. E 1920 e voe anvel da Gelenner. E 1937 (Gwalarn Gouere-Eost 1937, Nos 104-105), e voe torret Kador al Lennegezh Kembraek e Skol Veur Aberstouez, dalc'het gant T. Gwynn Jones, war zigarez, a lavarer, n'oa mat nemet d'ober emrenerien.

E 1902 e c'hounezas ar gador en Eistezvod Vroadel Bangor gant e odl « Ymadawiad Arzur » (Tremenvan Arzur).

Advoulet eo bet e oberoù, komz-plaen ha barzoniezh gant Hughes a' i vab, Wrecsam :

Manion, 1932,

Cymeriadau, 1933,

Caniadau, 1934,

Adstudiaethau, 1936.

Beirnadiaeth ha Myfyrdod, 1935.

YEZHOU

1922

Bez' e oar kement hini en deus desket un tamm eus istor ar bed, e sell ur pal bennak, ez emdro ar yezhoù, evel pep tra all, ez eont da fall ha da get. Lennet em eus en ur gelaouenn c'hallek, un dro 'voe, ez oa unan eus mennadoù ar brezel bras en Europa « peurbadusaat ar galleg ».

22

Ne ve ket dereat d'un den a vez a-wechoù a-gor da ganañ « O ra bado ar yezh kozh », lavarout un dra bennak dizoujus diwar-benn kement hini all a vennfe peurbadusaat ur yezh - Komz a-zivout ar pezh a ran dre ma toug kudenn ar yezhoù d'ur poent ma c'heller pegañ enni hag he dibunañ. Ha gallout a c'heller « peurbadusaat ur yezh » hag un dra vat a vije kement-se mar gallfed ? War dachenn ar poell glan, n'hell bout entremar ebet na ve ar respont nemetañ d'an daou c'houlenn : « N'heller ket » ha « ne vefe ket ».

En un doare bennak emañ pep yezh o vervel bemdez, ha padal n'eus ket ur yezh a ve marv-mik kennebeut... rak pa davo gerioù ur yezh, e vez he c'hevreadurezh oc'h ober droug d'ar yezh he didroado. Buhez ur yezh a bad keit ha ma venn d'he c'homzerien, ha mennout a reont kement-se peurvuañ keit hag e venno re all he lazhañ. Graet o deus ar Saozon o gwellañ diagent da lazhañ ar C'hembraeg, dre armoù ha lezennoù, dre voaz ha kredenn ha skol, ha c'hwitet o deus. Hiziv kalz a Gembreiz eus ar renkad bilen, pe anezho sklaved dre natur, a zo anezho gwashoc'h enebourien d'ar C'hembraeg eget ar Saozon. E gwir, Saozon uhel-ouenn ha gouiziek a zo eus mignoned bennañ ar C'hembraeg, war a ouzon-me. D'ar mare-mañ emañ renerezh Bro C'hall ganti o klask lazhañ ar brezhoneg, hag en abeg da se emañ o treiñ ur renkad a Vreizhiz a hanterc'hallekajod endeo, da

harperien virvidik ar yezh kozh, ha zoken Gallaoued rik e Bro-C'hall hec'h unan en hevelep doare. Sed aze lod eus an traoù a voe plantet e natur mabden gant ar galloud a zo a viskoazh.

Evidon-me, karout a rafen gwelout ur yezh o tont da yezh voutin, lakaomp, e Kuzh-Heol Europa e doare ma komprenfe ar pobloù an eil eben. Hogen ne dalvezfe ket ur yezh vroadel e sell a se. Lakait en ho penn dibab ar C'hembraeg evit-se, hag hen deskiñ e skolioù ar broioù all evel yezh voutin. Daoust ha ne vefemp ni ket, Kembreiz, raktal kilheien kintus dic'houzañvus a vije kasaet gant pep den dizalc'h dre ar bed ? Ur yezh oberiataet, evel an Esperanteg, a zo ar benveg nemetañ ha dezhañ chañsoù da ober berzh evel yezh voutin, hag hep mar ebet, ez eo an Esperanteg unan eus taolioù-kaer dibaotañ ha meulusañ o fal ijinet biskoazh gant spered mabden. Ma vefe ur vro oc'h asantiñ da zeskiñ he yezh hec'h unan hag an esperanteg en he skolioù d'an holl, e kredan e tougfe frouezh, a-benn ugent vloaz pe nebeutoc'h, peadra da lakaat anat d'ar broioù all e c'hell tud a-youl vat mestroniañ zoken diaester ar yezhoù hep treitouriñ frankiz ur vroad. N'eus ket a harz d'ar pezh a c'hellfe huñvre mat-dreist an Dr Zamenhof.

23

Prest e vefen da anzavout evit va lod-me 'n'eus ket nemeur a gemm pe yezh a gomzo un den, pegwir ne deo ket er yezh emañ ar c'hevrin kement hag er pezh a vezo hag a ouezo un den. Envoriñ a ran mat va mestr kozh Emrys Ap Iwan o lavarout ur wech : « Gwelloc'h e kavfen klevout va c'henvroiz o komz Saozneg uhel eget kembraeg izel ». N'oan ket evit kompren mat d'an ampoent pehini oa e soñj, hogen gouzout a ran mat pelloc'h. Neizheur edon o lenn ul levr kembraek, ul levr plijus a-walc'h, ha kalz a draoù da veuliñ ennañ. Sed amañ, avat, ur frazenn anezhañ etre kantoù a re all :

« Wel, y mae young... a Miss... yn engaged couple ag sydd yn hawlio ein congratulations gwresoca, gan fod y match yn ôl pop hanes yn pure love affair, a handsome fortune y tu cefn i hynny ».

« Bremañ ez eo X.X.X. yaouank hag an Dimezell Y.Y.Y. ur c'houblad danvezioù pried a c'houlenn hor gourc'hemenoù birvidikañ, dre m'eo an dimezi evit pep seurt abegoù un dra a garantez rik, gant ur peadra a-bouez ouzhpenn da se ».

Kalz gwell em dije karet kavout Saozneg un tammig digemmeskoc'h. Mar deo aet ar c'hembraeg d'ar stad-se, an dra boellek da ober a zo e zilezel. Hogen hag aet eo ? E-touesk lod eus ar renkadoù tud, hep mar, ez eo aet, ha padal e toufen ne gredfe ket oberour an dilinennañ a-us komz morse Saozneg evelhen :

« Well,... ifanc and Miss... are a cwpl wedi eu rhwymo i briodi who demand our heartiest llongyfarchiadau, as the dewis, according to all accounts, is a mater o gariad with an eithaf ffortun besides ».

Perak ne gredfe den komz kembraeg a seurt-se ? Dre ma soñjer, diouzh ret, e vije un dra mezhus. E seblant bezañ tud o krediñ ez eo ar pouez-mouezh an dra mezhus nemetañ e keñver ar yezh. Evit va lod va-unan, e soñjan ez eo ar pouez-mouezh kembraek kerkoulz hag ur pouez-mouezh all. Hogen ne deo ket un taol-kaer da vegañ lorc'h diwar e benn, keit ha ma ouzon, komz ur yezh bennak en un doare divalav ha truilhennek. Mar deus ur renkad a Gembreiz a zo bet desket evelse da zougen bri d'ar saozneg ha da zisprizout ar c'hembraeg, neuze ez eo tremen poent da c'houlennata nann diwar-benn an doare da zeskiñ ar c'hembraeg kement ha diwar-benn an doare da zeskiñ ar Saozneg e Kembre. Petra a c'heller gortoz diouzh ur bobl a zesker en em zisprizout hec'h unan ?

24

Ha sed aze stad Kembreiz abaoe un nebeud kantvedoù, ne deo ket ret soñjal dinac'h, hag ez eo an testenì un dra re boanius he mezhus zoken evit he displegañ. Emañ o vevañ hiziv kantadoù a dud a zalc'h soñj da vout bet kastizet evit komz kembraeg er skol. Daou heuliad a zeue diwar-se : e troas lod da sklaved ha lod all da emsavidi tra ma vezint. Pa voe krouet ar skolioù izel, ar skolioù-

etre hag ar Skol-Veur ez oa c'hoazh abred a-walc'h anezhi da ober war dro an dra, hogen ne voe ket graet. Stagañ a reer pelloc'h da wareziñ an traoù kembraek ha se gant kement a ziuver kempouez hag a ziskouezjod kent ouzh o disprizout. Ez eo ober ur gentel d'ur c'hlas kembraek war un danvez kembraek e kembraeg un dra ken reizh, d'am soñj-me, ma vije iskis-dreist fougeal diwar-benn se. Un dra all dres ken iskis a vefe ober ur gentel zoken war ar c'hembraeg e kembraeg d'ur c'hlas dezhi un anaoudegezh re ziglok eus ar yezh-se evit kompren ar pezh a lavarfed dezho. Bet em eus, ur wech a voe, ul lizher digant un den a Vro-Bohemia o c'houlenn hag e skolajoù Kembre e raemp kentelioù war hep seurt danvez e Kembraeg ; daoust ha tabutal hag en em gannañ a raemp gant kargidi an tier-post hag an hentoù-houarn mar ne respontent dimp e kembraeg. Ret e voe din lavarout, evel just, ez oa ar saozneg yezh-stad Bro-Gembre, he Skol-Veur, he zier-post, he hentoù-houarn ha pep tra heñvel a-ziabarzh, hogos pep tra nemet he buhez voutin hag he relijion evit ul lod.

Mar deus un enklask da vezañ da istor deskadurezh ar C'hembraeg, e weler ez eo un enklask a dlefe bezañ da istor an deskadurezh ha nann d'an deskadurezh kembraek hepken. Spi am eus n'eus ket ganin menozioù gouez war an dra - war an hevelep pazenn e lakaan pep yezh. Lec'h ma komzer div yezh en ur vro, e tlefe an div bezañ war un hevelep tachenn kement-ha-kement er skolioù, ha pep kelenner ha pep kargiad ken akuit war an eil hag an all. Mar trofe da fall unan eus an div hag i war an hevelep pazenn e pep keñver, sed aze un dra na hellfed ket klemm nemeur en hec'h enep. N'hellfed nac'h lakaat an div yezh war an hevelep pazenn nemet dre anzavout ez eo komzerien an eil mistri dre natur ha komzerien an all sklaved dre natur.

Kavout a ra lod abeg en etrevroadelourien dre ma ne vennont ket ur « yezh-natur » evel yezh voutin, ha lavarout ez eo o fal lazhañ ar yezhoù broadel. Ez eo ar Saozneg, emezo, endeo ur yezh ec'hon dreist he harzoù, ar pezh ne deo ket aes e nac'h. Daoust da se, ha daoust ma c'hallfed ivez lavarout kalz diwar-benn se, evel ez eo aes da zeskiñ, ouzh he c'henveriañ gant ar C'hembraeg, ar Germaneg pe ar Galleg, hag e kinnig ivez ul lennegezh uhel, ne vennfe ar C'hallaoued nag an Alamaned na re all a vroadoù Europa anezhi da yezh voutin.

25

Ha ne deo ket ragvarn glan eo kement-se kennebeut. Ne dlefed gouzañv ur vroad da vezañ e lec'h ur mestr war ar re all. Setu penaos da yezh voutin ne vefe nemeur a chañsoù nemet, d'ur benveg na vefe tra nag an eil nag eben. E sell ar pal-se ar benveg an aesañ e zeskiñ hag e gomz a vefe ar gwellañ. Setu perak emañ va-unan a-du gant an Esperanteg. E tesk un den e yezhadur en un eur pe ziv hag e gomz aes a-walc'h a-benn un nebeut sizhunioù.

Ne deo ket menozioù un den eo kement-se, hogen klozadurioù dastumet, goude enklask resis, gant tud boas ouzh doareoù reuzeudikañ kudenn ar yezhoù. Ne deo ket evito e komz an etrevroadelourien. Klask a reont mestroniañ o zemzioù-spered ha dastum c'hoarvezadennoù, deskiñ a reont muioc'h a yezhoù eget rumm all ebet. Skrivañ a reont an eil d'egile a bep penn eus ar bed da ober enklask war istor ar yezhoù, al lennegezhioù, ar boazioù, ar mennadoù. Bet em eus an eurvad hag ar blijadur, a dro da dro, va-unan da gas diskleriadurioù diwar-benn ar C'hembraeg hag e lennegezh da genskriverien a Vohemia, Katalonia, Estonia, Hungaria, Japan ha Slovakia, ha bet em eus eus va zu diskleriadurioù na gaver ket el levrioù a-zivout yezh, lennegezh ha boazioù broadel digant pep unan eus ar genskriverien-se ha re all. Un dro e reas unan anezho ur goulenn diwar-benn ar C'hembraeg digant e gelenner yezhoniezh en e glas-skol. E lavaras hemañ ez oa ur yezh evel-se en ur c'hornad a Vro-Saoz kent, nemet ez oa marvet abaoe kantvedoù. Eilgeriañ a eure ar studier da gement-se hag e reas d'ar c'hlas un displegadenn o souezhas meurbet diwar-benn ar c'hembraeg hag ar bobl ouzh e gomz. Padal, ne venne ket ar c'helenner, « karevro »-dreist, krediñ tamm eus kement a lavare, daoust na ouie-eñ tra ebet war an dachenn hec'h-unan.

Mar dem skignfe ar vreudeuriezh-se, a stroll endeo miliadoù niverus a dud a volonteiz vat eus pep rann eus ar bed, neuze ur benveg d'ar pobloù d'en em gompren kenetrezo a vefe eus ar yezh voutin, ha ne waskfe yezh vroadel ebet, en doare m'emañ ar yezhoù broadel o waskañ an eil an all. Ur benveg a vefe da ren kenwerzh ha politikerezh ha da embann degouezhadennoù a-bouez evit an holl vroadoù.

Ha kaout ur yezh a seurt-se eo chañs nemeti ar broadoù bihan. Lakaomp e c'hounezfe an esperanteg al lec'h-se - ha ne deo ket kement-se dic'hallus - neuze e teskfed, e skolioù Kembre div yezh, ar C'hembraeg, yezh dezho o-unan Kembreiz hag an Esperanteg, ar yezh voutin. E Kembraeg e vije pep tra e Kembre da c'houde, he lennegezh, he relijion, hec'h aferioù, he diduamant - e vefe Kembre Kembraek dre natur, hep bezañ ur rann eus he foblañs mac'hom hag ar rann all sklav, ha ganti, evit-se, ur benveg a vefe talvoudus e pep bro all.

26

E Bro-Saoz, e teskfed Saozneg hag ar yezh voutin, hag an hevelep urzhiadur a vefe anezhañ e pep bro a vefe sevenaet ha diragvarn a-walc'h da asantiñ. Neuze e vefe ar yezhoù broadel dres war an hevelep pazenn kenetrezo. Reizh eo dimp-ni karout yezh hon tadoù hag hor mammoù, diwar gement abeg a zo. Hi eo ar yezh wellañ d'hor meno hag ivez an hini wellañ evidomp. Ken reizh eo d'ar re all ober an hevelep tra ha ni. Avansetoc'h ez eo avat d'ur vroad taeriñ ez eo he yezh dezhi a zo ar gwellañ er bed, hag ar broadoù all o taeriñ hevelep tra. ? Bez' ez eus d'ar C'hembraeg perzhioù mat, na gaver ket d'ur yezh all a ouzon-me petra bennak a vez laret. Bez' en deus gwanderioù ivez. Pa vije-eñ, avat, ar yezh wellañ er bed e pep feur, n'hellfemp-ni biken gounit d'hor c'hredenn pobloù all a zo ken sot gant o yezhoù o-unan ha ni gant hon hini. Mar deus gwanderioù d'ar c'hembraeg evel ma'z eus da bep yezh, ne nac'hfe ur C'hembread enorabl e yezh hep nac'h e zenelezh ivez.

Lavarout a ra ar vurutellerien n'eo ket ur yezh-natur eo an esperanteg. Ne deo ket natur kennebeut lunedoù, ur rezad-dent, nag ur c'horerez da dreiñ vioù yer e poñsined, ha padal ez eo gwirheñvel na nac'hfe ket ar vurutellerien ober o mad eus an traoù-se. E gwirionez ne deo ket an esperanteg tamm muioc'h al labour-arz eget an hini a garor eus ar « yezhoù-natur » a zo anezho bennegoù lennegezh ha gouiziegezh, nemet ez eo eñ hesonoc'h hag aesoc'h da zeskiñ eget nikun anezho. Betek-hen, sed amañ ar c'hinnig klokañ a ijinas empenn mab-den da glask dibunañ kudenn ar yezhoù. Evidon-me va-unan, ne garfen diskleriañ ne deo ket empenn mab-den e-unan e-diabarzh dalc'h an Natur, ha ne deo ket traoù « naturel » e daolioù kaer dezhañ ivez.

T. GWYNN-JONES

Troet diwar ar c'hembraeg gant F. E.

AR PAOTR FALL

Penaos e c'hellas dont betek toull ar vengleuz hag eñ ken meyv, ne deo ket aes da c'houzout : met eno edo, er riboul a oa o toullañ abaoe meur a viz.

« Ur paotr fall on-me », emezañ gant tristidigezh, en ur zerc'hel e staon poazh dindan ur stivell vihan a rede diouzh ur faout er roc'h.

N'oa nemet pemp eur diouzh ar beure, ha n'oa nikun en toull estregetañ. N'en defe ket dleet e-unan bezañ eno c'hoazh, nemet, pa zihun un den diouzh ur c'houk meyv war lez an hent, araok ma tigousk ar bed, ez a, diouzh natur, d'al lec'h a gar ar muiañ. Ha paradoz Harri Huws oa ar riboul e goueled Mengleuz ar C'hoad.

Goude stekiñ kalet e benn en ur glask distanañ e staon, e c'hourvezas war ur bern kailhos. « Ur paotr fall on-me », emezañ un eil gwech, startoc'h eget kent, hag er vunutenn war-lerc'h ez oa o kousket, e vezventi kuit.

Edo tost divadaouet, pa zeuas ur c'hrennard pemzek vloaz d'ar riboul gant ur c'houlouenn en e zorn. Kanañ a rae war lein e vouezh evel ma ra ur c'hrennard diouzh ar beure ; pa welas, avat, e gompagnun war ar bern en e zilhad gwellañ, e teuas ur goulouenn war e zremm laouen.

« Bet out bet adarre outi, neketa ? » eme ar c'hrennard gant rebech.

« Bet on bet, Dik Vihan », a respontas Harri, gant ur son keuz en e vouezh.

« N'eus ket dit tamm mezh ac'hanout da-unan ? »

- « Eo, va faotr ».

- « Gwashoc'h out eget ur porc'hell ».

- « Hag ez on, neketa »,

- « Out, feiz avat. Kae d'ar gêr da cheñch dilhad. Roget ec'h eus da chupenn. Da vamm a vo e kounnar ruz ».

- « E vo, neketa ? »

- « Hag e vo. Kae en da hent, ha hast afo dont en dro ».

Harri ha mont; en ur barañ e zaoulagad war al lagadenn sklerijenn a ziskoueze dezhañ genou ar riboul. Met n'oa ket aet da zek metrad pa glevas un trouz evel trouz un c'hren-douar en ur bed all, hag e krenas ar riboul evel pa vije o tiskenn e tammou en dro dezhañ. Sklaeraat a reas e empenn raktal, ha tan a zeuas en e zaoulagad. Met n'helle ket gwelout al luc'hedenn vihan a oa o c'hoari ken drant ur vunutenn araok. An disac'hadur en doa he spontet kuit en ur lezel Harri ha Dik da brizonidi er riboul du.

En ur c'hwitellat, e tistroas Harri betek Dik, hag ez adenaouas ar goulou en doa ar c'hrennard lezet da gouezhañ en e spont. Neuze, ez eas war-raok da c'henou ar riboul, gant Dik o krial war e seuliou.

Gallout a ra ur mengleuzier, dezhañ skiant-prenet, barn ment un disac'hadur diouzh e drouz, hag Harri en doa merzet ez oa da nebeutañ pemp mil a donelloù etrezañ ha sklerijenn an deiz. Met ne soñjas ket er marv. Daoust ha n'oa ket ken yac'h hag ar roc'h a oa o tizezañ tamm-ha-tamm e genou ar riboul ?

Skeiñ a reas warni ur wech, div wech, gant e vorzhol. Ken yac'h oa hag ur c'hloc'h... ar roc'h wellañ a welas abaoe meur a zeiz. Met ret e vije dezhañ he drailhañ. E vije dezhañ he zoullañ en he c'halon evit ma c'hallfe he zarzhañ, pa zeufe e gen-vengleuzierien d'o dieubiñ eñ ha Dik.

Ha dont a rafent e poent, avat ? Troc'hañ a reas un tamm butun hag e lakaat gant aked e korn e veg. Ya, ha dont a rafent e kentel ? Sed aze a oa ar gudenn. Pet a zevezhioù a gemerfe dezho skarzhañ pemp mil a donelloù... nann, c'hwec'h, n'oa ket peurechu an trouz. Ha gallout a rafent hen skarzhañ a-benn eizhtez ? Mar labourfent deiz ha noz... hag e rafent kement se evit Dik Vihan - e c'hellfent ober.

« Harri ! »

« Ya, Dik Vihan ».

- « Gra deomp mont kuit ».

- « Mont kuit, va faotr-me ? »

- « Ya. N'hellomp ket mont, Harri ».

- « E c'hellimp, dizale, pa loc'hint ar pleg-mañ ».

- « Met c'hoant am eus da vont bremañ, Harri. N'helli-te ket e loc'hañ-te ? Punt ».

- « Ne dalv ket, Dik ».

- « Me da sikouro-te. Bremañ punt eus da wellañ. Unan, daou, tri. Perak ne buntez ket, Harri ? »

- « Puntañ a ran. Sed aze te. E loc'het hon eus-ni un tammig bihan. Aesoc'h e vo dezho e loc'hañ warc'hoazh, bremañ ».

- « Warc'hoazh, Harri ! »

- « Nann, fenozh eo e soñjen ».

- « Met n'eo ket loc'het ur meudad, Harri. Me 'dou ne deo ket. Ne soñj ket dit e c'hellimp mont dieub fenozh ? »

- « Eo, sur mat ».

- « Harri ».

- « Ya, Dik Vihan ».

« Ne dlefen-me ket pediñ ? »

29

- N'ouzon tamm da betra e talvo, te' wel ».

- « Met, sur int da zont betek ennomp. Va zad n'am lezo ket da vervel. Lavar ne varvin-me ket, Harri. Marteze e vije gwell din-me pediñ. Sur int da zont amañ, neketa ? Pelec'h emhout-te, Harri ? Na da ket da vont kuit. Selaou ! Emañ unan bennak o tont ».

- « Ez eus, amañ e vezint dizale. Ni a zo o vont en-dro d'hol labour. Deus. Goustadik. Pelec'h emhout-te ? War an douar ? -

- « Ya, Harri ».

- « N'en em santez ket iskis ? »

- « Iskis ? »

- « Ya, ponner, na petra 'ta ? »

- « Un tammig bihan ».

- « Azez neuze. Sed aze te. Me zo 'vont da glask ur gouloù all. Pelec'h emañ da voued-te ? »

- « Dindan va chupenn-me ».

- « Un debrer mat out, va faotr. Chwec'h tamm bara hag amann, un darn mat-tre a fourmaj, ha vioù ! Te 'zo ur julod, Dik ».

- Mamm eo he deus o lakaet aze. Laret a ra ne don ket kreñv, kreskiñ re. Ne varvin ket, neketa, Dik ? »

- « Nann, ne gredan ket ».

- « Gallout a ran debriñ bremañ ? »

- « Nann, ket ur begad ».

- « Perak ? »

- « Ret dimp-ni labourat 'doug an noz da vezañ barrek en abeg d'an amzer hon eus-ni kollet bremañ... A drugarez Doue, ez eus butun ganen... Pelec'h emañ da dê-te ? »

- « N'eus ket ganen a dê, Harri, netra nemet laezh livrizh. Mamm o lare ne don ket... »

- « Laret ec'h eus dija. Ro da bicher din. E vo suroc'h war ar stal amañ. Ha gallout a ri-te tapout betek ennañ ? »

- « N'hellin ket, Harri ».

- « Ne vo ket barrek ar razhed da vont betek ennañ bremañ. Gwelloc'h e kavont c'hoazh laezh eget fourmaj ».

- « Met n'hellont tamm ebet dantañ a-dreuz d'ar pod, Harri ».

- « Ne da ket da laret diotach ! Barrek int da zebriñ ar garreg amañ pa vez warno c'hoant boued ».

Stagañ a reas Dik da grenait

« Marteze hon debrint-ni, Harri ».

- « Ha marteze o debrimp-ni ivez. Gouzout a reont kement-se mat-kenañ, te' wel, hag e chomont pell. Arabat dit kaout aon razo ».

- « Harri ! »

- « Ya, va faotr-me ».

30

- « C'hoant kousket am eus. Ha gallout a ran kousket amañ ? »

- « Kousket ? Galli, evel ma vijes-te er gêr ».

- « Met, ha dihun a rin-me da c'houde ? »

- « Hag e ri, eveljust ».

- « Ha sur out-te n'hellomp ket mont kuit ? N'ec'h eus ket puntet a-zevri, Harri. Sur on n'ec'h eus ket graet. Soñjal a ra din e kouskin. Hag o vont da gousket emañ ? »

- « Nann, ket bremañ. Re abred, Dik, re abred. Ha riv ac'h eus ? »

- « Un tammig bihan ».

- « Ez oan-me o soñjal. Gourvez ha me ' lakaio va chupenn warnout-te... Nann ! n'en eus-me tamm ezhomm anezhi. Sed aze te, hag aes emañ ? »

- « Aes-tre, Harri ».

Mont a reas pemp munut e-biou, hag ez oa Dik Vihan kousket c'hwek. Ha dre ma teue e hun da vezañ ponneroc'h, e kile an neuz spontet diwar e zremm louet. Sellout a rae Harri start outañ en ur chaokaat e vutun ken buan ha ma c'halle.

« Me a vije da-kenañ ganen ma vije bet ar paotr-mañ en tu all d'ar c'hozh disac'h-aze », emezañ « Alo ! na tost ez out-te deut, loudour ? Kae d'az toull, pe, mil gutez ! me ' dorro dit askorn da gein... Del ! Sed aze te, laret em eus dit-te... N'eus forzh, me ' gaso-me keloù d'az tiegezh buan a-walc'h ».

Kregiñ a reas en e vorzhol, ha, gant ar gouloù en e zorn all, ez eas da glask war dro ar peurrest eus ar razhed. Ouzh skleur gwan ar gouloù e wele un all o tourtal direol ouzh tor ar riboul en e striv da dec'hout diouzh ar sklerijenn. Ur gwic'h souden a dorras ar sioulder. Dont a reas muioc'h a razhed war wel, hag a-benn un hanter eur ez oa ur renkad korfoù war leur ar riboul.

« Sed aze c'hwi », eme Harri. « Ez oc'h-c'hwi gwelloc'h en tu all eget ar paotr ha me. Poan ebet, bed ebet. Ha bremañ da dud ar c'hañv ».

Hag e kemeras un darnig fourmaj eus pod boued Dik, hag e lakaas war un tamm karreg en ul lec'h hewel ma n'helle ket ur razh end-eeun tremen hep e welout. Abalamour da Zik en doa lakaet start en e benn o c'has holl da get.

Dont a reas razh war-lerc'h razh diouzh an deñvalijenn, en ur venel a-sav a-barzh un nebeut meudadoù diouzh ar boued. Harri o spie dibaouez, ha n'helle dizoleiñ perak e krene o c'horfoù tra m'edo o daoulagad ken fuloret. Met n'hell ket un den kompren ur razh. Ret dezhañ o lazhañ gwitibunan.

31

Diskenn a reas ar morzhol war ur razh da heul un all hag e varve souden an daoulagad entanet. Ha ken mat e reas ar morzhol e labour ma n'oa ket ur wic'hadenn o kemenn d'ar re vev n'oa kement-se, holl nemet ur pech marvus nevez.

Ha dizale e teuas ar razh diwezhañ. Gouzout a ouie Harri eo an hini diwezhañ e oa dre m'oa ur razh mac'hagnet. Ha ret eo d'ur razh mac'hagnet menel war-lerc'h bepred. En em stlejañ a rae gant poan a-hed ar c'hailhos, hag un eilenn e truezas Harri ouzh ar « c'hrouadur emzivat »: Met gallout a ra ur razh mac'hagnet zoken ober kalz a zroug hag e tiskennas ar morzhol ur wech ouzhpenn.

Tri devez a oa aet e-biou. Krenañ a reas Harri ur c'houk ankeniet. Huñvreet en doa ez oa razhed marv o krignat e zremm. Spontus e oa ar boan. Stekiñ a reas outañ gant e vizied hag ez oa gleb. N'helle ket kompren tamm ebet. Enaouiñ a eure ar gouloù. Ya, gwad eo ez oa. Goloet holl oa e zaouarn gantan, ha redek a rae diouzh e jod. Ha sailhet o doa war Zik Vihan ivez ? En em stlejañ a reas war e zaouarn hag e zaoulin betek ennañ. Ne glaskas ket sevel, dre ma oa un dra bennak o larout dezhañ n'helle ket, ez oa re wan. Met n'helle ket kompren ar gwander. Nann, kousket oa Dik, ha n'oa ket a wad war e zremm. Eston ! Ruzañ a reas en-dro d'e gorn hag e lakaas e zorn e kreiz ar gwad. Chom a reas a-sav. Moarvat eo e wad ez oa ? Ya, ha gwan edo dre m'en doa e gollet. Met penaos hen kollas ? N'helle tamm ebet kompren an dra, hag e-pad un nebeut munutennoù e sellas sebezet ouzh ar gwad sonnet. Diveret en doa diouzh un tamm karreg. Kompren a rae bremañ. Kousket en doa, e benn war ar garreg, hag ar c'horn begek en doa sanket en e gig.

A-nebeudoù e teuas en-dro e spered dezhañ, hag ez adkavas e zivesker un tammig eus o nerzh. Kilañ a reas ar boan eus e zremm ha mont da lec'hiañ en e stomok. Soñj a zeuas dezhañ n'en

doa ket debret,... abaoe peur ? Un devezh araok an disac'hadur n'helle ket debriñ. Oc'h evañ 'oa bet e-pad ur sizhun : ha bremañ p'edo e vouzelloù o c'houlenn boued, en doa disoñjet edo e bod, en tu all d'ar garreg he doa troc'het ken kriz e zremm, leun a voued... Tapout a reas krog ennañ, digor e galon.

« Dik Vihan ! »

Hejañ a reas ar paotr gant teneridigezh.

Rimiañ a reas Dik e zaoulagad ponner, en ur sellout en dro dezhañ, souezhet.

« Gwelloc'h dit-te kemer un tamm ».

32

Kilañ a reas an neuz souezhet diouzh daoulagad Dik, hag e stages da grial.

« Ne dint ket deut c'hoazh ? »

- « Nann, va faotr ».

- « Met dont a raint ? »

- « Teuint, teuint. Del ».

- « N'eo ket va bara hag amann-me eo hennezh, Harri. Ha debret ec'h eus-te ? »

- « Ya, leun va c'hof, te 'wel ».

- « Ha gwir? »

- « Gwir eo ».

- « Dont a raint amañ hep dale, neketa ? »

- « Emaon ouzh o gortoz da bep munut ».

- « Gwell eo dit debriñ eta ».

- « Ket ur vruzunenn. Mar deo echu ganez, ni a lezo ar rest el lec'h-mañ. Kae en da c'hourvez bremañ. Me az tihuno pa zeuint ».

Lakaat a eure ar pod stok ouzh dorn Dik, e doare ma c'hellfe e santout mar plijfe gant Doue e tihunfe adarre. Diskleur e teve ar gouloù war ar roc'h, ha ne chome anezhañ nemet ur meudad. Harri a enaouas un all.

Edo Dik kousket ponner adarre, nemet e teue berroc'h war e anal da bep munut.

Klask a reas Harri mont en e sav. Un dra bennak a oa ouzh e hegasiñ. Trouz an dour o tiskenn diouzh lein ar riboul eo ez oa. Betek hen, n'en doa ket taolet evezh outañ, met d'an ampoent e rae trouz ur froud, hag e skoe eston war e skiantoù. Santout a rae ez afe da sod mar n'hen lakae da baouez, met ne loc'has ket ur meudad d'hen ober. Perak n'ehane ket ? Ez oa o vont d'ober. Dont a eure da vezañ gwanoc'h, gwanoc'h, betek ma paouezas mik. Hag ez en em roas Harri da gousket.

Ar pempvet deiz, e treuzas ul luc'hedenn a sklerijenn betek an deñvalijenn ; ha pa voe dieubet genou ar riboul, e teuas pevar mengleuzier e-barzh, goustad. Gouzout a ouient e teuent d'ur bez, ha n'oa ket ret hastañ. Hag un arvest doanuis a weljont. En ur c'horn, tennet gantañ e zilhad betek e zargreiz, edo Harri en e c'hourvez, hag ur razh marv en e zorn. En ur c'horn all, gronnet, eus kern e benn da sol e dreid, e dilhad Harri, edo Dik o ouelañ; gant daou bod boued goullou en e gichen.

« Tremenet eo Harri », eme unan eus ar wazed, en ur hejañ ar paotr fall. « Eston eo e ve marvet araok Dik Vihan ».

Met sellout a reas ouzh ar c'horf noazh hag an daou bod, hag e komprenas. N'oa ket eston, goude holl, met ar pezh a oa eston eo en defe ar pec'her brasañ er vengleuz roet e vuhez evit un all.

Pa zisoñjed, avat, e vezventi, e teue pep unan akord ez oa kement-se heñvel-poch ouzh Harri.

Dik TREVAN

troet diwar ar c'hembraeg gant F .E.

AN IWERZHONEG

gant O. Mac UILIS

Oscar Mac Uilis, un Iwerzhonad o chom e-kichen Dulenn, en deus pleustret war an danvez keltiek. Anvet eo bet da sekretour evit Iwerzhon er c'hendalc'h etrekeltiek dalc'het e Dulenn eus an 22 d'an 29 a viz Gouere. Moulet hon eus war an niverenn-mañ derou ur studiadenn savet gantañ diwar-benn gouezeleg Iwerzhon, Embannet 'vo ar peurrest en hon niverennoù da zont :

I. Kenlañ amzer an Emsav evit ar Yezh.

II. Ar Gouarnamnt hag ar Yezh.

III. An Emsav en deiz a hiziv

Emañ Oscar Mac Uilis o teskiñ brezhoneg. Evel ma c'hellor gwelout, ne zeu ket endeo fall gantañ.

Ar gouezeleg a zo anezhañ ur benveg lennegel abaoe ar 6vet kantved goude H.S. Diwar ar marevezh-kent ne chom nemet enskrivadurioù-mein teusk a-walc'h. An hir badelezh-se hag un hengoun-dre-skrid a zo ken ha ken talvoudus e-keñver al lizheregouriezh keltiek, o deus bepred miret d'ar yezh henlennegel ur stummadur hag un doare-skrivañ a oa lies gwech pell a-walc'h diouzh ar yezh komzet gant ar bobl.

Adalek an 12vet betek ar 17vet kantved, ha war an diwezh dreist-holl, d'ar maread ma voe savet dornskridoù talvoudus diouzh an druilh; edo ar yezh skrivet o kantren pell diouzh ar yezh komzet, hep ober re a van ouzh ar rannyezhoù a rae ar bobl ganto en Iwerzhon hec'h-unan hag ivez e Bro-Skos, pe Enez-Vanav.

34

Hogos, gant Tec'hadeg an Dierned e 1607, frammidigezh Bro-Ulad, ha brezelioù Kromwell, a zeuas kement a zrasterezh war o heul, ma oa kaset da netra ar renkad skrivagnerion ha madoberourion al lennegezh. Brezel adarre war zouar Iwerzhon e 1690-91 etre Gwilherm-Orañj ha Loeiz XIV Bro-C'hall. Paour-glez ha reuzeudik e voe lakaet ar vro neuze gant al lezennoù-kastiz hag e chomas ar bobl dizek e pep doare gant an hu warni, ha dibreder-kaer ouzh he yezh hag he gouenn. Tri remziad e padas an amzervezh spontus-se.

Koulskoude, en desped da bep tra, un nebeudig-tud a zalc'he c'hoazh da sevel barzhonegoù e yezh ar vro, hervez ur ventad-varzhoniezh diaes-meurbet - hag evelse e chomas damvev un tamm eus an hengoun. Hogen, e-kerzh an amzervezh-se ez eas timat an teir rannyezhañ brasañ eus Iwerzhon pep hini diouzh he zu, dre ma ne oa na skol na framm lennegel ouzh o reizhañ. Ouzhpenn-se, pep darempred a oa torret etre Iwerzhon, Skos ha Manav.

E-tro dibenn an 18vet kantved, e krogas ar vro da adkavout he finvidigezh, nemet e oa diwar lusk ar saoznegerien desket hag ar renkad a rae war-dro ar c'henwerzh, protestanted an holl anezho. Distardet e voe neuze al lezennoù bet savet a-enep d'ar Gatoliked hag e kavas tro lod eus ar re-mañ da dizhout ur stad-vuhez uheloc'hik. Siwazh, buan e teuas an nevez-pinvidion-se da grediñ n'o doa graet berzh nemet abalamour m'o doa desket ar saozneg, ha diwar neuze n'o devoe nemet dismegañs e-keñver yezh o zadoù. An Iliz Katolik, ne oa nemeti a oa chomet en he sav, a grogas da zegemer profoù-arc'hant ha gwirioù-dreist digant ar Saozon hag adalek neuze e lakaas he holl nerzh a-enep an iwerzhoneg.

Muntrer ar yezh, avat, a zo bet Daniel O'Connell. Ken bras e oa e levezon war ar bobl ha

zoken war dud an Iliz m'en dije gellet saveteiñ ar yezh, evel m'eo bet saveteet ar c'hembraeg gant renerien ar Vethodistiezh. Ne reas O'Connel mann evit se, ober a reas, e gin, kement a oa en e c'halloud evit mougañ yezh e bobl. Ha daoust dezhañ bezañ gouezeleger a-vihanik, ne reas en e vuhez nemet ur brezegenn en iwerzhoneg, un deiz na felle ket dezhañ bezañ komprenet gant archerion a oa ouzh e spiañ. Gellet en dije adsevel ar yezh. He lazhet en deus, a-youl-kaer.

Neuze ez en em gavas an Naonegezh vras, er bloavezhioù 1846, 47, 48, nebeut goude marv O'Connell. Mervel a reas ur milion a dud diwar an naon pe ar c'hleñvedoù-red; ha kalz a re varv a chome hep bezañ douaret. Tec'hout a reas ur milionad war-du Glasc'ho, Liverpool ha Kêrdiz, tra ma tramorie daou vilionad all da Vro-Amerika. Kement-se e-doug dek vloavezh.

- 35 -

A-raok an Naonegezh e veze komzet iwerzhoneg e muioc'hik eget an hanterenn eus an enezenn, ar c'hornog hag ar c'hreisteiz en o fezh, er c'hêrioù ne oa anavezet nemet gant tud ar renkadoù izel. Evel-dres, e voe end-eeun e-touez ar c'houezelegerion ma reas an Naonegezh ar muiañ a freuzh. Buan ez eas ar C'haeltac'ht war strishaat hag e krogas muioc'h-mui ar re yaouank da zeskiñ ar saozneg e-sell d'en em zieubiñ o-unan diouzh dienez o bro ken reuzeudik.

E 1832 endeo o doa savet ar Saozon skolioù-izel - pezh na oa ket bet graet c'hoazh e Bro-Saoz hec'h-unan - evit lakaat an Iwerzhoniz da gomz saozneg ha dre se saoznekaat anezho.

Ar gompezenn vras e-kreiz ar vro a dizh ar mor e Sligeac'h, etre Bro-Ulad ha bro-Gonnac'ht, hag e Gailhiv, etre Bro-Gonnac'ht ha Bro-Vuma. Evel ma talc'he buan ar saozneg da c'honit tachenn er gompezenn-greiz - hag an hent-houarn nevez-savet a voe ur skor a-zoare d'e emledidigezh - ne zaleas ket an 3 rannyezh iwerzhonek da vezañ enket pep hini en he c'horn, gant tachennoù ledan etrezo e-lec'h na gomzed nemet saozneg.

Hiziv an deiz, ar C'haeltac'ht a eo rannet e nav lodenn ha ne da ket niver an iwerzhonegerien betek 400.000. Dister-tre eo niver ar re na ouzont tamm saozneg ebet.

Hag ar stourm a bad, siwazh, a-enep d'ar pezh a chom c'hoazh diwar hor yezh kozh : dianaoudegezh, digasted, pe zoken enebiezh-digor, dreist-holl a-berzh ar re a zo oc'h ober war-dro ar c'henwerzh. Ha bez' ez eus ar saoznegerion binvidik - ha disperedek - a zeu e-pad an hañv da weladenniñ ar vro betek e kornoù pellañ ar C'haeltac'ht, ha dreist-holl c'hoant tud an arvor da guitaat aodoù paour ha yen Mor-Atlantel evit mont da glask bod e Dulenn pe e Bro-Saoz. Krediñ a ra ar gouezeleger emañ evel en un seurt toullbac'h dre ma'z eo unyezhek, o vezañ m'eo ret dezhañ anavezout saozneg kerkent hag ez a div barrez pelloc'h eget e hini - « Koulz e vefe d'in, emezañ, komz sinaeg pe c'halleg e-lec'h gouezeleg : memestra e vefe c'hoarzhet ouzhin ».

(Da genderc'hel)

SKEUD UN TENNATAER

"The Shadow of a Gunman" gant Sean O'Casey

Ur pezh-c'hoari iwerzhonat c'hoariet e Pariz ! Dedennet eo bet meur a genvroad gant an nevezinti-se, moarvat, ha mont a reont d'e welout e c'hoaridi Charles de Rochefort, 64, Straed ar Roc'h. Me a zo aet ivez.

Ar pezh, e daou arvest, hor c'has dre ar soñj e kambr un ti-annez eus Dulenn, en Hilljoy Square. Eno ez eus daou zen o kenvevañ : Donald Davoren, ur barzh, ha Seumas Shields, marc'hadour bitrakoù a zor da zor. Liv ar baourentez ha dizurzh a vez er gambr. Daou zen a netra, hervez. Davoren koulskoude, roll kentañ ar c'hoari, a garfe stourm ouzh e wanded. Met huñvreer eo. Chom a raio etre daou, en entremar dalc'hmat. Gant e zoareoù dioutañ e-unan, a seblant kuzh ha kevrinleun, e teu holl lojerion an ti, hag ur plac'h yaouank en o fenn, Minnie Powell, da grediñ, e gaou, eo Davoren un den eus an I.R.A.; un tennataer oc'h en em guzhat. Doujet eo eta, hag e teu pep lojer, tro-ha-tro, d'e weladenniñ, oc'h en em dremen dirazañ da gar-e-vro, prest eveltañ da vervel evit Iwerzhon dishual.

Un den all, Maguire, gwir zen eus an I.R.A., marc'hadour bitrakoù gant Shields, a zeu e-barzh, un deiz, o lezel ur valizenn bonner da ziwall. Ha kuit. Damnebeut goude e-teu trumm ar c'heloù eo bet lazhet Maguire en un emgann enep ar Saozon. Digoret e vez ar valizenn gant Davoren : bombezennoù !

Trouz war ar straed, un tank, tennoù. Ar « Black and Tans » ! Davoren a chal hag a vallozh. Minnie a zeu, ha kas ar valizennad bombezennoù en he c'hambur evit saveteiñ Davoren: Kambr un dimezell ne vezo ket furchet enni.

Furchadeg. Strafuilh en ti. Ur « Black and Tan », ur bistolenn en e zorn, a gunuj Davoren ha Shields hag a furch e pep lec'h. Ne gav netra. Ar baour kaezh Minnie avat a vez kavet ar bombezennoù en he c'hambur. Setu hi kaset kuit ganto.

Davoren, etre daou, a youc'h evel atav « Poan, poan, glac'har, glac'har » met a zibab lezel an traoù da vont diouto o unan. Tennadeg er-maez. Lazhet eo bet Minnie p'edo o klask mont dindan dec'h. War he c'horf eo bet kavet anv Davoren skriverezet e-kichen hec'h hini. Sabatuet eo ar barzh. Morc'hed, morc'hed, morc'hed...

37

Setu aze steuenn ar pezh. Gant Fulub Kellerson eo bet lakaet an danvez e galleg (1) diwar saozneg Sean O'Casey; ar gwellañ skriver pezhioù iwerzhonat moarvat abaoe m'eo marvet Synge.

Bremañ a-zivout ar c'hoarierion. O strollad, Strollad Andrev Clavé, anvet « Les Comédiens de la Roulotte » a c'hoarias e Breizh, e 1942, soñj am eus ha keuz ivez da vezañ chomet hep mont da welout : « Feunteun ar Sent » gant Synge. Desket o deus ar vicher abaoe. Kellerson a zo un Davoren « evel ma faot ». Minnie a zo deut kenkoulz all gant Janed Ar Gal (ur Vreizhadez, anat). E-touez al lojerion, lodenn Grigson, ar mezhvier a zo deuet ivez da vat. Ne lavarint ket kement-all avat eus ar gwir « titi » parizian Guy Pierauld e roll Tony Owens ! Gwir eo ivez e vanko atav naontek gwenneg da unan evit ober pevar real. Mat, talvoud a ra ar boan mont da welout ar pezh evelato.

KERLANN.

(1) Nevez-embannet e galleg : Deirdre des Douleurs, pezh-c'hoari gant Synge, 80 lur, e ti Odette

Lieutier, rue Princesse, Paris. Peur e vezo gwelet e c'hoari?

UN DARVOUD ETREKELTIEK

Dileuridi gembreat an Eistezvod a zo bet pedet gant Gouarnamant Bro-C'hall da weladenniñ Breizh. Ambrouget int bet e-pad o beaj gant an Ao. Xavier Trelu, kelenner e Kemper.

Degemeret int bet d'al lun 28 a viz Ebrel e Kêr-Vreizh, kreizenn sevenadurel Bretoned Pariz. An Ao. Toulmont, rener Kêr-Vreizh, en deus komzet e galleg : goude bezañ lavaret ur ger bennak diwar-benn labour Kêr-Vreizh, pouezet en deus war doare-ober Gouarnamant Bro-C'hall e-keñver kelennadurezh ar brezhoneg.

Goude, an M. Laorañs, eil-rener Kêr-Vreizh, en deus implijet ar saozneg da zisplegañ d'ar Gembreiz pegen talvoudus e oa o beaj, penaos oa renet ar stourm evit ar yezh e Breizh : trugarekaet en deus ivez anezho evit ar skoazell roet meur a wech ganto hag a galon vat.

An Ao. Enyr-Williams, rener kuzul-labour an Eistezvod, en deus lavaret e saozneg pegen laouen e oa da vezañ e Kêr-Vreizh.

38

An tad Crwys Williams, arc'hdrouiz Breizh-Veur, a rannas un nebeut gerioù e kembraeg, troet e galleg gant an Doktor Morgan Watkin. Displegañ a reas, e-touez stlakadennoù-daouarn an holl bodet eno, e vije bepred degemer mat e Bro-Gembre evit ar Vretoned o dije ezhomm, hag e rafe muioc'h feiz ha labour ar Vrezhonegerion eget lezennoù ar Gouarnamant.

Goude-se, korollerion Nevezadur e ziskouezas o ampartiz, ha klozet ' voe ar vodadeg gant ar « Bro-Gozh », kanet a-bep-eil e kembraeg hag e brezhoneg gant hor Breudeur tra-mor.

Plijus-kenañ e voe ar vodadeg. Gallus eo da bep hini ac'hanomp gwelout goude se e c'hell an darempredoù etre-keltiek dont da vezañ stankoc'h-stankañ e-sell kenlabourat hag en em skoazellañ. (Rak m'hon eus ezhomm bezañ harpet, tro hor bo ivez en dazont da rentañ servij d'hor Breudeur a Gembre, Iwerzhon ha Skos).

Spi hon eus da gentañ holl o deus bremañ dileuridi Vro-Gembre ur menoz resis a-walc'h diwar-benn ar gudenn vreizhat.

AR GEMBREIZ E SANT BRIEG

Setu amañ danvez ar brezegenn e kembraeg graet e Sant-Brieg gant an Ao, n' Abad Klerg, rener « Skol ar C'hembraeg dre lizher » evit degemer hor Breudeur tra-mor. Lakaet hon eus goude troidigezh vrezhonek ar brezegenn-se (nemet an derou anezhi) kaset deomp ivez gant an Ao. n' Abad Klerg.

FONEDDIGION AC ANNWYL GYDGELTIAID

Er fy mod yn teimlo 'n falch iawn o gael yr anrhydedd o'ch croesawu, yr wyf yn ofni na byddwch yn fy neall yn dda, oblegid y mae'r tro cyntaf i mi siarad Cymraeg, ond gobeithiaf y byddwch mor garedig â maddeu i mi ddefnyddio yn eich presenoldeb chwi, lenorion gwych a

dysgedigion enwog o Gymru Wen, rhywfath o Gymraeg bratiog.

39

Gadewch i mi ynteu, yn enw Llydaw ac yn enw 'r Gymdeithas « Celta » ac yn arbennig yn enw 'r holl Lydawiaid a ddygodd bwys y dydd, a 'r gwres, ac hefyd yn enw'r pum gwr ar hugain sydd dan fy arweiniad anghyfarwydd yn dysgu elfennau'r Gymraeg, eich croesawu megis cenhadon o frawdgarwch rhyng geltaidd, cenhadon o wirionedd, o obaith ac o gyfiawnder. Gyda theimladau o ddiolchgarwch yr ydym yn eich cyfarchu chwi, gynrychiolwyr y Wlad a wnaeth lawer iawn drosom. Dau beth yn unig oedd yn cynnal gobaith ynom yn ystod y dyddiau tywyll : ein hewylllys ystyfnig ac eich cydymdeimlad.

Y mae syniadau 'r Celtiaid am y byd, am y bywyd, am y prydferthwch wedi cael eu hymgorffori yn y diwylliant Geltaidd, ac os yw 'r diwylliant hwnnw yn rhan o etifeddiaeth ein hendaiau, y mae hefyd yn rhan o dreftadaeth y byd cyfan ; ac oherwydd hynny y mae 'r rhai sydd yn ceisio distrywio 'n diwylliant yn pechu yn erbyn yr holl fyd. Ond wrth roddi ohonoch gymorth i Lydaw a chodi 'ch llais o'i phlaid gwnaethoch gymwynas werthfawr nid yn unig i Lydaw ond i'r holl ddynoliaeth hefyd.

Eithr y mae 'ch presennoldeb yma ac eich taith trwy Lydaw yn brawf disglair o barch rhywrai tuag at y Cenedloedd Celtig... A dyna i ni wers ar ein gallu. Onid yw'n hen bryd i'r holl Genhedloedd Celtig ddwyn eu hunain i berthynas ac i gyfathrach agosach â ' i gilydd ?

Pwysleisiaf ar un peth yn unig. Ar yr iaith. Y mae'r Llydaweg yn cael ei halltuduo 'n llwyr o'r holl ysgolion swyddogol - ac eithrio 'r Brifysgol ac o ran fwyaf o'r ysgolion preifat... Ond nid iaith hen chwedlau, nid iaith o'r gorffennol mohoni, eithr iaith ieuanc a nerthol ac iddi holl adnoddau ac holl hawliau 'r ieithoedd eraill. Yr ydym yn mynnu lle i'r Llydaweg yn yr ysgolion nid yn unig megis testun o efrydiaeth, ond megis cyfrwng diwylliant a gwybodaeth. Dyma'r ffordd i lenyddiaeth Lydaw ffynnu -a blodeuo, a gwasanaethu'r ddynoliaeth mewn modd effeithiol. A yw'r gofyniadau hynny yn chwyldroadol, neu yn afresymol, neu yn bygwth rhyw ymherodraeth ? Nid ydym yn credu.

Er pob cysylltiad gwleidyddol yr ydym yn credu na chawn ddatblygu 'n llawn ein personoliaeth a phersonoliaeth ein pobl ond trwy 'r diwylliant Celtaidd. Yr ydym yn Geltiaid, ar arhoswn yn Geltiaid !

Diolch yn fawr i chwi am eich bod wedi estyn cymorth effeithiol i ni yn nydd cyfyngder, a bydded i 'ch taith fod yn gychwyn o gydweithrediad diwylliannol ffrwthlon rhwng y pobloedd Celtig, fel y gallont fod yn ffynhonell o ieuencid i'r byd â'u delfrydau o gyfiawnder, o frawdgarwch ac o heddwch.

St-Brieg 23-4-47

40

AOTROUNEZ HA BREUDEUR GELT A GARANTEZ

Va lezit eta, en anv Breizh, en env ar Gevredigezh « Celta » ha dreist-holl en anv an holl Vretoned o deus douget pouez an deiz ar wrez, hag ivez en anv ar 25 a dud hag a zo dindan va renerezh divarrek o teskiñ elfennoù ar C'hembraeg. Va lezit d'ho saludiñ evel Kannaded a vreudeuriezh etrekeltiek, evel Kannaded a wirionez, a esperañs hag a reizhder.

Gant kalz a anaoudegezh-vat ho saludomp c'hwi, dileuridi ar Vro a reas kalz evidomp. Daou dra hepken a zalc'he an esperañs ennomp e doug an deizioù teñval : hor youl dibleg hag ho karantez.

Menzioù ar Gelted diwarbenn ar bed, ar vuhez, ar gened a zo bet roet ur c'horf dezho koulz lavarout er sevenadurezh keltiat, ha mar deo ar sevenadurezh-se ul lodenn eus herezh hor c'hentadoù, ez eo ivez ul lodenn eus peadra as bed-holl, hag, abalamour da se, ar re hag a zo o klask distruj hor sevenadurezh a bec'h a-enep ar bed-holl. Met en ur reiñ skoazell da Vreizh hag en ur sevel ho mouezh a-du ganti hoc'h eus rentet ur servij dispar da Vreizh ha n'eo ket da Vreizh hepken met d'an denelezh a-bezh.

Ho pezañs amañ hiziv hag ho peaj dre Vreizh a zo ur merk sklaer eus doujañs unan bennak e-keñver ar Pobloù Keltiek. Ha setu ivez ur gentel dimp diwarbenn hor galloud. Daoust ha n'eo ket poent bras d'an holl Vroioù Keltiek skoulmañ darempredoù strishoc'h etrezo ?

War un dra hepken e fell din pouezañ : war ar yezh ... Harluet eo ar Brezhoneg diouzh an holl skolioù ofisiel - nemet diouzh Skol-Veur Roazhon - ha diouzh an darn-vuiañ eus ar skolioù prevez... Ha koulskoude n'eo ket ur yezh eus an amzer dremenet mat hepken da gontañ kontoù gwrac'hed kozh met ur yezh yaouank ha nerzhus ha dezhi holl c'halloud hag holl wirioù ar yezhoù all.

Mennout a reomp ur plas d'ar Brezhoneg er skolioù, n'eo ket hepken evel danvez-studi met evel ur benveg a sevenadurezh hag a ouiziegezh. Setu an doare nemetañ da lakaat al lennegezh vrezhonek d'ober berzh ha da vleuniañ; ha da servijiñ an denelezh en ur stumm efedus.

Daoust hag ez eo dispac'hus ar goulennou-se, pe zirezon, pe zañjerus evit un impalaerded bennak ?

41

Danout da bep liamm politikel e kredomp n'hellimp peurzispiegañ hor personelezh ha personelezh hor pobl nemet dre ar sevenadur keltiat. Kelted ez omp hag e chomimp Kelted.

Bennozh Doue deoc'h d'hor bezañ sikouret e deiz an anken ha ra vezo ho peaj ar penn kentañ eus ur c'henlabourerezh sevenadurel frouezhus etre ar pobloù keltiat en doare ma c'hellint bezañ evel ur feunteun a yaouankiz evit ar bed gant o uhelvennadoù a lealded, a vreurgarouriezh hag a beoc'h...

GAILCK ELLAN VANNIN

gant F. B. Perry San-Francisco, California

14 a viz Meurzh 1947

Embann a reomp ul lizher kaset deomp e manaveg gant an Ao, Francis Berton Perry, unan eus koumananterion Al Liamm. F. B. Perry, Letanant en United States Navy, a zo o chom e San-Francisco. Dedennet eo gant ar yezhoù hag ar c'hudennoù keltiek. Gouzout a ra lenn kerneveg ha kembraeg, lenn ha skrivañ manaveg. Emañ o studiañ gouezeleg Bro-Skos en ur skol e San-Francisco. Goulennet en deus diganeomp levrioù da zeskiñ un tamm brezhoneg : kaset hon eus dezhañ geriadurioù Fransez Vallée ha Roparz Hemon, yezhadur Roparz Hemon hag un toullad levrioù brezhonek.

Roet hon eus troidigezh vrezhonek lizher F. B. Ferry.

She Gailck Ellan Vannin ta'n hengey ny's boghtey ny jengey Keiltee ooilley. Cha nodmayd kionnee lioaryn Vanninee agh Soshtal Noo Ean, Fockleyr Baarlagh-Manninagh Kneen, as daa lioar veg ghrammair. Va lioaryn elley - agh cha vel shin fakin ad, noa ny aa-laue. As, cha vel as cha row lioaryn vie Vanninee, erson cha vel ad er prental. Dy ve shicky, va'n Vible Chasherick prentit, lioar dy hymnyn, as lioar padjeryn, agh cha row nagh beg jeh'ny lioaryn shoh, as ta'd feer ghoan jiu.

She drogh-haggyrt ny Gailck shoh nagh row skeealyn foaysee screeit aynjee. Ta carvalyn ayn, as bardaght, ash va'd currit magh mygeayrt y vlein 1890. Cre'n tra va mee gearree dy chionnee ad, cha d'od mee, as b'egin dou aascreeu ad meepene. Dy-shicky, gyn lioaryn, gyn fockley-ryn, she mirral nagh hooar y Ghailck baase foddey er dy henney - agh, dy-honey, t'ee bio foayst.

42

Va'n chied Vanninagh ynssit va graih y Ghailck yn Olloo Kelly. Ayns 1780, screeu eh e ghrammair 'se ockleyr, as she ad ta lioaryn feer olk, gyn-yummyd. Va'n grammar screeuit myr grammar Ladin, as foddee dooinney erbee lhaih eh ooilley gyn ynsagh red erbee mychione y Ghailck. Ayns e 'ockleyr, hug mooarane fokleyn Baarlee, as fokleyn Vanninee screeuit er ymmoddee aghtyn. Myrgeeddin, v'eh gearree dy screeu shennaghys ny vockleyn, ayn, as v'eh gyn ys dy yannoo yn shen.

Ayns y vlein 1932, hug Mghr. Kneen e Ghrammair magh, as she lioar feer vie ta'n grammar shoh. Agh she dooinney aighoil t'eh quoi's lesh sampyl yn shoh, erson cha vel ad dy ve fannyt jiu. Va' shen ockleyr Cregeen currit magh liorish Mghr. Kneen myrgeeddin, agh ged ta mee er ronsaght ayns dy chooilley ynnyd, cha vel mee er 'akin.

Ayns shoh, ayns Valley Noo Frank (San Francisco, ayns y Vaarlagh) ta three ny kiare deiney lhaih as loayrt y Ghailck, as t'ad graih y hengey shoh, agh, gyn lioaryn, cha n'oddee ad jannoo lan erson y hengey, ny lesh y hengey.

Ta'n Cheshaght Gailckagh ayns Ellan Vannin jannoo wheesb as foddee ad erson y Ghailck, agh ta'n Ellan Veg Veen beg dy jarroo, as ta mooarane ny sleih aynjee boght. Gyn argid, cha'noddee prental mooarane jeh lioaryn, as ny sodjey, fakin dy vel kyart-screeu ny Gailck yn kyart screeu ny 'smessey yn theihll, mannagh vel yn prenteyr Manninagh dwoie, quoi's lesh y Ghitilck dy mie, cha nod eh prental red erbee dy kiart.

Cha vel, as cha row rieauyr, mooarane sleih ayns Ellan Vannin, as jiu, cha vel y Ghailck ec

smoo na daa ny three thousane jeu, agh ta'n Ghailck bio foayst, as ta shin jerkai dy vee ee bio dy bragh.

GOUEZELEG ENEZ VANAV

Gouezeleg Enez Vanav a zo ar paourañ eus an holl yezhoù keltiek. N'eo gallus kavout e manaveg nemet an Aviel hervez Sant-Yann, geriadur saozneg-manaveg an Ao. Kneen, ha daou levrig yezhadur. Bez' e oa levrioù all, hogen n'eo ket gallus kavout anezho bremañ, nevez pe gozh. Ha n'eus ket, ne oa ket a levrioù mat e manaveg, rak al lennegezh ne oa ket skrivet. Eveljust bez' e oa ar Vibl santel, al levr gwerzioù sakr hag al levr-pedennoù, hogen ne oa ket kalz anezho, hag hiziv dibaot-tre int.

43

Biskoazh n'eo bet skrivet kontadennoù dudius, ha se 'zo kaoz eus droukverzh ar gouezeleg. Kanaouennoù Nedeleg a zo ha barzhonegoù, deut er-maez war-dro 1890. Hogen pa'm eus fellet din o frenañ n'am eus kavet netra, ha ret eo bet din o adskrivañ va-unan. Evit gwir, hep levrioù, hep geriadurioù, souezhus eo n'eo ket marv ar yezh, hogen gwell a se, bev eo evit c'hoazh.

Ar c'hentañ Manavad poellek a garas ar yezh a voe an Doktor Kelley. E 1780, e skrivas ur yezhadur hag ur geriadur, a zo fall-tre, didalvez. Ar yezhadur a zo evel unan latin, a c'heller lenn mil gwech hep deskiñ tra diwar-benn ar gouezeleg. E-barzh ar geriadur, Kelley en deus lakaet kalz a c'herioù saozneg, hag an hevelep ger a zo bet skrivet e meur a zoare. Fellet en deus d'an oberour hag eñ diouiziek-krenn, lavarout un dra bennak a-zivout an deveradurezh-c'herioù.

E 1932, an Ao. Kneen en deus savet e yezhadur hag a zo mat-kenañ. Hogen eürus an den a biao unan, rak n'eo ket gallus e gavout hiziv. Adskrivet en deus ivez geriadur kozh an Ao. Cregenn ; klasket 'm eus an oberenn-se dre holl hep kavout roud anezhi.

Amañ e San-Francisco, tri pe bevar den a gar ar gouezeleg hag a zo gouest da lenn ha skrivañ anezhañ ; hogen hep levrioù ne c'hellont ket ober kalz a dra evit ar yezh pe gant ar yezh.

En Enez Vanav, ar Gevredigezh C'houezelek a ra ar pezh a zo en he galloud, hogen bihan eo an enez ha kalz a annezion paour. N'eo ket posubl embann levrioù hep kaout arc'hant. Hag evel ma'z eo doare-skrivañ ar manaveg an hini diaesañ a gaver er bed, ret eo d'ar mouler gouzout mat ar yezh, evit ma vo meizus al levr.

N'eus ket, ha biskoazh n'eus bet kalz a annezion en Enez Vanav, hag hiziv n'eus nemet 2 pe 3 mil o c'houzout gouezeleg, hogen spi en deus an unan e c'hello ar yezh padout bepred.

44

Setu amañ da heul al lizher kaset en anv an Emsav Breizhat d'ar Strollad Broadel nevez « Manninee Dooie » krouet e Manav.

Ayns shoh, ayns Breizh, ta shin obbraghey lesh shiu son ny phobble Keltiagh.

« Manninee Dooie », dy Bragh ! Ellan Vannin, lesh' Eire, Alba, Cymru, Kernow as Breizh dy bragh ! JEE lesh Keltia-Mooar !

Bebet ar broioù Keltiek unanet ha dishual !

Son yn « Emsav Breizh »

Y. THIE MOOAR.

Aman e Breizh, labourat a reomp ganeoc'h evit ar Pobloù Keltiek.

Bevet « Manninee Dooie » (Gwir Bobl Vanav) !I Bevent enez Vanav, Iwerzhon, Skos, Kembre, Kernev ha Breizh DOUE gant Keltia-Veur !

Bevet ar broioù Keltiek unanet ha dishual !

Evit « Emsav Breizh » :

Y. THIE MOOAR.

BODADEG " AL LIAMM "

D'ar Yaou 15 a viz Mae (Yaou-Bask) dirak izili Al Liamm eus Pariz ha tro-war-dro, ez eo bet dalc'het bodadeg hor Strollad.

Setu bloaz tremenet ma'z eo bet krouet Al Liamm, kevredigezh diskleriet hervez lezenn 1901. N'hon n'eus ket, ha pell'zo, sevenet hor roll-labour. Evelato, un diazez hon eus graet ha spi hon eus gallout sevel warnañ un dra fetis. Diskleriadurioù talvoudus hon eus dastumet ivez.

110 a izili a gontomp bremañ :

- E Pariz hag er vannlev : 38. - En Naoned : 6. - E Roazhon : 5. - E Brest : 3. - E Kemper : 2. - E Douarnenez : 2. - E Gwengamp : 2.

11 ezel hepken hon eus en tu-all d'ar mor :

- 3 C'hembread. - 3 Skosad. - 2 Iwerzhonad. - 1 Manavad. - 1 Saoz (1). - 1 Amerikan.

(1) An Ao. Smith, anavezet dindan an anv a Garadar, oberour « Welsh made easy » ha « Cornish simplified ».

War ar 66 ezel a anavezomp o micher ez eus : Micherourion : 3. - Implijidi : 2. - Kargidi : 12. - Apotikerion : 2. - Levrierion : 2. - Kenwerzherion all : 4.

studierion : 3, -, Skolaerion : 4. - Kelennerion : 4. -. En arme : 2. - Mezeged : 6. -. Micheroù dieub all : 2. - Ijinourion : 5. - Beleion : 13. - Hep micher : 2:

Plijadur hon ees bet o tegemer digant an Ao. Davies, ur C'hembread komanantet d'Al Liamm ha digant an Ao. Mac Uilis, un Iwerzhonad, lizhiri skrivet e brezhoneg mat.

A-hend-all, gwelet hon eus ez eus muioc'h-mui a Vretoned o pleustriñ war ar yezhoù keltiek.

N'eo bet moulet betek bremañ nemet teir niverenn eus Al Liamm, ha meur a abeg a zo da se :

- an diouer a gomananterion : 250 d'an nebeutañ a vije ret deomp kaout.

- an diouer a genlabourerion : evel an holl gelaouennoù e brezhoneg : da grediñ n'eus ket kalz a Vreizhiz gouest da sevel pennadoù en o yezh.

- priz ar moulañ, evel pep tra, e zo uhel : daoust da se, ne fell ket dimp kreskiñ ar skodenn, 200 lur : Spi hon eus da vodañ muioc'h a izili er bloaz-mañ, da c'hallout ober labour gwelloc'h.

Betek-hen, kuzul Al Liamm a oa aozet evel se :

- Rener : Glaoda Millour

Eil-Rener : Herri Ar Floc'h

Sekretour : Ronan Chevalier

Teñzorer : Per Ar Bihan.

Dilennet eo bet ur c'huzul nevez gant an tregontad a dud bodet e Kêr Vreizh d'ar 15 a viz Mae.

Rener : Andrev Latimier.

Eil Rener : Erwan Tymen

Sekretour : Per Ar Bihan

Teñzorerion : Roban Chevalier hag Herri ar Floc'h.

Setu ar pezh hon eus c'hoant d'ober bremañ :

- Kenderc'hel da voulañ hor c'helc'hgelaouenn Al Liamm : klask a rimp kaout un niverenn bep tri miz, ha fonnusoc'h ivez. Nebeut a dra a zo bet skrivet e brezhoneg diwar-benn ar c'hudennoù keltiek : ec'hon eo an dachenn-labour. dirazomp.

- Lezel ul lec'h d'ar yezhoù keltiek en hon niverennoù, ma n'eo nemet evit ar bruderezh : evelato, anzav a reomp e vo kentoc'h Al Liamm ur gelaouenn o reiñ deskadurezh keltiek d'he lennerion eget ur wir gelaouenn etrekeltiek : ar pezh ne harzo ket ouzhimp d'ober eus hor gwellañ evit ma vo stankoc'h-stankañ an darempredoù etrekeltiek.

- Implijout an doare-skrivañ nevez : ne c'hell ket bezañ a-hend-all : hogos an holl gouest d'hor skoazellañ dre o anaoudegezh eus ar c'hudennoù keltiek a zo a-du gant ar K.L.T.G. Spi hon eus ivez e kresko dre se niver hor c'homanterion : un toullad mat a Vrezhonegerion a nac'he kas o skodenn deomp en abeg ma raemp gant an doare-skrivañ kozh.

46

- Embann, mar deo posubl, ouzhpenn niverennoù Al Liamm, levrioù da zeskiñ ar yezhoù keltiek pe o pleustriñ war an danvez keltiek.

- Ober, m'hon eus tro, gant ar broioù keltiek tra-mor, un eskemm a weladennourion e-pad an ehan-labour.

- Kemer perzh ivez er gouelioù hag er c'hendalc'hioù etre-keltiek. Gwelet hon eus en hor c'heñver spered-mat ar Gembreiz deut e dibenn miz Ebrel, hag o anaoudegezh eus hor c'hudennoù broadel : gallout a reomp holl gwellout e vo posubl ober kalz a dra evit ar pezh a sell ouzh an darempredoù etrekeltiek.

Pediñ a reomp an holl re a youl vat da skoazellañ ac'hanomp da glask kreskiñ danvez speredel Keltia.

Sekretour Al Liamm.

NOTENNOU

Studi ar Yezhoù

Krouet eo bet e dibenn ar bloaz 1946 « Studi ar Yezhoù » (S.A.Y.).

Fellout a ra deoc'h...

- deskiñ ur yezh keltiek, pe ar saozneg, pe ur yezh all :
- ober un enklask diwar-benn tra pe dra o tennañ d'ar yezhoù-se (lennegezh, kelaouennoù. h.a.) :
- kaout ul levr pe un niverenn gelaouenn, zoken diviet, evit aesaat ho studi :

Pe c'hoazh...

- lakaat treiñ e brezhoneg pe e galleg ur skrid keltiek pe saoznek :
- lakaat sevel e brezhoneg pe e saozneg ul lizher, ur c'helc'h-lizher, ul levrig-bruderezh, ur pennad-embann,.h.a.

Hogen ne ouzoc'h, na pelec'h goulenn ali, na penaos lakaat sevel al labour a c'hoantait.

N'eus ket da dermal...

Skrivit diouzhtu da :

S.A.Y.

Studi ar Yezhoù

78, rue de Fontenay

VINCENNES (Seine)

o lakaat ur timbr 2 skoed evit ar mizoù-respont. Gant S.A.Y. e viot skoret raktal.

- 47 -

Levrioù da werzhañ

Levrioù brezhonek ha diwar-benn ar brezhoneg, diviet bremañ, en o zouez kalz niverennoù kozh eus « Gwalarn », « Sterenn » ha « Sav » a c'heller da brenañ. Goulenn diskleriadurioù digant « Al Liamm ».

Skol an Triskell

Gant Yann Sicard, rener Kelc'h keltiek « Ar Vro Wenn » eus ar Baol, eo bet krouet ur skol dre lizher e-sell reiñ ur gelennadurezh vreizhat klok :

1. Istor Breizh.
2. Douaroniezh hag Arboellerezh.
3. Lennegezh vrezhonek.

4. Arz breizhek.

5. Gwerinoniezh.

6. Displegerezh-dre-skrid e brezhoneg.

Skridoù-testeni a vo roet d'ar re ouiziek a-walc'h e-dibenn ar studi.

Anvet eo bet ar Skol « SKOL AN TRISKELL ».

Da gaout diskleriadurioù, da reiñ e anv, skrivañ da : SKOL AN TRISKELL

Villa « La Mouette »'

Plage Benoit

LA BAULE (L.-I.).

Kanaouennoù e Brezhoneg

An ti Gaudu en deus bet ar menoz mat da embann kanaouennoù e brezhoneg. Deut eo er-maez : « Bro Gozh va Zadoù », « Kousk Breizh Izel », « An tour dantelezh ».

Gortoz a reomp reoù all : ha ne vije ket fall embann ivez kanaouennoù keltiek, ken fromus hag espar sonerezh darn anezho.

ETABLISSEMENTS GAUDU

16, rue de Rohan SAINT-BRIEUC. (C.-d.-N.).

48

Ur Gelaouenn Etrekeltiek

« An Aimsear Ceiltiac » « The Celtic Time » (An Amzer Geltiek) a zo anv ur gelaouenn etrekeltiek nevez-krouet. Bez e vo enni keloù, pennadoù, diskleriadurioù war an darvoudoù, h.a., a-zivout pep danvez a c'hell bezañ dudius evit al lennerien Iwerzhonat, Skosat, Kembreat ha Breizhat. Embannet 'vo e saozneg, hogen ul lec'h 'vo lezet e-barzh da bep yezh keltiek. An doare 'vo da gaout keloù ha da stummañ ur gredenn etrekeltiek.

Adalek miz Gouere e teuio un niverenn er-maez d'ar 15 eus pep miz.

Reiñ ar c'homanantoù (Bep bloaz 55) d' « an Aimsear Ceiltiac », Fort Street, Cork, Eire.

AL LIAMM 5

Diskar-Amzer 1947

Eil bloavezh

TAOLENN

OBERIANTIZ, gant Andrev-L. Latimier	3
LIZHER EUS IWERZHON, gant Roparz Hemon	6
GOUDE BEZAÑ GWELET IWERZHON, gant Visant Seite	12
AR GOUELIOU E KENDALC'H DULENN, gant Erwanz Galbrun	14
EN-DRO DA GENDALC'H DULENN, gant Erwan Tymen	16
AN IWERZHONEG (kendalc'h), gant Oscar Mac Uilis	
II. Kentañ amzer an Emsav evit ar Yezh	19
III. Ar Gouarnamant hag ar Yezh	22
IV. An Emsav en deiz a hiziv	27
BUHEZ AR GOUEZELEG, gant D. P. (tr. P. D.)	31
ARBOELLEREZH BRO-SKOS, gant Per Ar Bihan	35
KEMBREIZ E PATAGONIA, gant Per Denez	37
BOLONTEZ AN HINI KOZH, gant Dik Trevan (tr. Fañch Elies)	38
Un MEVEL, gant Thomas Gwynn-Jones (tr. Fañch Elies)	42
CYNGRES CELTAIDD SANT-BRIEG, gant an Ao. 'n abad Klerg	45
GWILIAU MONTRWLEZ, gant an Ao. 'n abad Klerg	46
HoN DAREMPREDOU, gant Caradar ha Kerlann	47
SKOL-HAÑV Rosko, gant Visant Seite	49
Levrioù :	
YEZHADUR KERVELLA, gant Kerlann	52
KANAOUENNOU (Jef ar Penvenn-B.A.S.), gant Per Denez	54
DAOU LEVR DA LENN HA DA SKIGNAÑ, gant Alan Al Louarn	54
Notennoù	55
EVIT KAOUT LEVRIOU EUS IWERZHON	55
AN AIMSIR CHEILTEACH ...	56
LEVRIOU EUS KEMBRE .	56
LEVRIOU SAOZNEK ...	57
KELEIER	57
ROLL AR PENNADOU EMBANNET WAR « Al Liamm » (Niv. 1-5)	58

OBERIANTIZ

« Pour un mouvement, évoluer c'est vivre, se figer c'est mourir ».

O.M.

Politique. Stur, nouvelle série, n° 5.

Souezhet ha mantret eo meur a hini o welout kelaouennoù an emsav chom hep dont er-maez d'an deiziad resis, pe vervel krenn evel ma 'z eo bet, siwazh, tonkadur un toulladig anezho. N'eus nemet un abeg d'an degouezhioù fall-se : diaesterioù spontus ar mare-mañ. N'eus nemet ur pare : skoazell wirion ar vrogarourien.

Embannerien kelaouennoù an emsav n'int ket mondaned, pell ac'han, hag anat eo n'haller ket padout pell amzer en ur goll arc'hant a-vil-vern. Ma oufe ar re a ra penn-mouzh evit paeañ priz ur c'homanantig pegement a boan hag a arc'hant a zo ret evit embann ur gelaouenn, zoken dister, moarvat e rofent sikour a galon vat, pe a-hend-all, n'int ket tud wirion ha leal en o c'harantez-vro.

Trugarekaat a reomp kalonek ar re o deus kaset deomp hep termal priz o adkomanant, dreist-holl ar re a zo bet komprenus a-walc'h evit kas ur prof ouzhpenn. Bennozh Doue dezho en anv ar brezhoneg, da lavarout eo en anv Breizh. Koulskoude, arabat eo krediñ ez aio da get evel-se an holl gelaouennoù nevez c'hanet, an eil war lerc'h eben. Daoust d'ar c'holl arc'hant, daoust d'ar skoilhoù a bep seurt, ret-mat e vo kenderc'hel ha mont war-raok zoken. War an divout-mañ, un emglev a zo bet divizet etre renerien ar gelaouenn TIR NA N-OG ha ni : adalek niverenn c'hwec'h « AL LIAMM », unanet e vo an div gelaouenn. Evel-se e vo aesoc'h an traoù marteze, rak muioc'h a gomananterien hor bo, ha gallus e vo moarvat kinnig, d'hol lennerien niverennoù tevoc'h hag embannet aliesoc'h.

4

Neuze, div lodenn a vo kavet diwar vremañ er gelaouenn : studiadennoù war ar c'hudennoù keltiek diouzh un tu, hag ouzhpenn pennadoù lennegel, ha dreist-holl sevenadurel, rak, skridoù a zo da sevel war bep kudenn en hor yezh, ha n'haller ket chom o plediñ gant al lennegezh c'hlan hepken, pezh a zo mat evit ur bobl dieub hag evurus, ha c'hoazh !.. Evidomp-ni, ret eo ansav e ra diouer ur bern traoù a-bouez, ha se e pep skourr eus ar sevenadurezh... En ur ger, labour ar gelaouenn diwanet diwar unanidigezh Al Liamm ha Tir na n-og a vo pengenniñ an erv boulc'het ken brav gant Gwalarn tri bloaz war-nugent 'zo, ha-chomet a-sav en abeg d'an darvoudoù.

Ac'hanta ec'hon-kenañ a vo hiviziken tachenn ar gelaouenn, ha pep Breizhad emskiantek a vo e zlead harpañ anezhi hervez e c'halloud, dre sevel pennadoù hag ober bruderezh. Tremenet eo ar mare e-pad ma c'helled chom pep hini en e gorn o maoutenniñ. Ur stourm kalet a zo da ren, ul labour pouezus-dreist da gas da benn, ur gefridi uhel da seveniñ. Poent bras eo d'ar vrezhonegerien desket diskouez o zalvoudegezh, diskouez int ar re wellañ, hag a-bell, ar re n'eus nemeto a gont e gwirionez. Arabat eo, da skouer, kuitaat ur strollad pe ur c'helc'h bennak abalamour ma 'z eo ar galleg mestr eno ; er c'hontrol, ret eo menel, sevel ur skol vrezhonek, bodañ ar vrezhonegerien, dont da vezañ mestr war ar re all. N'hellomp ket c'hoazh, moarvat, lakaat ar galleg er-maez eus hor bro, hogen, bez' e c'hellomp e skarzhañ er-maez eus an emsav, pe da vihanañ rediañ anezhañ da zaskoriñ da yezh ar vro he lec'h dleet; an hini brasañ, al lec'h a enor ; ha se a ranko dont da wir, koustet a gousto, er bloavezhioù a zeu : ne vo kemeret an emsav evit un dra sirius hag a-bouez nemet pa vo anat ez eo ar brezhoneg e yezh ; hag evit dont a-benn da se, ret d'ar vrezhonegerien desket kaout ur

spered youlek, emskiant o zalvoudegezh, ha fiziañs en trec'h.

Evit se, ret eo dezho en em vodañ diouzhtu en dro d'Al Liamm-Tir na n-og. Reoù 'zo o deus rebechoù d'ober marteze, hogen, ra soñjont e c'hell bepred bezañ gwellaet un dra savet gant youl vat ha karantez-vro, gant ma vez skoazellet gant an holl o deus komprenet ez eo ret d'ar brezhoneg bevañ, gant an holl a ra diouto o-unan brogarourien, broadelourien. Kantadoù ha kantadoù a gomananterien a dlefe degas o skodennoù ha posubl eo o c'havout, gant ma raio pep unan eus hor c'heneiled bruderezh oberiant e-touez an dud a anavez. Ra soñjo pep Breizhad mat e c'hellor pourchas ur gelaouenn vrav, dellezek eus hor bro, hag embann levrioù dudius ma fell dezhañ ober ur striv.

5

Bremañ, buan-spontus e tremen an amzer. N'heller ket mui lavarout « amzer 'zo » en ur vouse'hoarzhin, evel ma 'z eo bet ar c'hiz e-pad ur pennad. N'eus ket amzer ken da goll. Ur gwir vrezel, ur stourm ramzel a zo oc'h ober e reuz a-enep hor yezh, hor gizioù, hor stumm-spered, pep tra a ro deomp ur berzonelezh trec'h war hini an estren a fell dezhañ hor mougañ, hol lakaat da vevelien. Hogen, evidomp gallout herzel ouzh ar brezel-se, ret eo en em unaniñ, sevel ul lu, goveliañ bepred, hep paouez, armoù nevez. Hag an armoù-se a vo al levrioù brezhonek a savimp, pep hini war e dachenn, evit dont a-benn da biaouañ ur sevenadur gouest da bourchas d'hor pobl an deskadurezh a c'hoanta, hag a vo graet hervez spered hor gouenn.

Taolomp pled, netra n'eo kollet c'hoazh, er c'hontroi, arouezioù a fiziañs a zo evidomp : e-touez ar yezhoù keltiek, ar brezhoneg a zo an hini gomzetañ, hag an hini aesañ da zeskiñ ivez ; a-hend-all, emañ tud a bep seurt broioù o sellout ouzhimp gant dudi ha komprenusted, ket hepken e Keltia tramor, hogen ivez e broioù estren evel Bro-Friz, Norvegia pe Euzkadi, da skouer. Ar souezh hag ar blijadur o deus bet Iwerzhoniz e Dulenn e-kerz ar C'hendalc'h Etrekeltiek diwezhañ o klevout dileuridi hor bro o vrezhonegañ bepred etrezo a ziskouez o doa kemeret ar re-mañ an hent mat, an hent n'eus nemetañ evit prouiñ dirak ar bed ha dirazomp-ni hon-unan ez eo hor bro ur wir vroad a zellez bevañ ha mont war-raok daoust d'ar waskerezh a c'houzañv. Pep bro he deus enebourien, ha n'eus nemet ar re laoskañ a vez trec'het en diwezh. Ar re greñv, ar re yac'h - ne lavaran ket ar re niverusañ - a wel bepred, deiz-pe- zeiz, heol an dasorc'hidigezh o parañ warno.

Daoust ha ne vo ket hor Breizh ken karet unan eus ar re-se ?

Andrev-L. LATIMIER

LIZHER EUS IWERZHON

Kentañ sell a ris ouzh douar Iwerzhon, goude daou vloaz warn-ugent, a voe etre div goumoulenn, eus ur c'harr-nij. An 20 a viz Gouere 1947 e oa. Adalek Londrez ne oa bet nemet koumoul. En aner em boa klasket kaout un alberz eus Kembre, ur vro all tost d'am c'halon. Edomp en un tu bennak a-zioc'h Dulenn pa voe met keloù dimp e rankjemp mont da zouarañ er penn all d'an enezenn, ken fetis 'oa al latar. Dre ma nijemp etrezek ar c'hornog e sklaerae an amzer, un dudi. Bannoù heol an abardaez, hogos evel biroù, a doulle ar c'hoabr, ha tachennoù glas ha gleb, atav war vrasaat, a ziguzhe dirazomp, gant pradeier, kleuzioù gwezek, ha stêrioùigoù, lennoùigoù e-leizh, ha tiez mein amañ hag ahont. Ur vro heñvel ouzh Breizh, nemet glasoc'h ha glepoc'h, fraostoc'h ivez. Loch Deirgdheirc, ha pelloc'h aber ar stêr Sionna, o strishaat hag o ledanaat, teñval ha sklaer tro-ha-tro, war-du ar Mor Bras, a oa ur weledigezh hud er serr-noz. Da unnek eur, pa dizhjomp an aerborzh, ne oa ket marv c'hoazh ar sklerijenn.

Ur c'harr-boutin hor c'hasas betek Dulenn e-kreiz an noz. Buanoc'h e vijemp aet, panevet ar Saozon a oa ganimp, ha n'o doa ken c'hoant nemet debriñ. Da zebriñ e teu Saozon a-vil-vern bremañ da Iwerzhon, hag i marnaoniet en o bro, an dud kaezh. Na kouezhet eo ar re c'halloudek ! evel ma lavar ar Skritur a garent lenn gwechall. Kouezhet, Va c'henveajourien da vihanañ, war un douar laezh ha mel, hag ivez bier kreñv, amanenn druz ha bara gwenn. Teir gwech e voe ret d'as c'harr ehanañ ; hag ar Saozon da ziskenn, da zihuniñ an davarnourien, da vrifal ha da lonkañ, ha da bignat er c'harr adarre, o genou hag o godelloù karget a *sandwiches*.

Amañ ez eus peoc'h. Ar brezel euzhus, a zismantras hor c'hêrioù, a lakaas ar spont da ren war hor maezioù, a lazhas hag a c'hlozas milieroù ac'hanomp, ha gwashoc'h c'hoazh, a hadas ar strafuilh hag ar gasoni en hor c'halonoù, en deus espernet Iwerzhon. Ur gopr dellezet mat d'ur vro a zo deut a-benn, goude kantvedoù a reustl hag a gadarnded, da vezañ mestrez, kement ha ma c'hell ur vro bezañ, war he flanedenn.

7

Ya, amañ ez eus peoc'h. Gant ar menoz-se em penn e tihunis antronoz. Peoc'h war an dremmoù, war ar straedoù, war al liorzhoù, en aer zoken. Ar skuizhnezh, ar gounnar, an enkreuz a vez soubet hag intret ha pistriet pep den ha pep tra ganto war hon Douar-Bras, n'eus roud ebet anezho amañ. Skañvoc'h e teu ar c'horf, habaskoc'h ar spered. En un taol en em gavan douget en amzer va bugaleaj, ma oa ar bed ken drant hag an dud ken dibreder.

Estlammañ am eus graet, evel pep beajour o tont da Iwerzhon, dirak ar staliou karget a varc'hadourezhioù, ar frouezh eus ar c'hreisteiz, ar pesked kempennet-brav, ar pastelloù-kig renket ha skourret ken stank ma kreder eo bet boset holl loened an enezenn en un devezh, ar gwestell, ar madigoù a bep liv, an dilhad, ar botoù, an ardivinkoù. Hogen, nebeut a dra eo. Ar pezh a gont, ar pezh a from ac'hanon eo al levezek skignet dre-holl, fiziañs ur bobl a sav he fenn en diwezh, hag a chom sioul, ha lorc'hus un tamm, e-kreiz ar pobloù dirollet, paourat, mezhekaet, trec'het, zoken ar re a gav dezho ez int trec'h.

Ar C'hendalc'h Keltiek, abeg va donedigezh da Iwerzhon, a zigoras d'ar merc'her 23 hag a badas betek ar merc'her 30 a viz Gouere. Mat pe fall, ar c'hendalc'hioù a vez atav talvoudus dre ma vodont tud na gejfent morse en un doare all, ar pep talvoudusañ enno marteze an divizadennoù e korn ur straed pe ouzh taol un ostaleri. Tud eus an holl vroioù keltiek, nemet Kernev-Veur, a oa deredet da Zulenn, en o zouez un dousennad vat a Vrezhoned. Ar Vrezhoned a voe degemeret eus ar gwellañ, un tammig evel ma tegemerer kerent reuzeudik. Darvoudoù ar brezel e Breizh, hag an heskinerezh da heul, a zo bet ur broud d'ar C'heltved, dezhañ da veizañ ez eo gwirion ha buhezek. Eus Kembre, eus Iwerzhon, eus Bro-Skos, eus Kernev-Veur, eus Enezeg-Vanav zoken, ez eus deut

davet Breizh, n'eo ket hepken komzoù a gendruéz, hogen ivez skoazell, ha na ouzomp ket c'hoazh pegen bras eo bet. Un deiz, spi am eus, e vo merket kement-se en ul levr aour. Va c'henvroiz, pa reot ur vadelezh e-keñver ur C'helt tramor, ne reot nemet daskoriñ un tammig eus ar pezh a zo bet roet dimp. Ma ne gredit ket, deuit amañ da glevout ha da welout.

Evel ma oa, e voe mat ar C'hendalc'h, unan eus ar re vravañ. Ar prezegennoù, al lidoù-degemer, an abadennoù koroll, kaniri ha c'hoariva a blijas d'an holl, seul vuioe'h ma'z eo Iwerzhoniz tud laouen ha diardoù, hag a oar trec'hiñ pep diaester en ur c'hoarzhin. Echu roll al labour hag ar gouelioù, e vezemp pedet alies da beurechuiñ an devezh e ti mignoned ; asantiñ a raemp, skuizh-marv, hag e teuze hor skuizhder gant gwrez hegarated hon ostizien. Antronoz e kave dimp n'hor bije mui an nerzh da sevel, ha paket e vezemp adarre er froud, hep kaout amzer da soñjal. Ur sizhunvezh vurzhodus e vije bet, nemet teñvalaet e voe, siwazh, gant keloù an taol-distruj e Brest, ha kolloù bras evit darn ac'hanomp.

8

N'eo ket e-kreiz ar gouelioù, avat, e tleer deskiñ. An devezhioù a zeu da heul, en o sioulder, a zesk muioc'h. Eus an dud stank a zo deut da stardañ ho torn ha da c'houlenn ouzhoc'h « penaos e kavit Iwerzhon ? » ne chom mui nemet un nebeud, ar re wellañ, ar wir vignoned. Hag e teu re all ivez, re lent marteze da vezañ deut davedoc'h en deiz kentañ, hag a anavez hag a gar hor bro koulskoude, hag a zo prest da reiñ harp hag ali.

Ar goulenn kentañ a vo graet gant hor c'henvroiz eo : penaos emañ kont gant ar yezh en Iwerzhon ? Neb a gredfe, o tont e Dulenn, klevout an holl o komz iwerzhoneg a rafe ar fazi a reas ar C'hembread-se a voe souezhet-mik o klevout galleg e-lec'h brezhoneg o tilestrañ e Sant-Malo. Ar yezh vroadel amañ a zo bet bountet pell betek un nebeut begoù-douar er c'huzh-heol hag en hanternoz, evel pa vije bet bountet ar brezhoneg betek Bro ar C'hap, Beg Sant-Vaze ha kornad Sant-Yann-ar-Biz. Tremenit un devezh e Dulenn : touiñ a rafec'h n'eus ket muioc'h a iwerzhoneg amañ eget ma'z eus a vrezhoneg e Naoned. Nemet merket e vez anvioù ar straedoù en div yezh, hag amañ ahont e kavit un enskrivadur bennak en iwerzhoneg.

Petra eta, emezoc'h, o deus graet Iwerzhoniz evit o yezh abaoe ma'z int dieub ?

An dud a gejit ganto a respont, uvel-tre, o deus graet nebeut, hag ar respont-se a ra deoc'h divinout o deus graet kalz. Fiziañs am eus en un den ha n'eo ket re blijet gant e ober.

Ur yezh ne varv ket buan. Adsevel a ra goustad. Ar pezh en deus saveteet an iwerzhoneg er c'hantvedoù tremenet, leziregezh an dud da gemmañ yezh, a zo hiziv ur skoilh bras war e hent. Anat eo n'eo ket en ugent vloaz e c'heller diskar ar saozneg amañ.

Komzet e vez ar yezh gant ar bobl e tammoù eus seizh kontelezh, tra ma'z eus div gontelezh ha tregont en enezenn. Ar Gouezelegva eo. Eno, ne ra ar yezh nemet kilañ. N'eo ket torret c'hoazh al lañs kemeret gant ar saozneg gwechall, hag e talc'h ar boblañs, ar merc'hed dreist-holl, da dec'hout diouzh an douaroù-se, ar re baourañ. Setu aze an tu fall, tu teñval ar skeudenn.

9

E pep skol eus ar vro dieub e vez desket iwerzhoneg. Ret eo gouzout iwerzhoneg evit tremen arnodennoù. En doare ma'z eus milionoù a dud yaouank barrek da lenn un tamm ar yezh vroadel, darn anezho barrek da gomz ha da skrivañ anezhi. Un toullad tud desket, ouzhpenn, o deus graet eus an iwerzhoneg yezh o spered ; en iwerzhoneg e komzont etrezo, e skrivont an eil d'egile, hag e savont oberoù. Setu aze an tu mat, tu sklaer ar skeudenn.

N'em eus gwelet skol ebet. Pezh a verkan amañ eo diwar glevout hepken. Ar yezh, a lavarar, a vez kelennet fall a-walc'h, gant mistri ha na ouzont ket mat anezhi a-wechoù ; ha na garont ket anezhi atav, a zo gwashoc'h. Ar skolioù-meur, hini g-Corcaigh, hini Dulenn ha Skolaj an Dreinded, (hep menegiñ Skol-Veur Béal Feirste) n'eus enno koulz lavaret nemet saozneg. Skol-Veur c'h-Gaillimh hepken a ro ar c'hentelioù en div yezh. Dre se eo diaes d'ur studier derc'hel mat d'an iwerzhoneg.

Koulskoude ez embanner kalz levrioù. Tro am boe da weladenniñ gant daou Vreizhad all ur stal-levrioù bras e-kreiz Dulenn. Eno e voemp degemeret gant unan eus skrivagnerien vrudetañ ar vro, An Seabnac, un den a gar, hag a zesk ar brezhoneg. Levrioù-skol peurgetket a ziskouezas dimp, ha levrioù evit ar vugale. Evit kement danvez a bleustrer warnañ er skolioù-bihan hag er skolioù-etre ez eus embannadurioù moulet-mat : levrioù deskiñ-lenn, jedoniezh, istor, douaroniezh, skridoù latin ha gresianek gant notennoù en iwerzhoneg, levrioù gant skeudennoù fentus evit ar vugaligoù, romantoù avanturioù evit ar grennarded.

Un ti, harpet gant ar Stad, a zo karget da embann levrioù er yezh vroadel. An **Gùm**, da lavarout eo « Ar Raktres », a reer anezhañ. Dre zibab an anv-se e felle d'e grouerien moarvat diskouez o doa c'hoant embann ur rummad levrioù hervez un urzh diazezet-mat.

Amañ emañ dirazon roll an oberennoù moulet, un 800 bennak e-kerz 20 vloaz : romantoù, pezhioù-c'hoari, levrioù-skol ha levrioùigoù-sonerezh an darn vuiañ anezho ; troidigezhioù e-leizh.

Mat pell'zo. Nemet An Gùm a vez kavet abeg ennañ, dreist-holl gant ar skrivagnerien yaouank. Ar pep muiañ eus al levrioù, emezo, a zo dizudi hag a c'hiz kozh. Ne glasker ket dre an troidigezhioù degas un adsked eus ar pezh a zo prizius ha dibar el lennegezhioù estren. Ha perak treiñ evel ma reer kalz muioc'h diwar ar saozneg eget diwar ar yezhoù all, pa c'heller kavout ar skrid saoznek marc'had-mat hep an disterañ trubuilh ? Ouzhpenn, goustadik ez a An Gùm gant e labour. Ar voulerien, a c'hounez kalz arc'hant o voulañ levrioù saoznek evit ar Saozon (a rank adembann o levrioù distrujet a-vern e-pad ar brezel), ne voutont traoù iwerzhonek nemet p'o devez amzer. Un oberenn a chom a-wechoù pemp bloavezh pe vuioc'h a-raok dont er-maez.

10

Evidon-me a gred ez eo mat An Gùm dreist-holl e-keñver ar vugale. Da vroudañ speredegezh ur vro, da grouiñ ul lennegezh yaouank, un dra all a vefe ret.

Pedet on bet da welout Kreizenn-Studi ar Werinoniezh er Skol-Veur. Skol-Veur Dulenn a zo ur savadur bras mein-benerezh, nevez ha kaer. Ar werinourien, avat, a zo lojet fall a-walc'h, e teir c'hambrig war ur solieradur uhel. Bleniet e voen gant an Aotrou Seàn O Sùilleabhàin, un den hegarat ha gouiziek. N'em boe ket ezhomm chom pell amzer eno da gompren e oan en ul lec'h a zo nebeut-tre diouto en Europa a-bezh.

Skiant ar werinoniezh a zo aet war-raok dreist-holl e Skandinavia. Va ambrouger a zisplegas din, eeun-meurbet, en doa tremenet e 1935 ur pennad-amzer e Sveden, da zeskiñ penaos pleustriñ war an danvez gant urzh, ha n'eo ket n'eus forzh penaos, evel ma veze graet en Iwerzhon betek neuze.

Setu penaos en em gemerer bremañ : ur roll-goulennoù a vez savet gant kalz a aked diwar-benn kudenn pe gudenn ; kaset e vez ar roll-se da enklaskerien e pep korn. Ne vern piv a c'hell bezañ enklasker, nemet ez eus tri pe bevar enklasker a vicher, paeet gant ar Greizenn, ha na reont nemet al labour-se. Skoazell dreist a zo bet roet gant ar skolaerien, ha gant ar vugale-skol ivez. E skolioù 'zo, mare pe vare, e vez lakaet ar vugale da respont ar goulennoù. An holl respontoù, skrivet war gairer, en iwerzhoneg pe e saozneg, a vez kaset d'ar Greizenn. Eno e vezont renket, strollet ha keinet. Tamm-ha-tamm e reer fichenoù diwarno.

Rezadoù ha rezadoù eus al levrioù dornskrivet-se a c'holo ar mogerioù. Ul levraoueg pinvidik a zo ivez, enni levrioù-gwerinoniezh a bep bro. Kevrenn Vreizh n'eo ket dister, met treutik evelato.

Ur wech an amzer e vez embannet un oberenn bennak gant ar Greizenn-Studi, levrioùigoù da heñchañ ar furcherien, pe levrioù brasoc'h, evel « A Handbook of Irish Folklore », gant Seàn O Sùilleabhàin, deut er-maez e 1942, ennañ 700 gajenn.

Anat eo ez eus amañ ur skouer evidomp. Ur wech hepken, a gredan, ez eus bet klasket e

Breizh unvaniñ hag urzhiañ labour ar werinourien, gant ar Framm Keltiek, ur pevar pe bemp bloaz a zo bennak. Ha n'eus bet sevenet netra a-zoare.

11

Echuiñ va lizher kentañ a fell din aman. Miz 'zo e krogis gantañ Hag endeo e santan em bije tra pe dra da gemmañ ennañ. Ne rin ket. Ne dalv ul lizher nemet dre ma tiskuilh menozioù ha barnedigezhioù un den d'ur c'houlz bennak. Menozioù ha barnedigezhioù disheñvel a zisplegin en ul lizher all marteze.

Roparz HEMON.

NOTENNOù

I. Setu amañ niver an iwerzhonegerien, hervez niveradeg 1936

(sifroù 1946 n'int ket bet emhannet c'hoazh).

Tir Chonail .. 43.946

Muigheo.. . . . 43.287

Gaillimh.. . . . 67.276

An Clàr 17.124

Ciarrai.. . . . 35.024

Corcaigh 20.570

Portlàirge 11.111

238.338

II. An daolenn da heul a ziskouez ar pezh a zo bet moulet gant An Gùm betek 1945. Ar sifroù a ro niver al levrioù,

Doare -	Savet Troidigezhioù En holl			
	rag-eeun			
romantoù...	63	131	194
buhezskridoù...	24	15	39
beajoù ha douaroniezh	..	12	6	18
		73	101	174
barzboniezh	39	1	40
arnodskridoù	24	3	27
levrioù-hugale	33	80	113
levrioù-skol	39	17	56

levrioù all	32	13	45
sonerezh	113		113
rolloù-levrioù . . .		3		3
dornskridoù kozh ..	.	12		
			<hr/>	<hr/>
En holl		467	367	824

Setu amañ roll an troidigezhioù :

diwar an alamaneg	18
ar galleg	33
ar gresianeg kozh	4
an italianeg	3
al latin	2
ar poloneg	1
ar portugaleg	1
ar rusianeg	4
ar saozneg	296
ar spagnoleg	5
en holl :	367

GOUDE BEZAÑ GWELET IWERZHON

Feiz kristen Iwerzhon a zo brudet-bras er bed a-bezh. E-doug kantvedoù ha kantvedoù o deus bet da stourm kalet evit chom feal da Feiz Sant Padrig hag o zadoù kozh. Kaer a zo bet ober, chomet int divrall evel reier kalet o aochoù.

Lorc'h a c'hell bezañ, a-dra-sur, er Vretoned, gant o feiz kristen. Ur Breizhad avat, o tont eus Bro-Iwerzhon, a rank ansav, emañ Breizh, evit ar pezh a sell ouzh ar feiz kristen, pell war-lerc'h Eire, an Enez C'hlas bet anvet, gant kement a wirionez, enezenn ar Sent. Ur c'halz eus ar Sent o deus kristenaet hor bro a zeu ac'hano, ar pezh a ra d'ur Breizhad kaout atav kalz plijadur p'en devez tro da vont du-hont. Ar blijadur-se am eus bet; ha morse n'hec'h ankounac'hain.

Ur moraer breizhat, bet e-pad pell oc'h ober mone-done etre Dulenn hag an Havr-Nevez, a lavare din penaos, en dro gentañ ma tegouezhas e Dulenn, kentañ 'weljont war o batimant, eo un Iwerzhonad, gant ur gartenn eus kêr, deuet da ziskouez dezho an hent da vont betek an iliz tostañ. Kement-se, emezañ, en devoa o skoet, hag a lavare dezho peseurt tud a oa o chom er vro-se. Evel-se ivez, ez eus bet lavaret din, e oa bet souezhet, hag evel gwall-skoueriet ganeomp patronez an ostaleri m'edomp o chom enni e Dulenn, dre ma ne oa ket bet hor goulenn kentañ outi da c'houzout hent an iliz tostañ hag eurioù an oferennoù da sul ha war ar pemdez. Amañ e verzomp ar c'hemm bras a zo etrezomp hag hor breudeur tramor.

Hervez ar pezh a zo bet lavaret din du-hont, ez eus e Bro- Eire, en amzer hiziv, etre 90 ha 95 dre gant a gatoliked, hag etre 10 ha 5 dre gant a brotestanted. Bihan eo eta niver ar re-mañ e-skoaz niver ar re all. Seblantout a reont, avat, en em glevout mat an eil re gant ar re all. Un dra a zo hag hon lakaas souezhet : ne vefe ket du-hont a dud digredenn, hag un aner eo klask mont da chom er vro ma 'c'h ansaver ne greder nag e Doue nag en diaoul. Bezit katolik pe bezit protestant, met na vezit ket difeiz.

Skoet e vez unan, a-dra-sur, gant niver bras an dud a vez atav war-dro an ilizoù katolik, zoken war ar sizhun. Kontañ 'reer e vez an dekvet eus an dud en oferenñ bemdez, hag e gwirionez tro am eus bet da welout va-unan pegen leun e vez an ilizoù bep mintin gant an dud a zeu, gwazed koulz ha merc'hed, da glevout an oferenñ ha da gomuniañ. Darn zoken a weler c'hoazh, goude, oc'h ober hent ar groaz gant ur feiz virvidik, pezh ne weler nemet ral a wech en hor Breizh.

13

Evel e Breizh, e vez du-hont prezeget retredoù pe misionoù bep an amzer, er parrezioù, hag un Tad misioner a lavare din, eo ral gwelout unan bennak, nemet protestant e ve, o chom hep dont.

An doujañs-se hag ar garantez o deus d'ar relijion, a ziskouezont e pep lec'h. Ne dremenint ket hep saludiñ na dirak ur groaz, na dirak un iliz katolik, na dirak ur beleg, dreist-holl m'emañ gantañ e soutanenn, rak du-hont ar veleien hag al leaned er-maez eus o ilizoù, a vez gwisket koulz lavarout evel an holl, nemet e vezont atav e du. Bez' e c'hellan lavarout, am eus ranket evit respont d'ar re am salude, sevel ken alies va zog, ma sonne ouzhin va brec'h, zoken er c'harterioù, evel er porzh-mor hag el labouradegoù, ne vez enno nemet micherourien.

An darn vrasañ eus ar skolioù a zo dalc'het gant leaned ha leanezed. Skolioù ar baotred dreist-holl gant Breudeur eus ar vro anvet « Christian Brothers » (Breudeur Gristen) daoust ma 'z eus ivez kalz a skolioù gant ar Vreudeur de la Salle. An holl skolioù, protestant koulz ha katolik, gant ma kelennint ar gouezeleg hervez ar roll-stad, a vez skoazellet gant ar gouarnamant, hag a zo en e benn kristenien vat. Ne gaver ket amañ, war dachenn an deskadurezh, evel e Bro-C'hall, an enebiezh daonet etre daou rumm tud, hag a laka en hor bro-ni kement a freuzh hag a gasoni.

D'ar sul 27 a viz Gouere e voe kanet oferenñ ar C'hendalc'h dirak arc'heskob Dulenn, an Ao.

O' Kelly, Rener ar Republik hag an An. de Valera... Arc'heskob Kerdiz, an Ao. Mac Grath a brezegas e gouezeleg hag e kembraeg. Breizhiz, Skosiz, Manaviz, Kembreiz, Kerneviz hag Iwerzhoniz a voe eno mesk-ha-mesk, en oferenn-se. Pebezh unvanidigezh ! Pegen nerzhus ne vefemp-ni ket Kelted a bep bro, ma karfemp atav en em glevout evel e kendalc'h Dulenn. En deiz a hiziv, unan e-unan n'eo netra, met holl unanet netra na den ne virfe ouzhomp da dizhout hor pal.

Visant SEITE.

Ar Gouelioù e Kendalc'h Dulenn

Div lodenn a oa e labourioù ar C'hendalc'h-se : ar bodadegoù-studi hag ar gouelioù.

Bez' e oa meur a abeg a frealz hag a from, evidomp Breizhiz e-doug ar re gentañ : an doare kalonek ma 'z omp bet degemeret ; al lec'h roet da gudennoù Breizh ; ar berzh a reas prezegenn Roparz Hemon; ar mennad kinniget, da c'houde, gant ar C'hembread Ambrose Bebb evit difenn ar brezhoneg, da skouer.

E-doug an amzerioù diskuizh : abadennoù gant sonerezh ; kan, koroll, c'hoariva da vare degemerioù aozet amañ hag a-hont, ez eus bet ivez peadra plijus evidomp. Ret eo merzañ, da gentañ holl, pe temz-spered a oa gant ar gouelioù-se : un temz-spered disheñvel a-walc'h diouzh an hini a vez gant kendalc'hioù pe abadennoù bras a vez e Breizh, bremañ. Eno, gouzout a rit awalc'h, eo ret lakaat da dremen war al leurenn an niver brasañ a dud pe strolladoù, d'ober ar muiañ a draoù (a-wechoù div, teir gwech an hevelep traoù) hag alies a vez feuket hini pe hini dre ma n'eo ket chomet e-pad pell a-walc'h pe dre ma n'eo ket bet lakaet da dremen araok pe goude hemañ-eñ. Doareoù heñvelaet diwar c'hizioù briz-c'hoarierien a vicher hag a ra kement-se evit gonid o buhez, ha ne zereont ket, avat, da abadennoù a dlefe bezañ o fal kentañ sevel brud d'ar Vro e kement stumm.

Ma ! na zalc'homp ket gant rebechoù, ha gwelomp kentoc'h ar skouerioù da dennañ eus pezh a vez graet el lec'hioù all.

Evit abadennoù kendalc'h keltiek Dulenn, ne seblante ket bezañ netra prientet striz en a-raok. E-touez tud ar C'hendalc'h eo e veze kemeret ar ganerien, sonerien, pe gorollerien. Pedet e veze an holl zileuridi evit an degemer a roe dezho rener ar stad, pe unan all bennak, ha neuze an hini a oa e karg eus ar pennadoù-arvest - unan a-zoare, gwir eo - a save ur roll war an taol hag a bede an dud dibabet gantañ da ganañ, c'hoari telenn pe gorollañ... hag aes tre e veze bleniet an traoù, hag an abadenn en em zibune brav ha kompez. Ar menoz arzel, an dudi gwirion a save neuze ken aes all, ha donoc'h ha kreñvoc'h a-se dre ma oa diwar un danvez hag a glote gant ene don ar selaouerien, hag int Kelted holl, hag an tonioù, ar binvioù-seniñ, ar rolloù, ar c'homzoù gouezelek, kembraek, skosek pe vreizhek.

15

Ul liamm speredel dreist a unane neuze ac'hanomp holl, a eeunae an darempredoù, a entane ar selloù hag ar mouzc'hoarzoù kalonek a eskemmer evel ma veze bet etre tud en em anaveze a-bell-zo... hag en **em** wele, darn anezho, koulskoude, evit ar wech kentañ.

Kement-se a oa meizus adaleg an nozvezh kentañ, e gouel degemer graet en University College. Ret deoc'h, soñjal avat, e pe liv e c'helle bezañ hor sonjoù d'ar mare-se : bezañ en Iwerzhon, un toullad Breizhiz a galon a-gevred, ha dont en ul lec'h evel ar Skol-Veur-se !

Kaer ha kempenn eo ar savadur anezhi (evel ma seblant bezañ kempenn kêr Dulenn, kreiz-kêr d'an nebeutañ,... nemet aze e vimp kaset war un hent all, ha re bell, ma komzan deoc'h eus kêr Dulenn...) daoust mar deo eeun awalc'h he stumm dre vras. E diabarzh : trepasoù ha diri ledan leurennet e maen-marbr eeun pe varellet ; dorioù e koad kaer ; salioù bras, burevioù ha salioù degemer sklaer hag aes. Degouezhout eno, ha deiz c'hoazh (d'an hañv e vez berr-tre an noz e Bro-Iwerzhon ha ne vez tro ebet teñval-mik, zoken) degouezhout eno hag an nebeut ac'hanomp gwisket e giz Vreizh, ambrouget gant un den brudet en istor Iwerzhon ; pignat gant an diri bras ha dont er sal e-lec'h e vezer degemeret gant renerien ar C'hendalc'h : gellout a rit soñjal pebezh munutenn a from evidomp !

Ha diouzhtu touellerezh ar sonerezh, an tonioù keltiek a ya an dason anezho war-eeun beteg don hor c'halon.

Bez' e oa eno liv ha blaz ar gouel gant pep tra ha gant pep den. N'eo ket e kinkladurioù - ne oa ket, koulz lavarout - en aer kentoc'h marteze, war dremmoù an dud, en o dalc'h. Bez' e oa eno tud wisket e giz etrevroadel an amzer-vremañ : porpantoù du gant ar baotred, saeoù hir gant ar merc'hed. Bez' e oa ivez Skosiz gant ar c'hilt marellet hag Iwerzhoniz gant ur gwiskamant dam-heñvel, adnevezet gantê : ar c'hilt e liv eeun - glas-gwer - gant ur porpant du a zo gantañ stumm dilhad-gouel. Ha bez' e oa ivez un nebeut merc'hed gwisket e gwenn holl, saeou hir e gloan eus ar bravañ, brodet a dresadennoù keltiek e liv tener. Gant o blev melen, o daoulagad glas, bez' e oant e gwirionez heñvel ouzh pezh a soñjer a dlee bezañ ar voudiged, en amzer ar mojennoù kozh. Ha kement-se a zeue da vezañ anatoc'h c'hoazh pa bignjont war al leurenn peder anezhê, gantê pep a delenn iwerzhonat ha pa en em lakajont da c'hoari ha da ganañ a-gevred. Azezet hag o zelenn war o daoulin, sonn o dalc'h, o fenn savet, evel o c'hervel an awen, bez' e oant aze e gwirionez, c'hoarezed bev Viviana pe unan all bennak eus doueezed an henamzer.

16

Un dro all c'hoazh ez omp bet teneraet gant unan eus an telennoezed-se : en un abadenn all e oa, ha homañ a oa hec'h-unan o c'hoari an dro-se. Goude ur son kentañ, iwerzhonat, setu ma lavaras e gouezeleg ha da c'houde e brezhoneg, a yae da ganañ, evidomp-ni, Breizhiz, ar son brudet « Ar re c'hlas », hag o kregiñ gant ur vouezh tener, hep disterañ tamm ardoù gant ar gerioù anavezet : « Ar chas a glevan o harzal... » hag an holl evel bamet gant kaerder dreist ar c'han... hag ar Vreizhiz, diskanañ war he lerc'h gant mouezhioù dam-vouget gant an deneridigezh. Da c'houde, e-doug hor mone-done etre daou lec'h, en hor baleadenn war ar maez ha pa en em gavemp un toulladig a-gevret, son « Ar re c'hlas » eo a veze mouskanet ha talvezout a rae evidomp, kalz gwelloc'h eget gerioù, da eskemm hon trivliadoù. Lusk an tonioù kozh, liamm kuzh ha dreist etre Kelted.

Erwaneg GALBRUN.

EN-DRO DA GENDALC'H DULENN

Siwazh n'hellan ket diskouez deoc'h evel e c'hellfe hen ober ur barzh, bravder Iwerzhon, gwelet a bell diwar c'horre bourzh al lestr, bannoù heol o sklerijennañ an aod hag ar menezioù glas-gwer tro-war-dro Dulenn...

Ar valtouterien hag a zigoras hor malizennoù en ur ziskenn war ar c'hae o doa war o c'hasketenn an delenn aour, arouez ar gargidi-stad ; gouezeleg a oa skrivet war girri an trein e lec'h ma pignomp evit mont betek kêr : setu an traoù a ziskouezas dimp e oamp erru en ur vro geltiek dieub, goude bezañ kuitaet hor bro c'hallekaet.

17

Ne fell ket din kontañ deoc'h amañ dre ar munud roll ar c'hendalc'h ; re hir e vefe. Ar pezh e fell din displegañ deoc'h eo kentoc'h an traoù bet graet er c'hendalc'h hag en-dro dezhañ hag a zo aet don en hor spered.

Da gentañ holl ret merzañ pegen karantezus e voe an degemer graet d'ar Vretoned e Dulenn gant an Iwerzhoniz hag ar Gelted all.

Ret bezañ klevet ar stlakadennoù-daouarn er bodadegoù pa veze komzet eus Breizh, ret bezañ gwelet an droug hag a save e-touez an holl Gelted pa gomzed eus ar Vretoned heskinet hag eus diaesterioù graet d'o yezh vroadel evit kompren penaos e vez karet hag enoret Breizh er broioù tra-mor.

En tu all d'ar mor ec'h anavezer kudenn Vreizh kalz muioc'h bremañ eget er bloavezhioù tremenet. Ar Vretoned war an oad a oa deuet c'hoazh da Iwerzhon araok ar brezel a zo bet souezhet gant se.

Embannadurioù ar Gembreiz diwar-benn Breizh o deus graet kalz evit distrujañ levezon hor gwaskerien.

An dud yaouank, dreist-holl, a zo dedennet gant kudennoù Breizh. Un toulladig anezho a heuilh kentelioù brezhoneg graet e Dulenn pep sizhun gant Bretoned. Studierien o deus goulennet ouzhomp kas dezho levrioù evit deskiñ brezhoneg.

Un dra vat e vefe lakaat levrioù brezhoneg e gwerzh en ul levr di gouezelek e Dulenn. Klask a rin an tu d'heñ ober.

Ar c'hendalc'h a voe ken frouezhus evit ar re all hag evit ar Vretoned. An Iwerzhoniz, da skouer, a zo o klask dirouestlañ kudenn unvanidigezh o yezh. Prezegen Roparz Hemon bet graet e Trinity College diwar-benn an doare-skrivañ nevez a zo bet evito un diskuliadenn. Ret ansav o deus klasket ar Vretoned digeriñ an hent, war meur a dachenn. I eo, o deus kinniget d'ar Gelted all ober ar c'hentañ ar gwellañ troidigezhioù eus levrioù-skol, yezhadurioù ha geriadurioù pep bro geltiek.

N'ho devo mui ezhomm ar Gelted implijout galleg ha saozneg evit deskiñ ur yezh keltiek.

Ma teuomp a-benn da seveniñ an oberenn-se er bloavezhioù da zont e vo startoc'h-startañ an darempredoù etrezomp, hag unvanidigezh Keltia a yelo war wellaat. E gwirionez an hent a zo bet diskouezet abaoe pell 'zo p'en deus skrivet Fañch Elies e « Yezhadur berr ar C'hembraeg », bet embannet gant Gwalarn.

18

O vezañ ma komzan eus unvanidigezh Keltia, e fell din lavarout ur ger diwar-benn un darvoud a-bouez bras a zo c'hoarvezet e-pad kendalc'h Dulenn :

Un nebeut tud yaouank : Iwerzhoniz, Kembreiz, Skosiz, Manaviz, Breizhiz en em vodas e Trinity College er-maez eus ar C'hendalc'h.

Divizet eo bet etrezo eus krouidigezh ur Strollad Yaouank Etrekeltiek.

Pal ar gevredigezh a zo bet diazezet hag ur strollad-bleniañ a zo bet dilennet.

En niverenn a zeu e vo komzet en un doare hiroc'h ha resisoc'h diwar-benn menozioù ar strollad nevez se.

Ul lec'h a zo bet kinniget d'ar re yaouank e Trinity College evit derc'hel o bodadennoù, labourat ha studiañ. En teir c'hambred-se, dindan skeudenn ar c'helt meur Douglas Hyde o deus en em gevredet ar Gelted yaouank evit mont war-du dieubidigezh o broioù hag unanidigezh Keltia...

Ar pezh a rae diouer d'an dileuridi e-pad ar C'hendalc'h eo ur yezh etrekeltiek. An darn vuiañ eus ar Vretoned ne ouient ket mat ar saozneg ha diaes e oa dezho heuliañ ar brezegennourien. Divizet eo bet diwar-benn talvoudegezh ur yezh etrekeltiek. Ne voe ket dirouesetlet ar gudenn, hogen, a dra sur, e vo dibabet er bloavezhioù da zont unan eus ar yezhoù keltiek da yezh etrekeltiek.

Kendalc'h keltiek Dulenn 1947 en deus diskouezet sklaer e felle dezho an dileuridi, ha war o roudoù an holl Gelted en em strollañ startoc'h-startañ evit difenn ha pinvidikaat o sevenadur.

Ra vo Breizhiz e-touez ar re galonekañ er stourm Santel.

Erwan TYMEN

Eost 1947.

AN IWERZHONEG

(1)

II. Kentañ amzer an Emsav evit ar yezh

Ouzhpenn kant vloaz 'zo, Seoigh (Joyce) hag O'Donnovàin a oa o labourat evit ar yezh. O'Donnovàin a dreuzas pep troatad eus ar vro, o tastum anvioù-lec'h hag henvoazioù. Lenneien a zo bremañ o pleustriñ war an niver bras a zornskridoù chomet war e lec'h. Seoigh a zeskas, drezañ e-unan, hen ha krenn-iwerzhoneg ; studiañ a reas ar Pevar- Mestr, dornskridoù war Istor Iwerzhon e-pad 1.200 vloaz, da lavarout betek Tec'hadeg an Dierned. Seoigh a skrivas ouzhpenn ul levr brudet war Istor ar Vro.

Tomàs Davis, rener entanet « Iwerzhon Yaouank » a ziskouezas d'ar vro ar c'holl a rafed en ur lezel ar yezh da vervel. Siwazh, ne selaoujod ket anezhañ : dallet e oa atav an dud gant D. O'Connell. An Ao. 'n Arc'heskob Mac hEil a savas ivez e vouezh evit difenn ar yezh : kouezhañ a reas e gomzoù e skouarnoù bouzar.

War-lerc'h e teuas Naonegezh Vras ar bloavezhioù 46, 47, 48 gant he reuz, ha tec'hadeg milionoù a dud. Adalek neuze, betek 1856 ne voe buhez vroadel ebet ken. Er bloaz-se, Rossa a savas ar « Phoenix Club » : e bal a oa deskiñ yezh hag istor Iwerzhon. Buan e teuas ar « Phoenix Club » da vezañ ur strollad politikel hag, ur wech muioc'h, e oa ret d'ar yezh gortoz.

« Cumann Cosanta na Gaeilge » pe « Strollad evit mirout ar Yezh », diazezet e 1876 ne reas nemet embannadur un nebeut skridoù en iwerzhoneg. Ur strollad lenneien e oa, o labourat dre hanterouriezh ar saozneg.

Da c'houde, an emsav politikel gant Bodad-Emglev an Douar (Land League) ha Strollad Emrenerien Parnell (Home Rule) a implijas holl nerzh hag holl amzer ar Stourmerien. Goude diskar Parnell, hag e varv e 1891, ar bobl, hep skoazell, digalonekaet ha c'hwerv, a en em droas, ur wech ouzhpenn, war-du ar yezh. D'an ampoent, ne oa gallus labourat nemet war an dachenn-se.

(1) s. o Al Liamm, niv. 4, p. 33. O Mac Uilis : An Iwerzhoneg.

20

E 1893, an Dr Douglas Hyde, skoazellet gant Eoin Mac Neill hag an Tad O'Gramna (O'Growney) a aozas ar Stroll-Emsav Gouzelek (Gaelic League). D'ar penn kentañ ne daolent ket re a evezh ouzh an doare-skrivañ, met treiñ a raent o holl nerzh evit saveteiñ ar yezh evel ma oa komzet. Sevel a raent skolioù ha c'hoarivaoù. Arc'hant a veze dastumet evit kas prientourien baet er C'haeltac'ht, koulz hag er c'hornioù-bro saoznekaet. E pep lec'h, e tiwane skourroù eus ar Stroll-Emsav. An diaesañ tra ' oa kavout kelennerien ha levrioù-skol. Dont a reas ar skrivagnerien da harpañ ar Stroll-Emsav. An Tad O'Gramna a savas, ur yezhadur, buan anavezet mat, ha levrioù-skol all. Pa oa ur paotrig yaouank, an Tad O'Gramna ne ouie ket zoken e oa ur yezh iwerzhonek. An Tad Dineen a aozas ar Geriadur Bras, a zoug bremañ e env. Kentañ embannadurioù « Cumann Cosanta na Gaeilge » a sikouras da ziazezañ an doare-skrivañ ; daoust d'o doare kozh, ha marteze en abeg da-se, e oant pell diouzh ar yezh komzet, ha ne zalc'hent kont ebet eus ar rannyezhoù.

Lavaret hon eus e kouezas komzoù an Ao. 'n Arc'heskob Mac hEil e skouarnoù bouzar. Koulskoude un den o c'hlevas, ur studier a renk izel eus kloerdi bras Maynooth. Hennezh 'oa ar

beleg a zeuas da vezañ an Tad Peadar O'Laoghaire. Gouestlañ a reas e vuhez da yezh e gavell ; meur a levr brudet en deus skrivet, pe dattet eus ar c'hrenn-iwerzhoneg, pe droet. Marteze e c'heller tabatal diwar-benn talvoudegezh lennegel e oberoù, hogen chom a ra ur stivell vev-buhezhok a iwerzhoneg yac'h, pinvidik, hag a droioù-lavar dispar. Dre vras, war e oberoù, ez eo diazezet yezhadur an iwerzhoneg a-vremañ.

Un den all, gwelloc'h awenet, hogen disteroc'h skrivagner, a heulias an Tad O'Laoghaire : hennezh eo Padraig Mac Piarais, a grouas Skol St Enda hag a aberzas e vuhez e 1916.

An Dr Douglas Hyde, daoust d'an holl draoù en doa d'ober, a gavas an amzer da zastum hag embann « Kanoù-karantez a Vro-Gonnac'ht » (Love Songs of Connaught) (1). Gant Douglas Hyde e tistroomp d'ar Stroll-Emsav Gouezelek. Kentañ kendalc'h, pe « Oireac'htas » ar Strollad a voe dalc'het e 1897. Gouelioù 50vet deiz-ha-bloaz an Oireac'htas a zo bet lidet en hañv-mañ e Dulenn.

(1) s. o. Gwalarn niv. 90. « Pa gan ar galon », kanennoù a garantez Bro-Gonnac'ht, lakaet e brezhoneg gant Farnachanavan, a-ziwar levr Douglas Hyde, « abbràin gràdh chuige Connacht »,

21

Kannaded eus pep skourr ar Stroll-Emsav a en em vod bep bloaz en ur gêr pe eben eus ar vro da genstrivañ war ar varzoniezh, an distagadur, ar c'han, ar c'hoariva, ar c'horoll, ar seniñ-biniou, ar c'hurling, ar sportoù iwerzhonat. Bez' ez eo diskouezadeg vras buhez kevredadel ha sevenadurel ar bed gouezelek.

Er bloavezh 1897 e oa savet ivez ar c'hentañ skolioù-hañv e Gaeltac'ht Bro-Voue, Bro-Gonnac'ht ha Bro-Ulad. Studierien a yeas da zeskiñ ar yezh e-pad ur miz pe zaou, e touez an dud a gomze anezhi. Lojet e oant ganto, hag e-pad an deiz e heulient kentelioù iwerzhonek ar skol. D'an noz e veze ur « C'héili » pe abadenn kan ha sonerezh.

Talvoudegezh kevredadel ar skolioù-hañv a zo bet mat, dre ma en em veske tud eus pep korn-bro, paour ha pinvidik. Siwazh, lod eus ar skolioù-hañv o deus silet saozneg e tachennoù lec'h ma ne veze komzet nemet iwerzhoneg; ha bremañ lod eus an tachennoù-se a zo kollet evit ar yezh. An dra-se n'eo ket degouezhet alies evel-just, hag ouzhpenn ar skolioù n'int ket atav kablus. Meur a skol-hañv a ya c'hoazh en-dro, hag a ra labour vat. Unan anezho, e Waterford, he deus dalc'het bev ur C'haeltac'ht vihan eno. Ar skol-se a zo bremañ ur skol-etre e-pad ar bloaz, ha graet he deus labour dispar.

D'an hevelep mare, ar Stroll-Emsav a reas un trouz bras evit kaout an iwerzhoneg er skolioù-izel hag er skolioù-etre. An Dr Douglas Hyde a en em gannas evel ul leon. Bodadegoù a reas e pep lec'h. Mont a reas da Vro-Amerika ; stourm a eure a-enep holl enebourien ar yezh, an Iliz zoken. En dibenn e teuas an trec'h gantañ war meur a boent. E bloavezhioù kentañ ar c'hantved-mañ e oa roet an aotre d'ar Stroll-Emsav kas skolaerien er skolioù-izel evit kelenn an iwerzhoneg un eurvezh bemdez. Ne c'hellas ket ar Stroll-Emsav tennañ ar pep gwellañ eus an aotre-se, dre ziuver a arc'hant hag a vistri-skol. E lod eus ar skolioù ne veze nemet div eurvezh bep sizhun. Meur a zen, anavezet mat bremañ, evel ar Senedour « An Seabhad », skrivagner, a reas ar vicher a gelenner a skol da skol. Er C'haeltac'ht, al labour-se 'oa eus an talvoudusañ, dre ma veze a-raok kenteliet pep tra e saozneg : ar skolidi, tud kozh en deiz a hiziv, a zeske skrivañ un tamm saozneg fall, hogen ne oant ket gouest da rannañ ur ger ; diouzh un tu all, komz a raent iwerzhoneg ha divarrek 'oant zoken da skrivañ o anv er yezh-se. Trugarezh da skolaerien ar Stroll-Emsav ez int deuet a-benn da lenn ha skrivañ un tamm iwerzhoneg.

D'an hevelep mare, Renerezh an Ti-Post a asantas kas dre ar vro a-bezh al lizhiri gant ar chomlec'h en iwerzhoneg. Jubennourien a oa implijet evit ober war-dro al lizhiri-se. An diskleriadurioù ret da skignañ anezho a oa lakaet e saozneg war ar golo, gant liv ruz. Hiziv c'hoazh, an aotre-se a dalvez evit c'hwec'h kontelezh an Hanternoz, dre n'emañ ket an Ti-Post dindan beli

E 1908, e teuas an trec'h war daou boent all. Evel ma ouzer, e oa ensellet skolioù-etre ar vro gant Breuriezhañ ar C'helennerezh-etre (Intermediate Education Board) a zibabe ar studioù, rene an arnodennoù ha roe donezonnoù d'ar skolioù o tegemer he reolennoù. An traoù a zo en hevelep stad hiziv. Ret eo lavarout ne oa ket, ha n'eus ket atav, skolioù-etre e dalc'h ar Stad en Iwerzhon, na zoken e Breizh-Veur. Er bloaz 1908 eta, goude trouz ha tabut, Breuriezhañ ar C'helennerezh-etre, a aotreas degemer an iwerzhoneg da eil yezh er skolioù hag evit an arnodennoù e-lec'h ur yezh estren all. Sevel a reas kentelioù hag ec'h embannas levrioù-studiñ. Da gentañ e oa kuzhet kelennerzh an iwerzhoneg dindan ar ger « keltiek ». Ar Vreudeur Gristen (Christiân Brothers) a reas un implij eus ar c'hentañ eus an aotre roet. Embannet e voe ganto diouzhtu levrioù-skol, poelladennoù hag ur yezhadur. D'an hevelep bloavezh Hen-Skol-uhel ar Roue (Old Royal University) gant he skourroù e Dulenn, Korkaig ha Gailliv, a zegemeras reolennoù nevez. Hec'h anv a zeuas da vezañ Skol-Veur Vroadel Iwerzhon (National University of Ireland). Ur reolenn a c'hourc'hemenne e oa ret da bep studier iwerzhonat gouzout ar yezh vroadel evit tremen ar Vachelouriezh.

Setu ar pal tizhet gant ar Stroll-Emsav, neuze e-kreiz e vrud hag e nerzh : hogen Strollad an Emrenerien (Home Rule), ar Brezel Bras, hag Emsavadenn 1916 a implijas neuze nerzhioù ar vro. Ar Stroll-Emsav a gollas tachenn. An Dr Douglas Hyde, en doa savet anezhañ a-nep-tu e-keñver ar politikerezh hag ar Gredenn, a welas ne c'helle mui e zerc'hel er-maez eus pep politikerezh, eus pep stourm. Reiñ a reas e zilez.

Ar Stroll-Emsav, en deiz a hiziv, n'eo nemet ur skeud eus ar pezh a oa gwechall, hag e garg a zo bet kemeret gant strolladoù ha kevredigezhioù all. Koulskoude al labour dispar graet gantañ, hag an had strewet er bloavezhioù kozh o deus douget un eost fonnus, ha dre-se al labour a c'hell hiziv mont war-raok.

III. Ar Gouarnamant hag ar Yezh

Goude brezel an Dieubidigezh e teuas ar Feur-Emglev, ha d'e heul ur Stad, koulz lavaret dieub evit peder-femvedenn an enezenn. Dont a reas an iwerzhoneg da vezañ ur yezh-stad. War-lerc'h bloavezhioù a reuz, ar vro a oa skuizh-marv ha koulskoude he doa da c'houzañv c'hoazh ur brezel-diabarzh, berr a-drugarez Doue.

N'eo ket aes ober eus yezh niver bihanañ ar Vroiz alies hanter-zesket ur yezh-stad. Ret eo ober muioc'h eget moulañ timbroù-post, pe oberiañ pezhioù-moneiz gant engravadurioù nevez. Labour ar Stad hag adsavadur ar vro a oa da vezañ kaset da vat gant kargidi ne anavezent ket ar yezh, dreist-holl ar re goshañ anezho. A-hend-all ur c'hargad a renk uhel ne c'hell ket ober ul labour diaes en ur implijout ur yezh dianav dezhañ en deiz a-raok. Koulskoude, adalek ar penn kentañ, lod eus ar Ministerioù evel hini an Deskadurezh, ha burevioù evel re ar Breujoù (Dàil) a zeraouas da labourat dre an iwerzhoneg. Kargidi Ministrdi an Deskadurezh a zo, dre vras, en deiz a hiziv, iwerzhonegerien. Ministerioù 'zo a chom pell a-dreñv e-keñver ar yezh : siwazh ! diaes eo ober a-hend-all a-wechoù.

Ar Breujoù a voe diouzhtu pourvezet gant jubennourien a-berzh-stad evit lakaat en iwerzhoneg al lezennoù nevez ha treiñ ar prezegennoù saoznek. Bez' e oa er bodad-se lenneien, iwerzhonegerien a-vihanik, evit an teir rannyezh vras. Dont a reas ar bodad da vezañ un ensavadur talvoudus-meurbet.

Jubennourien a-berzh-stad a voe implijet el lezioù-barn e pep lec'h : pep barner o labourat er

C'haeltac'ht ha pep hini nevez anvet a zlee anavezout ar yezh.

Un archerezh nevez a voe savet, ar « Garda Siochána » ; er C'haeltac'ht, an archerien a zle komz iwerzhoneg hepken : difennet krenn eo dezho ober gant ar saozneg el lezioù-barn pe evit skrivañ o danevellou.

An Arme Vroadel a reas ur rejimant a iwerzhonegerien, ha kastizet e oa ar soudard a ranne ur ger e saozneg.

Ar rejimant-se hag archerien ar C'haeltac'ht o deus a-gevret skoazellet desevel an iwerzhonegerien a-vihanik hag unvaniñ ar rannyezhoù dre ma teue o izili eus an holl C'haeltac'htioù.

Bemdez e c'heller klevout gouezeleg war wagennoù Radio-Eireann. Marteze n'en ket dreist talvoudegezh ar skingomz dre ma 'z eo ken aes klevout Radio Vro-Saoz. Diouzh un tu all, n'eus nemet un nebeut ardivinkoù e tiegezhioù ar C'haeltac'ht.

An embannerien ne voulent nemet levrioù-skol, sur ma oant d'o gwerzhañ : lezel a raent a-gostez al levrioù all a rae diouer koulskoude. O welout kement-se, ar Gouarnamant a zigoras un ti-embann nevez « An Gùm ». Embannet e vez gant « an Gùm » a bep seurt levrioù e gouezeleg, gant ma 'z int talvoudus. An holl vizoù a zo paeet gant ar Gouarnamant.

24

Pa 'z eus gonid gant ul levr, an oberour en deus e lodenn. Kantadoù a levrioù, war bep seurt kudennoù, a zo bet embannet betek hen, adalek levrioù-skol war ar skiantoù, ar jedoniezh, ar c'heginerezh, h.a., betek romantou-polis ha levrioù skeudennet evit ar re yaouank, hep ankounac'haat al levrioù-istor, lennegezh ha pezhioù-c'hoari. Ma n'int ket evit an darn vuiañ gwelloc'h eget al levrioù e brezhoneg, kalz niverusoc'h int.

Ar Gouarnamant a reas diouzhtu war-dro ar skolioù broadel. Er C'haeltac'ht, mistri-skol o c'houzout an iwerzhoneg a voe lakaet e lec'h ar saoznegerien. Ar re goshañ eus as re-se a zlee reiñ o dilez ha roet e oa dezho o leve. Ret e oa d'ar re en oad-etre deskiñ ar yezh vroadel, heuilhañ ar skolioù-hañv ha tremen un arnodenn. Emberr e voe niverusoc'h niver ar vistri-skol barrek da gelenn ar gouezeleg, hag a zeuas da vezañ un dra ret er skolioù-broadel. Tamm ha tamm, danvezioù 'zo a voe kelennet drezañ ivez. Eveljust er C'haeltac'ht, pep tra a oa desket dre an iwerzhoneg. Un nebeut skolioù evel-se a rae diouer e kornioù-bro lec'h ne veze komzet nemet saozneg, dreist-holl gant an dud e brud an oad. Bremañ ez eus e Dulenn meur a hini o vont mat-tre en-dro. Savet int bet evit bugale an iwerzhonegerien a zo etre 10 hag 20.000 e kêr. Lod eus an dud-se a zo deuet eus ur C'haeltac'ht da labourat er gêrbenn. Ar saozneg a zo ivez kelennet e pep skol : ne c'heller ket ober a-hend-all, zoken er C'haeltac'ht. Ar gerent a gomzfe un tamm saozneg fall d'o bugale ma ne vefe ket desket dezho er skol.

Diazezet eo bet ar « Preparatory Schools » gant ar Gouarnamant evit ar re yaouank a felle dezho bezañ skolaerien. E-touez ar skolioù-etre, n'eus nemet ar re-mañ hag a zo evezhiet gant ar Stad. An holl skolidi a zo o lojañ er skol. War ar 5 « Preparatory School », 4 anezho, a zo katolik hag unan brotestant. Evit bezañ degemeret enno, ar vugale, d'an oad a 14 vloaz, a zle tremen un arnodenn. Lod eus ar plasoù a zo evit iwerzhonegerien a-vihanik. Padout a ra an amzer-skol 4 bloavezh ha pep danvez a zo kelennet en iwerzhoneg. D'an dibenn, ar re zegemeret d'an arnodenn a ya da dremen 2 vloavezh all e skol ar skolaerien (Training Collage). Pa zeuont er-maez, ez int anvet da vistri-skol. Mizoù-skoliañ an diskibien a zo, a-bezh pe ul lodenn anezho, paeet gant ar Stad. Ar re wellañ e touez ar skolidi a vez kaset da genderc'hel gant o studi e Skol-Veur Gailliv.

Ur gevredigezh nevez a dud sevenet, oc'h ober eus an iwerzhoneg o yezh pemdeziek a zo o tiwan bremañ.

Ar « Preparatory Colleges » n'emaint ket o-unan, e-touez ar skolioù-etre, o kelenn dre an iwerzhoneg hepken : wardro 80 skol-etre a zo oc'h ober kement-all.

Ar skolioù-etre, o tegemer arc'hant digant ar Gouarnamant, a zo rannet e teir lodenn : « A, B and C class-schools ».

En « A Class-schools » emañ ar 80 skol-etre meneget uheloc'h o kelenn pep tra, dre an iwerzhoneg. Muioc'h a arc'hant hag a brofoù a vez roet dezho gant ar Stad eget d'ar « B and C class-schools ». Ar « B class-schools » a ra ul lodenn eus al labour hepken dre ar gouezeleg. Er « C class-schools » e tesker ar yezh vroadel, peogwir ez eo un dra ret evit kaout sikour digant ar Stad, hogen pep danvez a zo kelennet e saozneg.

An arc'hant roet d'as skolioù a zo dre benn-skoliad o taremprediñ ar skol. Ar skolioù, lec'h ne vez kelennet tamm iwerzhoneg ebet ne zegemeront netra : an holl vizoù-skoliañ a zo paeet gant ar gerent.

Da 16 vloaz evit an arnodenn-etre ha da 18 vloaz evit an arnodenn diwezhañ, pep hini, er skolioù meneget uheloc'h a zle tremen ur genstrivadeg war ar yezh vroadel, hag ar re a ra ganti evit an danvezioù all o deus 10 % muioc'h a boentoù, nemet evit ar jedoniezh lec'h n'eus nemet 5 %. En deiz a hiziv ez eus er skolioù-etre, ouzhpenn 25 % eus ar skolidi oc'h ober gant an iwerzhoneg en arnodennoù.

Evit bezañ kargad-stad, den a lezenn, kelenner, apotiker, ret eo tremen un arnodenn dre skrid war an iwerzhoneg. Souezhus eo gwelout pegen nebeut e-touez an dud o tremen an arnodenn-se a zo barrek da gomz ar yezh ; zoken daou pe dri bloaz goude bezañ kuitaet ar skol, ne zalc'hont ket soñj eus ar pezh o deus desket ; levezon ar fiñvskeudennerezh, ar skingomz, diouiziegezh an dud e brud an oad, enebiezh ar vourc'hizien hag ar genwerzhourien, ar c'hoant pe an ezhomm da vont da labourat e Bro-Saoz, h.a., pep tra a vir ouzh dasorc'hidigezh ar yezh.

Gonidigezh wellañ ar 25 bloaz diwezhañ a zo araokadenn ar yezh eviti hec'h-unan. Ur yezh komzet hepken gant kourien er bloavezhioù a-raok a zo deuet da vezañ ur benveg a c'heller implijout evit pep tra er vuhez a hiziv, koulz evit trein dielloù ha lezennoù-diazez ar Stad e 1938 hag evit sevel levrioù war ar strilhouriezh hag an tredan.

Saozneg fall-tre a glevet alies er Gaeltac'htioù. Evit mirout ouzh an dra-se ha lakaat ar gerent da gomz iwerzhoneg ouzh o bugale, ul lezenn nevez a voe savet. Kerent ar vugale o taremprediñ ar skol a zegemer bremañ 2 lur saoz bep bloaz keit ha ma 'z eo anat e vez implijet ar gouezeleg da yezh pemdeziek en ti. Levezon al lezenn a zo bet mat-tre : e lec'hioù 'zo, ar yezh a oa en ur stad fall, dare da vezañ kollet, ha bremañ lod eus an tachennoù-se a zo bet adiwerzhonekaet en o fezh.

Kevrenn an Douar (Land Commission) a zo abaoe 15 vloaz o rannañ an tiegezhioù bras, hag o reiñ al lodennoù da gouerien ar vro. War zouaroù strujus kontelezh Vuma, e-kreiz argompezenn vras, re nebeut a dud a oa o vevañ. E pradeier druz ar c'hornad-bro e veze lardet chatal, ha ne oa ket ezhomm a galz a labourerien evit ober war-dro al loened. Bremañ, meur a vil den a zo o vevañ e Gaeltac'ht nevez Muma. An dud o tont eus an hevelep korn-bro a zo bet bodet a-gevret. Re abred eo c'hoazh da c'houzout ma vo an arnod nevez un dra vat pe fall evit ar yezh.

E Breizh, peurunvanidigezh ar yezh a zo un dra c'hraet bremañ ; daoust ma seblant ar K.L.T.G. bezañ un tammig diaesoc'h, arnodad 1941 en deus un dalvoudegezh dispar : n'eus mui nemet un doare-skrivañ.

Doare-skrivañ an iwerzhoneg, degemeret gant « Cumann Cosanta na gaeilge », O'Duinnin hag O'Gramna a oa pounner ha ne zalc'he kont ebet eus an disheñvelderioù etre ar rannyezhoù : pell bras e oa diouzh ar yezh komzet. Ar c'hoant da eeunañ an doare-skrivañ a oa atav e spered ar skrivagnerien, hag ul lodenn vras anezho, dreist-holl er bloavezhioù diwezhañ-mañ, a glaskas e

skañvaat. Siwazh pep hini a reas hervez e venoz pe e froudenn pe levezon e rannyezh. Ar gudenn a zeuas da vezañ rouestlet meurbet. Ne veze ket implijet an hevelep doare-skrivañ e daou levr-skol, ar skrivagnerien ne c'hellent ket ober un emglev etrezo, daoust dezho holl bezañ ali gant ma oa ret kemmañ ar skritur kozh..

En diwezh, ar gouarnamant a zirouestlas ar gudenn. Troerien ar Breujoù a voe karget da ziazezañ un doare-skrivañ nevez evit arnodennoù ar gargidi. Ret e vefe ober gantañ evit labourioù ar Stad. E 1946, kevrenn an droerien a embannas he labour. A-benn 1949, pep danvez-kargad a vo ret dezhañ implijout an doare-skrivañ nevez hepken. Kalz berroc'h ha resisoc'h eo eget an hini kozh : hogen derc'hel a ra koun gant kalz a evezh eus distagadur an teir rannyezh. En hevelep amzer, ur geriadur bras nevez a zo bet lakaet war ar stern.

Feuket eo bet lod eus an iwerzhonegerien gant hardisegezh an adreizherien a-berzh-stad ha mouezhioù taer a savas en o enep. Koulskoude an doare-skrivañ nevez a c'honz tachenn bemdez. Un dra a zo sklaer : aesaat a raio labour ar skolioù. Ar Vreudeur Gristen a ra gantañ a-benn bremañ evel ma 'z eo implijet gant ar Stad evit kalz a labourioù. Unan war-lerc'h eben, ar c'helaouennoù a gemm ivez o doare-skrivañ.

27

Setu e berr gomzoù ar strivoù graet betek-hen gant ar gouarnamant evit saveteiñ ar yezh. Kenderc'hel a ra gant e labour, ha spi hon eus e tougo frouezh en amzer da zont.

IV. An Emsav en deiz a hiziv

Dre ma ne oa mui ken kreñv ar Stroll-Emsav Gouezelek, ha dre ma oa re strizh e reolennoù a zifenne ouzh e izili ober war-dro traoù estren, da lavarout eo : korolloù an amzer-vremañ, mell-droad, mell-dorn, kriked, war zigarez e vijent bet evel-se o skoazellañ c'hoarioù estren ; dre ma strishae e reolennoù, kentoc'h eget o ledanaat, e tiwanas kevredigezhioù all evit kemer e lec'h.

« An Fainne », pe « ar Walenn », a voe savet araok 1916. Goude ar bloavezhioù stourm e teuas da vezañ ur gevredigezh a-bouez, hogen bremañ n'eo mui ken kreñv hag e oa d'ar mare-se. « Ar Simbol », e Breizh, a zo bet savet diwar skouer « An Fainne ».

« An Cumann Luth-Chleas Gael » pe « Kevredigezh ar sportoù gouezelek », a zo bet savet e dibenn ar c'hantved diwezhañ evit brudañ ar c'hoarioù iwerzhonek evel an Hurley, ar Mell-dorn gouezelek, h.a. Deuet eo da vezañ ur gevredigezh kreñv, hogen he liammoù gant an Emsav sevenadurel a zo dister-tre. Skoazellet e oa bet er penn kentañ gant ar Stroll-Emsav Gouezelek. Bremañ koulskoude e ra ar gevredigezh eus he gwellañ evit lakaat hec'h izili da gomz iwerzhoneg.

« An Comhar Dramaiochta » pe « Kevredad ar C'hoariva » savet war-dro ar bloavezh 1920 a c'hoarie pezhioù iwerzhonek bep miz e Dulenn. Siwazh ne c'hellas ket kenderc'hel gant e labour, hag e 1940 an Abbey Theatre a gemeras e lec'h, hag a grogas da ziskouez ur wech an amzer pezhioù-c'hoari iwerzhonek. Evel e pep bro, c'hoarierien an Abbey, ar re wellañ en Iwerzhon, a rank bevañ dre o micher, ha ne c'hell ket ar c'hoariva dont a-benn da baeañ pep tra gant pezhioù en iwerzhoneg hepken, dre ma n'eus ket iwerzhonegerien a-walc'h evit leuniañ ar sal ouzhpenn un nebeut nozvezhioù. Ar mizoù a zo an hevelep re koulskoude evit ur pezh-c'hoari iwerzhonek pe unan saoznek, hag ar re saoznek a c'hell bezañ c'hoarier e-pad sizhunvezhioù dirak ur sal leun-barr.

Ret eo lavarout, koulskoude, e pad c'hwec'h sizhun d'an nebeutañ gant ur sal leun-chouk bemnoz « Jestr-c'hoari Nedeleg » abaoe daou vloaz m'en deus kroget an Abbey gantañ. Padal kalz eus an dud o tont n'ouzont ket an iwerzhoneg hag ouzhpenn 20.000 den a ya bep bloaz da welout Jestr-c'hoari an Abbey.

E Kêr c'h-Gailliv ez eus ur c'hoariva iwerzhonek, ha daoust ma 'z eo bihan ar gêr ha dister madoù ar c'hoariva, graet en deus hag e ra atav ul labour dispar.

« Cumann Dramaiochta na Scol » pe « Kevredigezh ar C'hoariva er Skol » a skoazell ar skolioù da sevel pezhioù en iwerzhoneg, c'hoariet gant bugale a bep oad, ha lakaat a ra an holl skolioù da genstrivañ er « Feiseanna » ur wech ar bloaz er c'hêrioù brasañ.

Ar « Feiseanna » a zo un tammig ar pezh eo an « Eisteddfodau » e Bro-Gembre. Lod anezho a zo bleniet gant ar Stroll-Emsav Gouezelek, hogen aliesoc'h gant kevredigezhioù all. En ur « Feis » ez eus peurliesañ kenstrivadeg war an unkanañ, ar c'horolloù iwerzhonek, al laz-kanañ, an displegañ en iwerzhoneg, ar pezhioù-c'hoari, ar « fiddle », ar binioù iwerzhonat, h.a. E « Feiseanna » 'zo ez eus ul lodenn e saozneg, hag e c'heller ivez klevout sonerezh uhel. Ar « Feiseanna » a zo harpet dreist gant an dud, ha skoazellet o deus kalz ar vistri-skol en o labour, gant ma 'z eo laouen ar gerent o welout o bugale er c'henstrivadegoù.

« Coiste na bPaisti » pe « Kevrenn ar Vugale » a voe diazezet war-dro 1930, gant ar menoz da zastum arc'hant evit paeañ an ehan-skol er C'haeltac'ht d'ar skolidi yaouank a zeske mat an iwerzhoneg. E tier ar C'haeltac'ht e vez ar vugale o lojañ hag o vevañ gant tud an ti. Savet e vez c'hoarioù evito ouzhpenn. Plijus eo gwelout pegement eo sikouret ar gevredigezh gant ar sindikadoù. Ar re-mañ a ro kalz a arc'hant bep bloaz evit an ober se.

Kevredigezhioù all a ya mat pe a yae mat en-dro, evel « Clann na hEireann » (Tiegezh Iwerzhon) a grogas da sevel herberc'htioù e meur a lec'h er C'haeltac'ht. Bremañ n'eus nemet un herberc'hti e Gaeltac'ht nevez kontelezh Veath.

E 1940 e tiwanas ur skourr nevez d'ar Stroll-Emsav Gouezelek, « Aiseiri » (Dasorc'hidigezh) e anv. Nac'hañ a reas diouzhtu degemer reolennoù strizh ar Stroll-Emsav, hag e voe lakaet e izili er-maez anezhañ : hogen « Aiseiri » a zeuas da vezañ brasoc'h eget ar Stroll-Emsav ha dreist-holl buhezekoc'h. Goude ur pennad e fellas da grouer an « Aiseiri » ober eus e gevredigezh ur strollad feskadat katolik iwerzhonat. Ne c'hellas ket hen ober, hag ur rener nevez a voe anvet. Kemer a reas ar gevredigezh un anv all « Glun na Buaidh » (Rumm an Trec'h). Ul labour dispar a zo bet graet hag a zo graet bepred gant skourroù eus « Glun na Buaidh » e meur a lec'h eus ar vro. Daoust da c'honidigezhioù kaer an devezhioù kentañ, ne c'helle ket an emsav kenderc'hel da vont war-raok ken buan. Ret eo bet avat d'ar Stroll-Emsav, hejet evel m'eo bet, lemel e reolennoù strizh ha kozh.

29

« Glun na Buaidh » en deus ur gelaouenn sizhuniek « Indiu » (Hiziv) a zo, eus a bell, ar brasañ sikour en deus kavet an Emsav evit ar yezh e-pad ar bloavezhioù diwezhañ-mañ.

Ur c'hevredad bihan, ennañ iwerzhonegerien hepken, « An Cuinann Ealaion » (Kevredad an Arzoù-Kaer), bet savet un nebeut bloavezhioù 'zo, a ra war-dro an arzoù-kaer, al lennegezh, ar sonerezh uhel, ar skiantoù, h.a. Re uhel eo e bal evit ar werin, ha ne zeuio biken da vezañ ur gevredigezh evit an holl. Un nebeut mizioù 'zo, ez eo bet savet dindan e baeroniezh, ur skol vrezhonek o vont mat en-dro.

E pep hini eus ar pemp skol-veur, da lavarout eo e tri skourr ar Skol-Veur Vroadel e Dulenn, Korkeig ha Gailliv, e Skol an Dreinded e Dulenn hag e Skol-Veur ar Rouanez e Belfast, ez eus ur gevrennad ouezelek. Abaoe 1920 e vez dalc'het ur genstrivadeg vloavezhiek etrezo, e pep skol-veur d'he zro.

E 1930, e voe krouet « An Comhchaidreamh » (distagit An Kohaidreuv) pe « Keneilded » gant un toullad studierien. Ur c'hendalc'h a vez graet bep bloaz er C'haeltac'ht. Un dalvoudegezh vras o deus ar c'hendalc'hioù-se ken e-sell ar Sevenadur ken e sell ar Gevredigezh. Ouzhpenn ec'h embann « an Comhchaidreamh » ur gelc'hgelaouenn vizek, « Comhar » (Kenlabourerezh) a zo ar

gelc'hgelaouenn wellañ embannet en iwerzhoneg. N'eus ket pell ez eo bet moulet war « Comhar » ur pennad mat-tre skrivet gant Roparz Hemon diwar-benn al lennegezh vrezhonek.

Distroomp d'ar Stroll-Emsav Gouezelek. Ret eo lavarout c'hoazh e oa deuet e levezon da vezañ bihan ; meur a skourr a rankas ehanañ da labourat hag un niver bras a-walc'h e-touez an Iwerzhoniz lennek ne asantent ket degemer e reolennoù strizh. Ouzhpenn se, an « Oireac'htas » ne oa buhez ebet ken ennañ. Gwelloc'h e seblant an traoù bezañ bremañ, kalz gwelloc'h zoken. Ar Stroll-Emsav, hag a zo bet atav bev-buhezek e deir c'hevrenn a Zulenn, en deus bremañ ur pevare er Gêr-se ; ha pep kevrenn a denn muioc'h bremañ d'ar pezh ez eo ur C'helc'h Keltiek e-touez ar Vretoned, gant ul laz-kanañ, sonerezh, korolloù pe « Ceili » ur wech ar sizhun, pezhioù-c'hoari, gwezboell, h.a.

War-dro pemp pe c'hwec'h vloaz 'zo e savas ar Senedour « an Seabhac », ar skrivagner, un emsav evit kenstrollañ an holl gevredigezhioù oc'h ober war-dro ar yezh, ha dasorc'hiñ an «Oireac'htas ». Betek bremañ, al labour graet a zo bet mat. Ar strollad anvet « Comhdail Naisiunta » (Kendalc'h Broadel) en deus graet muioc'h a labour ha skoazellet eo bet gant ar Stad.

30

Prientourien baeet a zo ur wech adarre o redek dre ar vro, o sikour ar « Feiseanna », oc'h urzhiañ al labour er parrezioù; o werzhañ kelaouennoù iwerzhonek. Re abred eo c'hoazh evit barn talvoudegezh al labour graet.

An « Oireac'htas » a zo bet er bloaz-mañ e Dulenn e dibenn miz Gouere, ha dre ma oa gouelioù an 50vet deiz-ha-bloaz, pep hini en deus graet eus e wellañ evit ma voe kaer ar gouelioù.

An arme he deus graet un diskouezadeg vras. Degemeret eo bet ar Gendalc'hidi gant Pennrener ar Stad. Pezhioù iwerzhonek a zo bet displeget gant an Abbey Theatre. Match-klozañ Hurley ar « Gaelic Athletic Association » a zo bet c'hoariet : ha Skol-Veur an Dreinded (Trinity College), hag a oa gwechall bod gwashañ enebourien Iwerzhon he deus roet a-c'hrad-vat he salioù hag an aotre da implij evit ar gouelioù liorzhoù kaer ar Skol.

D'an hevelep mare, ez eo bet dalc'het e Dulenn ar C'hendalc'h Etrekeltiek, ha spi hon eus ez eo bet plijet hor c'heneiled tramor gant pep tra.

Oscar MAC UILIS.

BUHEZ AR GOUEZELEG : 1939-1945

Labour bras, ma n'eo ket trouz bras, a zo bet graet e-doug ar bloavezhioù 1939-45 evit adsevel ar gouezeleg.

Hañvalout a reas ar brezel, da gentañ holl, lakaat diaesoc'h un tammig ar stourm evit ar yezh : unaniñ a reas, en enep, ar bagadig tud-se, bihan met galloudus, a zo a-du gant ar saozneg hag ar saoznekaat, ha na sell ouzh an traoù iwerzhonek, gouezelek ha keltiek nemet evel kozhachoù mirdi ; ober a reas dezho emskiantaat, tra na roe nep lusk d'ar vroadelerien ouzelgar a venne chom didu e-tal an enebourien. A-feur ma tostae an emgann, avat, e voe prientet ez-kalonek difenn ar vro ha neuze hepken e teuas Iwerzhon vroadel ha gouezelek da gemer preder enni hec'h-unan. Gallout a c'heller lavarout difazi emañ bremañ pep tra iwerzhonek ha gouezelek kreñvoc'h eget e 1939, hag e kendalc'h ar vrogarourien da stourm bravoc'h-bravañ abaoe diwezh ar brezel. Daou zarvoud, avat, o deus diskouezet na vefe ket aes an trec'h, ha graet d'an holl Ouezeled santout e vezo ret, evit lakaat ar yezh da c'honit a-benn ar fin - ar yezh, n'hall ket ar vro bezañ hepti - kemer muioc'h a boan, labourat muioc'h, kalz muioc'hr eget na oa bet soñjet betek-hen, ha kompren gwelloc'h tro-spered an dud. Arabat e vezo chom koazezet hep ober netra, ha gortoz ar gelennerien hag ar gouarnamant da gas an trevell da benn. Dreist-holl pa 'z eus enebourien douet da uhelvennad an Irish-Ireland e-touez ar snobed katolik saoznekaet, an darn vrasañ anezho o kavout bod en University College eus Dulenn.

An hini kentañ eus an daou zarvoud a voe « afer Williams » : ur c'helenner an Ao. Williams, barrek-tre e pep keñver all met dic'houzvez-krenn dezhañ an iwerzhoneg, a voe anvet Professor of Education en UCD (Skol-Veur Dulenn) e 1943 daoust da eneberezh ar strolladoù gouezelek, ha daoust ma oa gouezelegerien eus an dibab o c'houlenn ar plas. Lakaat a reas an degouezh-se trenkoni e-leizh er yezhkarourien, hogen reizh eo lavarout e oa digarezioù : an Ao. Williams a oa kozh, bet kelenner pell amzer, hag abred e rankfe kemer e leve. An eil tra a voe un diskleriadur gant un niver kelennerien eus Kolaj ar Skol-Veur e Dulenn, hag int gouezelegerien, a-enep reiñ kentelioù e gouezeleg : « ma vefe ar skolidi dianav dezho ar saozneg », emezo, « e vefe reizh neuze, d'hor soñj, kelenn e gouezeleg ; pa ouie ar skolidi saozneg, n'helled kavout gwelloc'h benveg-kenteliañ eget ar yezh-se. Ar Skol-Veur ne glasse nemet ober labour spletus hag uhelaat atav ar studioù ; evit ar yezh, ne c'helle ket ar Skol-Veur reiñ skoazell dezhi ez-eeun ».

32

Moulet e voe an diskleriadur-se, na oa ket bet savet evit an embann, e **Comhar**, kelaouenn ar **Comhchaidreamh** (Strollad Studierien ar Skol-Veur) e 1943 ivez, ha trouz a voe. Kement-se a oa, a-berzh Skol-Veur Dulenn, evel ober fae war ar politikerezh renet e-keñver ar yezh abaoe 1922, hag evel dianzav doare-ober Skol-Veur Gaillimh ha Skol-Veur Corcaigh, e-lec'h ma vez kelennet kalz traoù dre an iwerzhoneg. Diskouez a rae an diskleriadur e oa tuet kelennerien UCD da sellout ar gouezeleg evel ur rannyezh kouerien mat da dammoù kêrioù proviñsel bihan evel Gaillimh ha Corcaigh hepken. E berr, evito e tlee c'hoazh Dulenn chom ar « Pale » saoz. E kolajoù all e oa maget hevelep menozioù. Da skouer, bez' ez eus gant Tadoù ar Spered Santel daou golaj, unan e Blackrock (Dulenn), un all e Cashel, e kontelezh Tiobrad Arann. Graet o deus eus ar c'holaj rannvroel, hag eñ en un tolead saoznegerien, ur skol iwerzhonek oc'h implijout an iwerzhoneg evel benveg-kelenn, tra ma chom ar saozneg yezh kolaj ar gêrbenn, daoust m'emañ kenteliet iwerzhoneg ennañ. Kement-se peogwir e fell d'an darn vrasañ eus bourc'hizien Dulenn e vefe desavet o bugale evel ma'z int bet desavet int, da lavarout eo e saozneg ; hag ivez peogwir o deus ar vourc'hizien un dro-spered mirour ha disfizius ouzh ar c'hemmoù. Evel-se, avat, emañ lakaet da badout hengoun ar « Pale » saoz e Dulenn, enebour-krenn d'an Dulenn awenet gant Pearse ha St Endàs. En hevelep doare e heuilh renerien Skol-Veur Dulenn an hengoun degaset eus Oxford gant Newman, unan eus

krouerien ar Skol-Veur Roueel Katolik, o tizarbenn hengoun broadel ha gouezelek O'Curry, unan eus ar gelennerien gentañ enni.

A-du e vez ar ouezelegerien evit anzav ez eo diaesik kenteliañ traoù 'zo en iwerzhoneg en abeg d'an diouer-gerioù, hag en abeg ma ne vez ket barrek-tre war an iwerzhoneg an holl studierien ; lavarout a reont ivez, avat, e tle ar c'hudennoù-se bezañ diluziet bremañ diouzhtu, hag ez eo arabat d'ar Skol-Veur, bezet a vezo, ha hi paeet gant ar bobl, chom er-maez eus ar stourm. Diskleriañ a reont ouzhpenn ez eo dres labour ha dlead ar Skol-Veur reiñ he foan da gavout diskoulmoù, evel ma 'z eus bet ranket ober evit pep yezh da vare pe vare.

33

E-keit-se emañ Ministrerezh an Deskadurezh ha Kevrenn Troourien an Dail o plediñ gant kudenn ar gerioù, un nebeut strolladoù gouzieien o vezañ bet anvet a-ratozh evit ober al labour-se. Geriadurioùigoù diwar-benn ar Skiantoù, ar Vezegiezh, ar Jedoniezh, ar Yezhadur, h.a. a zo bet embannet a-benn bremañ gant Ministrerezh an Deskadurezh, tra ma vez Kevrenn Troourien an Dail o lakaat en iwerzhoneg holl deulioù an t-Oireachtas, holl lezennoù hag embannoù ar Gouarnamant ; gant ar yoc'had skridoù a berzh-stad a-zivout ur bern kudennoù disheñvel a zo bet embannet e-doug ar Brezel, ez eus bet krouet un niver bras-bras a c'herioù nevez da envel an traoù a-vremañ. Evit ar wech kentañ, ivez, ez eus bet implijet gant Troourien an Dail un doare-skrivañ unvan hag eeunaet, displeget e reolennoù el levrig **Litriù na Gaéilge** (1945), hag a zo adal bremañ degemeret gant an darn vrasañ eus ar c'helaouennoù iwerzhonat. Implijout a ra an droourien en o labourioù ur yezh-etre, kendeuzet diwar rannyezhoù Konnac'ht, Ulad ha Mumha hag a zeuio da vezañ unyezh ar vroad a bezh.

Ar gelennadurezh en iwerzhoneg a ra ur berzh dispar e skolioù seurt **Scoil Bhride** ha **Scoil Mhuire** e Dulenn, ha **Scoil Fhursa** e Gaillimh, e-lec'h m'emañ o ren ar spered gouezelgar gwirion ; n'eo ket ken frouezhus-all er skolioù e-lec'h na gentel an iwerzhoneg nemet evit lakaat ar skolidi barrek da dremen o arnodennoù. War voazañ ez a an ober gant ar gouezeleg e-mesk kargidi ha kelennerien, hogen dizimplij e chom c'hoazh e bed ar genwerzhourien, alvokaded, mezeien, h.a. Daoust ma wel an holl ez eo ret e vevfe ar yezh evit ma vevfe ar vroad iwerzhonat, n'eo ket deut c'hoazh an iwerzhoneg da vezañ benveg ur sevenadur bras hag ul lennegezh a-bouez, nag ur benveg disi ha peurc'halloudus kennebeut. Ken e ranker, a-benn stourm evit ar gouezeleg, fiziout kalz war an amzer-da-zont, ha kompren mat penaos e c'hall ar yezh dont da c'henel ur sevenadurezh vras, penaos ez eo e-doug an hanter-kant bloavezh a zeu e vezo troet tonkadur ar gouezeleg, ha penaos ne c'hall ket Iwerzhon bezañ hep an iwerzhoneg.

E-doug mouezhiadegoù bras 1943 ha 1944 e lakaas an Ao. de Valera, en e brezennoù, ar stourm evit ar yezh en a-raok da gement tra all ; pa 'z eo aet an tu kreñv gantañ, ez eo peuranat emañ harpet ar gouezeleg gant ar bobl a-bezh.

34

E-touez an emsavioù a ra ar gwellañ berzh e ranker menegiñ **Glùn na Buaidhe** (Rummad an Trec'h). Savet a-nevez 'zo, ar strollad-se a zo endeo kreñv-meurbet, hag en deus ur « Servij Broadel », ur gelaouenn **Indiu**, lennet-kenañ ha leun a bennadoù dedennus, holl iwerzhonek, filmoù iwerzhonat a ziskouezer e pep lec'h; ober a ra ivez bodadegoù er straedoù hag, e-mesk e lies doare da harpañ ar vro, e ranker lavarout c'hoazh e kas e izili da blantañ gwez, da gleuziañ poullou-kouronkañ, h.a. **Glùn na Buaidhe**, strollad nannpolitikel, a bled gant kement tra a sell ouzh mad Iwerzhon, hag a ra implij eus ar yezh vroadel e pep degouezh, o respont evel-se, en anv ar bobl, da zaeadenn ar Skol-Veur. Ar C'hevredad-Stourm Gouezelat (Gaelic League), gant e gelaouenn **An Glor**, a gendalc'h da labourat, hogen war dachenn ar yezh hepken. Da echuiñ ez eo ret menegiñ c'hoazh an **t-Oireachtas**, adsavet e miz Here 1939 diwar skouer an Eisteddfod Kembre. **Comhdhàil Nàisùinta na Gaeilge**, enni kannaded eus pep strollad, a zo harpet gant ar Gouarnamant a-benn unaniñ an holl strivoù evit ar gouezelved.

War dachenn al lennegezh ez eus bet, er bloavezhioù diwezhañ, daou varzh yaouank o'n em

ziskouez, an daou anezho nevez hag a-vremañ o menozioù koulz hag o doare : Séamàs O Neill, eus Béal Feirste, rener **An Iris**, ur gelc'hgelaouenn lennegel, ha Màirtin O' Direàin, eus an Inizi Aran, bremañ kargad e Dulenn. E Bro-Skos emañ ar vrud gant un den yaouank bet oc'h en em gannañ en Afrika an Hanternoz e-barzh ar Pempvet Arme Saoz, Somhairle Mac Gille Eathain : e levr **Dàin do Eimhear** (Barzhonegoù da Emer) a sachas evezh an holl koulz en Iwerzhon hag e Bro-Skos pa voe embannet e 1943. Eus ar re-se, avat, hag ivez eus ar skrivagnerien e komz-plaen koulz hag eus ar ouizieien ouezelek, e vo komzet en ur pennad all.

D. P.

(tr. P. D.)

ARBOELLEREZH BRO-SKOS

(1)

Pep bro er bed a-bezh he deus labour da adsevel dismantroù ar brezel hag ouzhpenn ret eo dezhi perc'hennañ binvioù ha kavout un arboellerezh dereat e-skoaz reoù ar broioù all. Kalz a c'houarnamantoù o deus kemeret Skouer war Vro-Rusia ha lakaet war ar stern ur roll-labour evit un nebeut bloavezhioù ; reoù Polonia, Tchech'hoslovakia,... ha zoken Bro-C'hall (ar « plan Monnet » n'eus ket a arc'hant evit kregiñ gantañ).

Bro-Skos ivez he deus savet ur roll-labour pempbloavezhiek da adkavout he finvidigezh kollet. Etre an daou vrezel bras, izel-meurbet e oa kouezet stad ar vro. Aet da hesk e oa mengleuzioù-glaou hag houarn al Lanarkshire, dres e-kreiz gwall-varead ar bed a-bezh. Hag e Bro-Skos, un drederenn eus ar boblañs a zo o vevañ diwar an ijinerezh bras kreizennet en-dro da C'hlas'ho. Digreskiñ a reas an ermaeziadennoù, lakaet 'voe er-maez an darn vuiañ eus micherourien labouradegoù ar saverezhioù-listri. E 1939, 1.500.000 a dud a oa dilabour. Pep, spi en amzer-da-zont ar vro a seblante bezañ kollet.

Strollad broadel Bro-Skos, o kontañ nebeut a izili, hogen bleniet gant renerien ampart, a lavaras ne oa nemet un tu da adsevel ar vro o vont da vervel : en em zisrannañ krenn-ha-krak diouzh Bro-Saoz.

Talvoudegezh ar soudard skosat e-pad ar brezel, adc'hanidigezh ar feiz skoazellet gant Iliz Keltiek Kolomba a roas en-dro d'ar Skosiz un tamm emfiziañs. E 1942, goude ur brezegenn en House of Commons eus Tomaz Johnston, kannad skosat, unan eus ar re wellañ abaoe pell, hag a ouezas diskouez stad truezus ar vro, e voe savet ur c'huzul-enklask karget d'ober war-dro ezhommoù Bro-Skos.

Douar Bro-Skos (78.000 km²) a c'hellfe magañ 10 milion a dud, gant ma vije labour evit an holl. Setu war betra e konter evit adsevel ar vro :

- a) dour ar stêrioù skosat da gaout tredan.
- b) koadoù Bro-Skos, adlakaet en o finvidigezh a wechall.
- k) kaerder Alba diskouezet en doare da zedennañ gweladennourien.

(1) Hervez Lilian T. Mowrer, Echo, n° 12, Eost 1947.

36 LIAMM

Dour ar stêrioù a c'hell reiñ c'hoazh 6 milion a gilowatoù a nerzh. Teir c'hreizenn-dredan ha nav c'hreizennig-ingalañ a vo krouet, hag ijinerezhioù bihan a c'hello bezañ lakaet da vont en-dro. Ar maen-raz, a zo ur binvidigezh e kontelezh Aberdeen, a c'hello talvezout da gouerien ar vro a oa ret dezho e brenañ e kontelezh Derby (Bro-Saoz). Legumajoù evit ar vro hag an ermaeziadennoù, a c'hello evel-se bezañ gonezet. Gwerennoù evit an tiez ha da wareziñ gonidigezhioù 'zo a vo ezhomm anezho : peadra a zo d'o oberiata, gant traehz kailhastrek an aodoù ha kouarzell an enezenn Skye.

Ministrerezh saoz an arc'hant a baeo an 3/4 eus ar mizoù ret da dredanañ ar vro. Ar gevredigezh-arc'hant skosat a raio war-dro se a vo dieub-krenn evit ar pezh a sell ouzh ar c'hudennoù-diabarzh. Gonid a vo evit ar Skosiz, rak an Uheldirioù ne c'hellint ket ober gant an holl nerzh krouet : tredan Bro-Saoz a breno ar pezh a vo ouzhpenn.

Teñzor Bro-Saoz a gemer ivez war e chouk ar mizoù evit lakaat en o stad a wechall ar

c'hoadoù skosat diskaret dievez evit ezhommoù an daou vrezel bras. Gwez yaouank a c'heller gwelout endeo e lec'h-mañ-lec'h. 50.000 kantar a vo askoadet e-pad ar 5 bloavezh kentañ, 96.000 e-pad an 10 vloavezh goude.

Labour e vo evel-se evit ar gouerien dister, hentoù, pontoù a vo da ober, tachenoù da zigourañ. Labouradegoù a c'hellont mont en-dro, e-sell reiñ danvezenn-brenn ha pezhioù-micher moulet d'an ijinerezhioù aer-listri ha kirri-dre-dan.

98 dre gant eus an Uheldiriz a zo a-du gant ar roll-labour-se a roio pinvidigezh d'ur vro abezh. Gant an tredan e vo evit an holl aesaet an darempredoù, gwellaet an hentoù-houarn, krouet hentoù nevez ha skolioù niverusoc'h.

Per Ar BIHAN.

KEMBREIZ E PATAGONIA

Plijadur am eus bet da lenn, nevez 'zo, ul levrig diwar-benn trevadennidi gembreat Su-Amerika : **Lloffion o'r Wladfa**, gant R. Bryn Williams. Marteze e plijo da lennerien Al Liamm kaout un nebeut fedoù medet ganin.

Abegoù relijiel a voe dreist-holl d'an divroadeg : fellout a rae da Zisivouderien Gembre chom distag diouzh iliz Vro-Saoz ha tec'hout diouzh he beli, a oa pounner-bras d'an ampoent. (Er bloaz-mañ end-eeun eo bet torret ar beli-se e Kembre). Gwall-vihan e oa ar bagad kentañ a zilestras, dindan renerezh Michael D. Jones, war aodoù Patagonia, d'an 28 a viz Gouere 1865. Hervez testeni ar Parch. D. S. Davies, ne save c'hoazh ar bagad-se, e 1874, nemet da 273 den, 165 paotr ha 108 plac'h. N'o doa an drevadennidi iliz ebet : an tamm chapel vihan savet diwar bri kaledet e 1868 e Trerawson a oa kouezhet buan en he foull, ken e rankent ober an ofisoù ha bodañ Skol ar Sul en ul lab. Ur gelaouenn o doa, avat, **Y Brut**, kaierig dornskrivet a veze kaset a di da di. E 1887 e oa kresket bravik ar boblañs (tud a oa deut eus Amerika hag eus Kembre) pa save da 1.600 den : d'ar mare-se e oa er Wladfa 13 chapel, 3 skol hag 8 prezegenner. En deiz a hiziv, hervez jedadurioù an Ao. R. Bryn Williams, e vefe bodet er Wladfa e-tro 5.000 den, dezho 15 iliz. A- hend-all, n'emañ ket chomet Kembreiz rac'h da vevañ e traonienn g-Camwy : e 1885 ez ae un niverig anezho da ziazezañ 300 miltir pelloc'h, ouzh troad an Andez, en un tolead a anvjont Bro Hydref. Re all ivez a yeas - siwazh evito - da Vuenos Aires.

Ar Wladfa - an drevadenn geltiek nemeti a vefe komzet enni ur yezh keltiek - n'eo ket re anat he dazoned, ret hen anzav. Labourat a ra kalz gouarnamant Archentina da gendeuziñ ar gouennoù disheñvel a zo deut er vro, ha gant se emañ Kembreiz e riskl bras bezañ latinekaet. « Tuet e vez bremañ ar re yaouank », a skriv oberour al **Lloffion**, « da sellout outo o-unan evel Arc'hentiniz ha da ober fae war yezh ha sevenadur Kembre ». Pell emeur eus an devezhioù kentañ ma teue an Indian Gregorio, mab ar rener Nahuel-quir, da zeskiñ kembraeg e Skol ar Sul !

38

Un darn vihan eus Kembreiz Patagonia, avat - hogen un darn vihan hepken; **Ileiafrif** - a chom stag ouzh o yezh hag ouzh o bro : ganto e vez embannet **Y Drafod** ha dalc'het an Eistezvodou. A drugarez d'ar re-se e c'heller kaout un tammig fiziañs en amzer da zont, dreist-holl pa seblant Kembreiz ar vammvro bout mennet bremañ, goude bezañ chomet klouar, ha bouzar, re bell amzer - da harpan da vat trevadenn ar brogarour Mikael D. Jones.

Per DENEZ.

Kenderc'hel a reomp da ginnig d'hol lennerien danevelloù Dik Trevan, eeun ha fromus war un dro, a zo dispar evit reiñ deomp un tañva eus buhez pobl Gembre.

BOLONTEZ AN HINI KOZH

E garout a raemp holl er vengleuz daoust ma n'oa ket anezhañ e pep tra ar pezh a c'hortozed un den da vezañ. Meur a dro ez ae d'ar gabanenn-debriñ, ha goude sellout ouzh ar pezh a oa e pep picher eno, e kemere ur banne eus an tê pe ar c'hafe a vefe ar gwennañ gant al laezh, hag ez azeze war ar bank da gomz outañ e-unan ha da vutuniñ ur c'horniad, mar beze butun gantañ, pe da denañ un tamm frealz diouzh ur c'horn goullo mar ne veze ket. Un dro all, e furche et podoù boued, hag e kemere un tamm fourmaj eus unan, un drailhenn gig eus un all, hag un tamm bara gant amanenn dev a-walc'h warnañ eus an trede. Meur a wech e tegouezhed warnañ ; met ne lavared ket ur ger drouk outañ, dre ma ouie pep unan eo dibaot a wech en deveze e verenn, ha ne wele biskoazh... tamm lein pe goan.

39

Ur wech, ha tra nemet ur wech, e savas keuz dezhañ da vezañ digoret picher unan bennak. Soñj mat em eus eus an dro. Dont a reas ur paotr yaouank eus kontelezh Mon da labourat er vengleuz un devezh ; ha, dre ma lavared ez eo tud Mon troet-tre gant an traoù lipous da vouetañ, ez eas an hini kozh d'ar gabanenn, evel boaz, ha goude digeriñ picher ar Moniad, e kemeras ur banne bras eus an tê a oa enañ. Padal, degouezhout a reas ar Moniad warnañ ; hag e roas ur freskad spontus d'an hini kozh, ken na voe klevet o klemm eus ar santier.

Met sed amañ an dro diboellañ a reas ar paotr yaouank eus kontelezh Mon en e vuhez. Klevout a reas Harri ar Go an hini kozh o c'harmiñ eus ar c'hovel ; hag en ur stlepel ur gizell a oa gantañ en e zorn, ez eas d'ar gabanenn war e bouez, ha, gwelet gantañ ar pezh a dremene, e tapas krog er c'hanner, hag hep lavarout ger, e roas ur gwiskad start dezhañ, ha ne labouras ket Jakez kontelezh Mon e-pad ur sizhunvezh da c'houde.

Enebour pennañ an hini kozh a oa e wreg, hag a-zivout dezhi emañ an istor-mañ.

Ur vaouez vras 'oa Beti Huws, ur vaouez « na oa dezhi aon rak den na diaoul », evel ma kustume lavarout pa gomze an hini kozh dezhi eus ar pezh a rafe dezhi ar baotred er vengleuz mar skoe gantañ c'hoazh. Ur pae bihan 'oa pae an hini kozh bep miz... netra nemet daou bunt, pe a-wechoù tregont swllt ; ha da bep sadorn pae e veze ar paotr kozh en dour berv. Yaouankoc'h egetañ 'oa Beti. Kreñvoc'h ez oa ivez, dre m'eo hi a zebre ar c'hig hag an hini kozh ar bara.

Ur sizhun, e kollas un niver bras eus ar vengleuzierien o seier, ha n'hellent martezeañ petra 'oa degouezhet ganto. Ur pec'hed dibardon eo er vengleuz laerezh ur sac'h, hag e kastizer start al laer p'hen taper dre gas ar bal teir gwech da stekiñ ouzh un darn resis eus e gorf. Keneil brasañ ar mengleuzier eo e sac'h. Dindan ar glav, e talc'h e zilhad sec'h, pa dreuz ar menez da vont d'ar gêr, ha mirout a ra ouzh an avel yen da vont a-dreuz e eskern. Ur wech m'eo bet sec'het adarre e kombod ar mekanik, e ra un dorchenn zispar, dre m'eo skuizhus azezañ war ar vlodenn galet e-pad eurvezhioù bemdez.

Evelse, n'oa ket ur souezh e ve ar vengleuzierien droug enno ouzh nep piv bennak en doa laeret o seier. N'ouient ket piv en doa graet, ha n'oa ket kaer, war o meno, disfiziout ouzh unan bennak.

Un devezh, petra bennak, e weljod an hini kozh o vont da gombod ar mekanik. Lavaret am eus ez oa boas da gaozeal outañ e-unan pa rae droug ; hag evel ma tistroe eus kombod ar mekanik en devezh-mañ, e komze uheloc'h eget boaz, ken na glevas daou vengleuzier a oa o niveriñ o c'herreg war ar c'hae petra a lavare.

40

« Emaout diskennet izel, Guto », eme an hini kozh, hag emañ, m'en tou. Sed amañ an

eizhvet sac'h ac'h eus-te laeret e-barzh pemzektez. Sed aze sac'h Huw Ti 'n Toull, sac'h ar Baban, sac'h an Diaoul, sac'h Dik Price, sac'h Harri Pry, ha daou sac'h all eus kombod mekanik Harri. N'out tamm ebet din da vevañ ; na ne dout, lakepod loue ».

Sellout a reas an daou vengleuzier an eil ouzh egile, ha neuze e selljont ouzh an hini kozh evel m'en em stleje etrezek penn ar bern atredoù. Tost 'oa dezho gouelañ o soñjal pegen izel e oa diskennet ar c'heneil kozh. M'en dije bet laeret ur sac'h, e c'helljed pardoniñ dezhañ, re en holl, avat, ez oa laerezh eizh.

Lakaat a rejont en o fenn mont d'e heul da welout petra 'rafe gant ar sac'h. Skeiñ a rae, evel ma 'm eus lavaret endeo, etrezek penn ar bern. Moarvat ez oa ar seier kuzhet eno !

D'ar mare, e tizhas an hini kozh penn ar bern. Sellout a reas en-dro dezhañ, ha neuze e stagas da ziskenn en tu all, hag evel ma 'z ae e benn diwar wel, e redas an daou vengleuzier a-hed ar bern betek diraez al lein anezhañ.

War e greiz e welent an hini kozh o ruzañ, en ur gomz outañ e-unan muioc'h eget biskoazh. D'an diwezh, e tizhas ar goueled, ha, goude sellout en dro dezhañ ur wech c'hoazh, ez eas e-barzh ul lab kozh.

Mont a reas ar vengleuzierien d'an traoñ d'ar bern war e lerc'h, en ur ober ken nebeut a drouz ha ma oa posubl dezho. M'en doa an hini kozh kuzhet ar seier el lab evel ma krede dezho, e soñjant eo ar pezh gwellañ d'ober a vije o c'has en dro da gombod ar mekanik, ha chom hep rannañ grik ouzh neb diwar-benn an hini kablus.

Buan e voent erruet er goueled, ha chom a rejont en o sav ur pennad en adreñv d'al lab.

En diabarzh e kendalc'he an hini kozh da gaozeal outañ e-unan, hag evel ma selaoue an daou outañ, e troas o zremmoù da vezañ ken gwenn hag an erc'h a c'holoe ar menez.

« Sed aze te, Guto », eme an hini kozh, gant ur vouezh krenus, « bet ganez ur pallenn all, ur pallenn mat ivez, ken sec'h ha pallenn Priñs Kembre. Te 'vo tommoc'h dit fenozh. Yen-kenañ ez oa anezhi, neizheur ; hag ez oa, pe ne don-me netra el lec'h-mañ ».

Didrouz ez eas an daou vengleuzier kuit. Ez oa o stagañ da deñvalaat ; hag er pellder e welent o c'heneiled o vont d'ar gêr ; ha, dre ma teraoue an erc'h da ziskenn goustad, e teuas hiraezh dezho ivez da vezañ e korn o oaled. N'o doa ket komprenet mat ar pezh a lavare an hini kozh ; hag e lakajont en o fenn sellout a dostoc'h ouzh an dra antronoz beure.

41

Ur wech erruet er gêr, o doa diSoñjet krenn an darvoud ; met pa savjont beure antronoz ha gwelout an erc'h, ur gwiskad tev anezhañ war an douar, e stagjont da santout enkrez ; ha kent kemer amzer da zebriñ o dijuni, pe dost, e hastjont afo etrezek ar vengleuz. Goude degouezhet er santier, e tispjegjont kement o doa klevet an abardaez araok ouzh ar vengleuzierien all, ha raktal e tilmmas div zousen pe deir anezho da benn ar bern. Er goueled e welent ul lab kuzhet holl, koulz lavarout, gant an erc'h. Sellout a rejont an eil ouzh egile ur pennad, ha neuze ruzañ dre an erc'h betek tizhout ar goueled. Ez oa al lab klozet-naet gant daou bost maensklent diouzh an diabarzh, ha gant un tamm bec'h, e teujod a-benn d'o zennañ er-maez, hag ez eas tri mengleuzier e-barzh.

Er vunutenn war-lerc'h, e teujont er-maez en-dro gant daeroù war o divjod. E weled ez oa un dra bennak a vras degouezhet, dre ma ne deo ket alies e skuilh ar mengleuzier daeroù, daoust d'e galon da vezañ tener bepred.

Buan e voe gouezet petra 'oa. E don al lab gant ur vlodenn dindan e benn, ha seier e genvengleuzierien dindanañ ha warnañ, edo an hini kozh en e c'hourvez gant e zremm ken yen ha ken gwenn hag an erc'h a oa da ballenn war e wele fall.

- « Tremenet », eme Harri Pry, en ur sec'hiñ e zaoulagad gant e vilgin, « tremenet, paotred, ha me neizheur o villigañ an hini en doa laeret va sac'h-me. Mar em bije-me gouezet pelec'h 'oa-eñ,

m'em bije... ».

- « Ret dimp-ni mont buan kuit ac'halen, » eme ar Baban. « Kae da laret da Huws, ar merour, Harri, ha da gerc'hat ar c'hrevaz ».

Skarzhet e voe an erc'h kuit betek ma teuas daouarn an hini kozh war wel d'an diwezh. En unan anezho edo un tach ha ne zeue ket ar vengleuzierien a-benn da vartezeañ petra en doa graet an hini kozh gantañ.

Pa voe skarzhet un tammig muioc'h eus an erc'h, evelkent, e voe gwelet ur sklentenn gant un dra bennak skrivet warni.

He sevel a reas ar Baban, ha goude sellout outi e-pad un nebeut munutennoù, e lavaras : « Sed amañ bolontez an hini kozh, paotred ».

Ma vije bet komzet eus ur seurt tra en devezh araok, e vije bet kroget pep unan anezho da c'hoarzhin betek ruilhañ d'an douar ; ne zeuas, avat, mousc'hoarzh ebet war zremm un unan neuze.

- « Lenn-hi », eme unan.

42

« Ket bremañ », a responte ar Baban, « amzer a-walc'h a vo d'hen ober pa vimp aet d'ar gêr gant an hini kozh ».

War se, 'e voe degaset ar c'hrevaz war al lec'h, ha savet e voe an hini kozh, gant daouarn tener warnañ. Goude e gas d'ar santier, n'ouie ket mat ar vengleuzierien petra da ober gant ar c'horf. Kasaus e kavent e zougen da Veti. Gouzout a raent n'oa ket ganti tamm kizidigezh en he c'halon, ha lakaet o doa start en o fenn douarañ o c'heneil kozh gant azaouez.

Padal e lavaras unan n'oa ket Beti er gêr, ha ne ouie den ebet pelec'h ez oa, hag araok m'en doe nikun amzer da lavarout ur ger ouzhpenn, e lavaras ar Baban dezho e zougen d'e di dezhañ, ha se a voe graet.

Goude distroet d'ar vengleuz; e voe lennet ar volontez gant ar Baban evel da heul :

« Bolontez an Hini Kozh, paotred :

« N'eus ganen-me netra da lezel war va lerc'h nemet Beti ha gant m'eo Jakez Kontelezh Mon a zo bet ar c'harantezusañ em c'heñver-me, eñ eo a biaouo ar gwir warni ».

Dik TREVAN

Troet diwar ar C'hembraeg gant Fañch ELIES.

UR MEVEL

« Ar C'hozh Koagenn ». Sed aze an anv a roemp a-grenn dezhañ bepred, ha kement-se dre na welas nikun ac'hanomp biskoazh anezhañ, o wiskañ un tog na vije ennañ ur goagenn zibar. Diaes e voe, din kompren va-unan kent penaos e c'helle-eñ dalc'hmat ober ur goagenn a veze dres an hevelep hini e pep tog en deveze. Komprenet em eus abaoe. Ne brenas un tog nevez, sur on, a-hed an eizh bloavezh e voen o vevañ en hevelep kornad hag eñ.

43

Mab d'ur c'houer en e aez e oa, hag e chome an tiad en unan a draoniennoù strujusañ Hanternoz Bro-Gembre. Unan oa e dad eus ar rummad-se a verourien gembreat ar c'hantved diwezhañ, a veze evel p'o dije miret doareoù an triwec'hvet kantved en o fezh, un den bras postek, hael e neuz, gorrek e zoare-prezeg, seven e fiñvoù, haeloc'h dreist-lavar e neuz hag e vouezh hag e c'herioù eget an aotrouien hanter-ouenn a biaoue an atant ma oa-eñ o vevañ ennañ.

Un den disheñvel-tre oa e vab ar C'hozh Koagenn. Ne oa ket kozh-kenañ p'eñ anavezen, nemet e seblante, en un doare, koshoc'h eget e dad. Un den mentet-etre, treut, evel pa ne vije ennañ tra nemet kroc'hen hag eskern, ken kaled hag an dir eus kern e benn d'e seul. Un dremm strizh, hag eñ evel pa vije disec'het, evel m'hoc'h eus gwelet meur a aval, nemet ez oa roudennoù bihan penna-da-benn warnañ. Ur barv louet-sklaer, moan, a veze a-benn diwezh ar sizhun evel barv heiz war e zivjod hag e elgez ha mourennoù eus an hevelep liv na aotenne morse. Blev louet-sklaer a zalc'he bepred sklaer. Daoulagad glas, karadek, a sklaeriae marzhus meur a wech, pa vousec'hoarzhe. Chaokat a rae butun ken na oa e zent kreñv deut da vezañ melen. Pa vousec'hoarzhe e tiskenne ur penn d'e vuzell muioc'h eget ar penn all; hag e kloze ul lagad un netraig, evel pa vije eñ oc'h ober lagad bihan warnoc'h. Diouzh an doare-se dezhañ, e c'halljec'h soñjal ez oa un tamm lampon, hag e teuje gerioù gant flemm dezho war e ziweuz.

Hogen ma edont en e soñj, ne zeuent morse war ar vuzell gamm-se.

Kerzhout a rae gant un hanter-bleg en e gorf, an dra heñvelañ a weljoc'h pa stou un den gant ur falc'h en e zaouarn, oc'h ober ur c'hammed war-raok da skeiñ un taol ganti, ha pa'z ae buan - ne welis biskoazh anezhañ, en abeg da se, o vont gorrek - e vranselle e zivrec'h tu ha tu, heñvel-tre ouzh lusk divrec'h un den o trouc'hañ boued-chatal glas gant ar falc'h. E gwirionez mab ar falc'h ez oa ar C'hozh Koagenn: Ouzh e welout e vezemp o soñjal en ur falc'h troet e den, « Unan start outi eo ar C'hozh Koagenn », a lavare pep unan, ha boas oad da lavarout ez oa c'hoarvezet gantañ ur wech o troc'hañ geot, kement oa « a-zevri ganti », kerzhout war-raok ken taer ma'z eas laonenn e falc'h etre sol e votez ha bizied e droad. Ne gredan ket e c'hellfe kement-se bezañ, gwir ger evit ger. Hogen gwir a-walc'h ez oa en ur ster all. Afer ar C'hozh Koagenn er vuhez oa « bezañ ganti » hag e c'herioù pennañ oa « mont war-raok », « mont dezhi », « derc'hel ganti ».

44

N'en doa bet hogos tamm deskadurezh, daoust ma oa dezhañ ur c'hoar he doa bet. A-vihanik, moarvat, e voe desket da « vont war-raok ». Kaoz a veze dezhañ da c'houzout « haelat » d'e eizh vloaz, hag ez oa o « kas an denn » d'e zaouzek. E boan nemeti a veze chom hep « mont ganti ». Pa deze un amzer c'hleb e klemme dre n'oa tu da « vont ganti ». Pa save ar re all da veure, e veze endeo ar C'hozh Koagenn o « vont ganti », ha p'en doa disterniet pep unan, e veze-eñ bepred o « vont ganti ». Ur gwall dorr a reas d'e zorn ur wech o « vuzuliañ gwiniz », nemet e kendalc'has da « vont ganti » a-hed an deiz, ken na voe ret dezhañ paouez ur pennad amzer goude-se dindan dorn ar mezeg. E-kerz an amzer-se e voe tost dezhañ rannañ e galon dre n'helle « mont ganti ».

N'ouie na prenañ na gwerzhañ. Ne voe morse gwelet en ur foar pe ur marc'had. E dad eo oa den d'un dra a-seurt-se. Ma vije aet ar C'hozh Koagenn d'ar foar, « straniñ » en dije graet e dad a gement-se, ha dalc'hmat ez oa a-walc'h a labour da « vont ganti » er gêr evit ar C'hoazh Koagenn.

Mont a rae d'ar chapel da Sul, hogen « mont ganti » a rae etre bodadegoù an dervezh-se en hevelep doare. Ez ae d'ar bodadegoù war ar pemdez ivez, bepred tizh ruz warnañ rak aon tremen hep « dont a benn » ha loc'hañ e koulz. Hag e weled anezhañ o tifrea a-hed an hent, evel un den gant ur falc'h etre e zaouarn, o vont d'ar chapel, da selaou ouzh e dad hag re all o komz a-zivout ar bed all ha drougiezh hemañ. Pegen bras didu pe be seurt vad e tenne diouzh se, n'ouzer ket, hogen ne ranne ar C'hozh Koagenn grik morse a-zivout ur bed nemet hemañ, hag ar redi a oa dezhañ « mont ganti » ennañ.

Mervel a reas e dad hag e vamm, hag e c'hoar a zimezas. Mont a reas ar rann vrasañ eus an danvez, en doa dastumet ar C'hozh. Koagenn e-unan dre « vont ganti » ken ingal, da zerc'hel ar c'hoar hag he ziegezh war o zreid en ur mod bennak. Hag evit ar C'hozh Koagenn, ret e voe dezhañ mont da labourat war c'hopr. Ur gopr bihan-tre oa hennezh ivez, ur c'hwec'h ugent bennak ar sizhun hag e voued. Hogen sed amañ ar gopr kentañ a c'honzas ar C'hozh Koagenn - nann an hini kentañ a baejod dezhañ biskoazh. Perak ne daje ket da verour e-unan, a lavare an amezeien an eil d'egile. Penaos en dije gallet ? Ne ouie tra diwar-benn prenañ ha gwerzhañ. « Mont ganti » oa e zlead dezhañ, hag aet oa frouezh e labour da zerc'hel ar re all war o zreid.

Ne glemmas ar C'hozh Koagenn tamm ebet, keit ha ma ouezas nikun. Mont a reas da « vevel meureuri boutin », evel ma lavared, « mont a reas ganti » evit un all e-pad bloavezhioù, evit c'hwec'h ugent ar sizhun hag e voued. Keit ha ma ouie nikun, ez oa « mont ganti » ur c'hen bras plijadur dezhañ a-c'houdevezh hag ez oa kent. Hag ne oa e vestr nevez tamm ebet teneroc'h outañ eget n'oa bet e vestr kozh, e dad. Petra er bed-mañ da ginnig d'ar C'hozh Koagenn nemet « mont ganti », ha pe forzh a rae dezhañ evit piv a rafe kement-se ?

45

Koll a ris ar gwel anezhañ, dre ma voe ret din d'am zro deraouiñ « mont ganti » em roud. Mont a reas bloavezhioù e-biv. Un dervezh, e tegouezhas ganin bout er c'hornad kozh. Edont o tiskenn ar C'hozh Koagenn er bez en dervezh-se. Bez' em boe dibenn e istor, hag e tennis va zog - un tog gwak gant ur goagenn ennañ ivez - e-tal e vez, paour kaezh den.

Marvet oa e vreur kaer o lezel un intañvez ha tri pe bevar a vugale hep tra war o anv. Hag e talc'has ar C'hozh Koa- genn anezho tra ma c'hellas, dre genderc'hel da « vont ganti » betek an deiz diwezhañ.

Dinoaz, onest, aketus, hael, mut. Sed aze e vuhez. Aberz da venozioù strizh, kalet, a-zivout daou ved. Ne soñjan ket en dije ur wech kredet e vije netra er-maez eus e lec'h enno kennebeut. Ha tristoc'h c'hoazh eo ne soñjas ket e dad kement-se muioc'h egetañ. Nag e rummad. Na nikun.

Thomas GWYNN-JONES

troet diwar ar c'hembraeg gant Fañch ELIES.

CYNGRES CELTAIDD SANT-BRIEG

Gresyn yw bod dwy Gyngres Geltaidd wedi eu cynnal yr un pryd, un yn Nulyn a'r llall yn St-Brieg: Ni siaradwn yma ond am yr ail a ddiweddiwyd ym Mis Gorffennaf gyda gwyl fawr werinaidd.

Ni bu Gyngres Sant-Brieg a drefnwyd gan y Grwp Celta ynghyd a chymorth llawer o gymdeithasau Llydewig eraill, yn Gyngres Geltaidd mewn gwirionedd am fod rhan y Gwledydd Celtaidd ynddi yn fain iawn ; ni ddaeth ond Mr. Mac Kinnor yn cynrychioli'r Alban a Mrs Ashley Rowe yn cynrychioli Cernyw.

46

Ymdrinwyd ymhob un o'r cyfarfodydd â phroblem y Llydaweg. Diddorol yw sylwi bod yn y Gyngres hon a gynhaliwyd gant Ochr gymhedrol y Mudiad Llydewig, gynrychiolwyr o Lywodraeth Ffrainc, sef Mr Letourneau, Gweinidog yr Adrefnu, tri aelod seneddol o Lydaw, Rhaglaw talaith y Côtes-du-Nord a Reithiwr Prifysgol Roazhon (Rennes). Yr oedd hyn o bwysigrwydd o herwydd i broblem dysgu'r Llydaweg yn yr ysgolion gael ei bwysleisio (yn anuniongyrchol y mae 'n wir) o flaen Llywodraeth Ffrainc. Rhoddwyd adroddiadau ar eu gwaith gan gynrychiolwyr Undebau'r ysgolfeistri swyddogol a christionogol er dysgu 'r Llydaweg, MM Keravel a Stephan ; a dymument benderfyniad buan oddiar law'r Llywodraeth yn atebiad i'r ceisiadau gan y Cynghorau Sir a Phlaid Comiwnyddol Ffrainc am gael dysgu'r iaith yn yr ysgolion.

I'r un perwyl gwnaeth Mr Toulemont, ysgrifennydd « Undeb Amddiffynwyr y Llydaweg » (Unvaniezh Difennourien ar Brezhoneg) apêl i'r gwahanol gymdeithasau Llydewig am gydweithrediad yn yr ymdrech.

Trinwyd â phroblemau economaidd Llydaw mewn dwy ddarlith gan MM. Rault a Mazeas a chafwyd braslun o Hanes Llenyddiaeth Lydaweg gan Mr de Langlais.

Ar y cyfan, er gwaethaf bychanrwydd y gynrychiolaeth ennillodd Cyngres Sant-Brieg bwysigrwydd yn herwydd y gwaith a gyflawnwyd a'r problemau diddorol a drinwyd ynddi.

GWYLIAU MONTRWLEZ

Y mae 'n weddus inni ddweud ychydig o eiriau am wyliau gwerinaidd Montrwlez (Morlaix) a gynhaliwyd, Awst 2 a 3. Croesawyd dirprwyaeth o'r Alban yn cynnwys Arglwydd Inverclyde yn cynrychioli Maer Glasgow, ynghyd a dawnswyr a chantorion gwerinaidd Heddlu Glasgow, a Pheldwedwyr Queen's Parc a oedd i gyfarfod â detholiad o beldwedwyr Llydewig.

Nos Sadwrn, yn chwaraedy Neuadd y dref cyflwynwyd rhaglen o len werin Ysgotaidd a Llydawig. Canwyd ar y pibau yn dalentog iawn gan bibyddion yr ynnysoedd â 'r cyfandir ond y mae'n rhaid inni gydnabod rhagoriaeth yr Ysgotiaid ; iddynt yn ddiamau y mae'r pibau yn offeryn cenedlaethol.

47

Dydd Sul croesawyd mewn dwy wledd swyddogol y gwesteion Ysgotaidd ynghyd a llawer o brifwyr Montrwlez a Llydawiaid o fu'n aelodau o'r byddinoedd alltudiedig ym Mhrydain Fawr yn ystod y rhyfel. Canmolodd y Cadfridog Sice yr Ysgotiaid am eu ffyddlondeb i'w traddodiadau ac i'w bonedd uchel, a diolchodd iddynt am eu hymddygiad croesawgar tuag at y Llydawiaid a gafodd

loches tu draw i'r mor yn ystod y rhyfel.

Yn y prynhawn ennillodd yr Albanwyr yn yr ornest chwarae peldroed gyda 6 gôl yn erbyn 2 y Llydawiaid.

Bu'r dangasiadau hynny o gyfeillach rhyng-geltaidd yn yn werthfawr am iddynt gymryd lle ym Montrwlez, tref fach ohoni ond bywiog iawn ac yn hynod o Lydewig. Yr oedd trigolion Montrwlez yn adnabod yr Ysgotiaid yn ddaiawn wrth reswn gan eu bod wedi gweled yn ystod y rhyfel y milwyr hynny o'r llu Brydeinig a wisgai 'r « kilt », y rhai y byddai'n rhaid peidio â dy, wedyd wrthynt « Yr ydych yn Saeson », eithr yr oedd ymweliad pobl o'r un genedl â hwy yn llawer mui hyfrytach y tro hwn.

Mewn gwirionedd y mae gwyliau o'r fath yn dwysau o flaen y bobl wirionedd y frawdoliaeth geltaidd, ac nid oes ond un peth i'w ddymuno wrth ddiweddu : bydded iddynt amlhau 'n fwyfwy.

Kembraeg gant an Ao. 'n Abad Klerg.

HON DAREMPREDOU

Setu ul lizher bel kaset gant Caradar da Gerlann, warnañ diskleriadurioù dudioù a-zivout Bro-Gernev tramor. Hen embann a reomp amañ war-lerc'h :

A Goweth ker, (Keneil ker)

...Laouen on o klevout ez eus Breizhiz hag a zo dedennet gant Kernev-Veur. Degemer a ran « An Aimsir Cheiltiach ». Betek-hen avat n'on ket bet evit kavout ur pennadig amzer vak da skrivañ dezho tra pe dra a-zivout Kernow. Evelato emañ o skrivañ ul levrig bihan anvet : « Istor AR C'HERNEVEG, aet da get ha dasorc'het » (The Story of the Cornish Language : Its Extinction and Revival) ha pa vezo moulet e vezo kaset ur skouerenn deoc'h. Komz a ra eus istor Bro-Gernev-Veur evit ar pezh a sell ouzh ar yezh.

48

E-keñver ar politikerezh, kontelezh saoz eo bet Bro-Gernow a-gozh, abaoe an deket kantved pa voe lakaet gant Athelstan, roue Wessex, dindan beli ar Saozon. Neuze eo bet Bro-Gernow ul lodenn eus Bro-Saoz e-doug 900 vloaz ! Un tammig diwezhat eo da glask sevel un doare emsav « broadelourien » : hag, evit gwir ur menoz a-liv gant hennezh a dremenfe da fentigell. Kernev-Veuriz a zo Kelted bepred avat, hag en em santont disheñvel diouzh ar Saozon.

Em levrig e kontan kement a zo bet graet ganeomp da reiñ buhez nevez adarre d'an dro-spered keltiek, rak-se n'ez in ket pelloc'h bremañ. Gant un tammig chañs, da lavarout eo, ma ne vez ket re a zale en holl gant ar moulañ (un diaes a dra, hiziv an deiz) c'hwi ho pezo al levrennig pe a-raok Nedeleg, pe nebeut amzer goude.

Ar stêr Tamar a zo bet o vevenniñ Kernow adalek ar bloaz 936 pa voe kaset ar Gelted e-maez Exeter. Ger-stur Kernev-Veur a zo « Unan hag Holl » (One and all). Hec'h ardamezioù a zo ur skoed gant pemzek pik. Ar c'hevredigezhioù « Old Cornwall » (Kernev Gozh), kengevredigezh o stourm evit ar geltiegezh, ar yezh ivez eveljust, o deus ur banniel o tougen un « chough »(1), ul labous a lavarar emañ spered ar roue Areur ennañ, ha, dindanañ, ar gerioù- mañ : « NYNS YU MAROW MYGHTERN ARTHUR » (Ar Roue Arzhur n'eo ket marv). Kernow n'en deus banniel broadel ebet.

Distank eo al levrioù kernevek, kalz anezho a zo diviet, da skouer : *The English-Cornish Dictionary, Cornish for All* h.a... Tu a zo da bremañ avat : « *Cornish Simplified* » am eus-me savet, hag « Alysaryn » ur pezh-c'hoari e Kerneveg gant an It. Pollard, un toulladig levrioù all c'hoazh. Emaon bremañ oc'h evezhiañ mouldigezh ul levr istorioù berr, dindan wash. Da grediñ eo e vezo prest a-benn miz : e kerneveg ez eo skrivet, eveljust.

An adsav e Kernev-Veur a yae war-raok; pa darzhas ar brezel, a lakaas pep tra da chom a-sav. Bremañ emamp-ni o klask adkregiñ ganti er poent ma oamp neuze.

Dheugh-why yn lel (Deoc'h-c'hwi ez leal)

A.S.D. Smith (Caradar)

(1) Distaget e saozneg : tcheuf. Un doare bran eo, gant pavioù ruz. Gwelet hon eus anezhañ douget evel arouez gant Kerneviz tramer (Kerlann).

Skol-Hañv Rosko

Ur skol-hañv a zo bet dalc'het e Rosko, eus an 11 d'an 23 a viz Eost, evit ar vistri-skol kristen.

Un taol aesa eo bet ar skol-se, ha laouen omp e vefe deuet da vat. Savet e oa dreist-holl evit at re o deus bet heuliet ar skol vrezhonek dre lizher. Re all, avat, estreget ar re-mañ, o deus bet goulennet kemerout perzh en hor skol- hañv.

Hor skol-hañv a zo bet heuliet gant un daou-ugent bennak a skolidi. Met, ma vefe niveret ar re holl a zo tremenet dre hor skol-hañv, ez afe ar gont anezho en tu all da zek ha tri-ugent. Kaer eo eta, ha digollet, mat omp bet eus hor poan.

Ar pezh a ro deomp lorc'h, dreist-holl eus hon labour, n'eo ket niver ar skolidi, hag a oa anezho beleien, Breudeur de la Salle, Sant Gabriel, Lamennais, skolaerien dieub, Ykamidi, skouted... met an aked hag ar garantez souezhus diskouezet gant pep hini evit an holl danvezioù displeget e-kerz ar skol-hañv.

Kaset hon devoa ur roll-labour d'an holl skolidi, hag a ziskoueze dezho n'eo ket evit c'hoari na farsal eo o fedemp da zont da Rosko. Fellout a rae deomp displegañ dirazho ar pouezusañ danvezioù eus teñzor hor Breizh. Fellout a rae deomp lakaat Breizh da gaout krog war o spered, war o ene ha war o c'halon. Ne gredan ket hon defe c'hwitet war hon taol.

Al lec'h dibabet ganeomp a oa dispar : un ti bras ha kaer, e dreid er mor anezhañ un taol-lagad eus an dudiusañ dreist-holl d'an abardaez, pa c'hoarie war an doureier luskellus, holl livioù an neñv hag an douar dindon bannoù alaouret an heol o vont e kuzh. Ha se en deus roet, a-dra- sur, muioc'h a vlaz hag a bouez d'hon holl gentelioù ha displegadehnoù. Ra vezo trugarekaet amañ, al leanezed gwenn a zo e penn kêr sant-Lukaz.

Bep mintin ha bep noz e kanemp hag e lavaremp an holl bedennoù e brezhoneg. Bep mintin ivez, an aotroù Batany, hor « person », bremañ e penn parrez vras Sant-Vaze, e Kemper a zisplege dirazomp speredelezh dibar hor Sent kozh.

50

Gantañ, da heul hor sent muiañ karet hon eus baleet eus Iwerzhon da Vro-Skoz, eus Kembre da Gernev-Veur, eus Breizh-Veur da Vreizh-Vihan ; hag hon eus kutuilhet dre ma 'z aemp, eus ur manati d'egile, eus ur peniti d'un tivedi, kaerañ skouerioù o buhez ; hon eus maget hon ene hag hor spered diwar o c'hentelioù talvoudus, ha silet en hor c'halon ar garantez vras o douge d'ober vad d'o c'henvroiz hervez spered ar ouenn.

Bemdez c'hoazh e-doug an oferenn, hon eus lakaet ar c'horn-bro da dregerniñ, gant hor c'haerañ kantikoù brezhonek, ma chome an amezeien bamet-kaer d'hor selaou ; hag e seblante din gwelout ar stourmerien gozh, aet da Varadoz Doue, o stouiñ eus garidoù an Neñv, war-du an draonienn a zaeloù, a gase daveto, evit ur wech, kanaouennoù dudius e-lec'h garmoù c'hwerv. Hag o tridal gant al levez, o c'hlevent, an Aotroù Perrot ha milieroù a re all, o stlakal deomp o daouarn, hag o youc'hal : « Daoust hag e ve Breizh o tihunañ da vat ? Daoust hag emañ, erfin, an had o tiwan, en irvi toullet ganeomp, glepiet gant hor c'hwezenn ha ruziet gant hor gwad ?... » Ha va unan e triden ganto, en ur drugarekaat Doue da vezañ graet d'am huñvreoù kozh dont da wir.

Etre nav eur ha kreisteiz hanter e veze bemdez ur gentel vrezhonek gant an aotroù V. Seite, ur gentel lennegezh vreizhek gant an aotroù Batany, hag ur brezegenn diwar-benn un dra pe un all.

Ar pep talvoudusañ, moarvat, eus ar skol-hañv, eo bet kentelioù lennegezh an ao. Batany.

Amañ, pep unan en deus bet da bennaouiñ a vriadoù. An ao. Batany n'eo ket un deskard. Abaoe ma 'z eus anezhañ ur c'helenner emañ o pleustriñ war an dachenn-se, ha marzhus eo gwelout al labourioù bet savet gantañ. Gouzout a oar an tu da zisplegañ e gudennoù ha da sankañ er sperejoù sklerijenn ha gouiziegezh. A-dra-sur, ur bed nevez eo en deus digoret dirak meur a hini ac'hanomp. Pec'hed e oa derc'hel kuzhet kement a ouiziegezh hag a skiant prenet, ha salv en defe bep bloaz, an aotrou Batany, skolidi a seurt gant ar re o deus bet an eurvad d'e glevout e-doug skol-hañv Rosko, o tisplegañ, en un doare ken bev, ken plijus, ken entanus, kaerañ oberennoù hon lennegezh vrezhonek.

Goude kreisteiz, e veze bemdez, ur gentel yezhadur gant an aotrou L. Stefan, hag ur gentel istor, pa ne veze ket a bourmenadenn, gant an Ao. Uguen. Da c'hwec'h eur diouzh an noz, bemdez ivez, e veze ur brezegenn all.

Petra da lavarout eus ar prezegenoù ha displegadoù, nemet int bet evit an holl, ken pouezus ha talvoudus an eil hag eben.

51

Ar gentañ, prezegenn an Ao. F. Falc'hun war « ar sevenadurezh vreizhek hag an abostolerezh » a vefe da vezañ moulet evit ma vo lennet gant ar re holl o deus karg da brezeg ar feiz e Breizh. Job Seite hag a gomzas ken mat eus Lan Inizan, eo, marteze, an hini a adskrivo deomp « Emgann Kergidu » evit bezañ advoulet. Talvezout a ra ar boan. An Ao. Loeiz ar Floc'h, en un doare plijus-kenañ ha gant gouiziegezh, a ziskouezas deomp galloud souezhus hor yezh war ar gwerzaouañ.

An Ao. Breton ofiser a vor, a gomzas deomp eus martoloded Vreizh hag a zo ken bras o niver war batimañchoù Bro-C'hall. Gant Ewan Jakob e rejomp tro ar c'helc'hioù keltiek, dre Roazhon, Pariz, Angers, Dakar, Saigon ha... Rosko. An Ao. L. Stefan a ledas dirazomp teñzorioù dispar hor sonerezh vreizhek : tonioù kanaouennoù ha kantikoù. Loeiz Seite a reas deomp ober anaoudegezh gant arzourien vrasañ hor bro, ha, gant skouerioù savet gantañ, e teskas an doare da sevel tresadennoù keltiek.

An Tad Eujen a gomzas eus al labour brezhonek dispar a ra, e Breizh, war dachenn an embannadurioù kristen, Kapusined Rosko. An Ao. Loeiz Lok, en ur gaozeodenn gaer, a lavaras deomp piv eo ar Gonideg hag al labour fonnus bet graet gantañ war dachenn ar brezhoneg. An Ao. Uguen a ziskouezas an heñvedigezh a zo etre ar brezhoneg hag ar c'hembraeg, hag ivez an Iwerzhoneg. Goude prezegenn an Ao. Colleau war an aotrou Perrot hag e oberoù, e welomp gwelloc'h pegen bras koll eo bet evidomp e varv mantrus. An Ao. F. Guivarc'h en deus hor skoet gant buhez souezhus ar Johniged marc'hadourien ougnoun korn-bro Rosko.

An Ao. F. ar Go, person Kernevel, a lavaras petra eo bet ar c'hoariva vrezhonek ha penaos hec'h adsevel en deiz a hiziv. An Ao. Y. ar Go a reas deomp skrijañ pa gomzas eus an ankoù hag eus ar grasoù dirak ar re varv. An Ao. P.Y. Nedeleg a reas ur gaozeadenn diwar-benn troioù dibar ha furmoù iskis ar brezhoneg. Gant an Ao. P. Mokaer e rejomp ur bourmenadenn gentelius ha plijus-kenañ dre istor Bro-Gembre hag Iwerzhon. Jos Doare, erfin dre ur gaozeadenn gant skeudennoù a zisplegas dirazomp pinvidigezh hon arz.

Laouen omp bet ivez o klevout an Ao. Minor, an Ao. Mevellec, Person Bretoned ar C'hreisteiz, an Ao. Guivarc'h person Landi, an Ao. Faye Person Lesneven. Plijadur hon eus bet c'hoazh, o welout o tremen dre hor skol, an Ao. Cueff ha Stum, Ensellourien, an Ao. Bleunven, person Ploveilh hag an Ao. Becot hor madoberour,

52

Graet e voe ouzhpenn, e-doug ar skol-hañv, ur bourmenadenn gaer da weladenniñ manerioù hag ilizoù kaerañ ar c'horn-bro.

Bemdez, goude koan, eo bet lennet buhez ar Sent ha kanet ar pedennoù diouzh an noz. Goude ez eus bet graet beilhadegoù brezhonek gant kanaouennoù, istorioù, rimadelloù... Gant keuz eo e kimiadas diouzh Rosko; skolidi ar skol-hañv o hetañ ma vo savet, da vloaz, un all heñvel outi.

Visant SEITE.

Buhez al levrioù

Yezhadur Kerveila

Al levrioù brezhonek a dalvoudegezh ne vezont ket stank er mare-mañ. Unanik ar bloaz ! Mar talc'her da vont er c'hiz-se koulskoude ne vezo ket da glemm.

Warlene e roas deomp Skridoù Breizh ur c'haer a levr : « Notennoù diwar-benn ar Gelted Koz, o istor hag o sevenadur ». N'ouzon ket avat hag-eñ eo bet degemeret evel ma faot, gant brezhonegerien an Emsav. Ar pezh a zo sur eo e chom un toulladig diouto c'hoazh ha mat e rafe e breñañ ar re n'o deus ket graet c'hoazh.

Bloaz war-lerc'h, a-vent gant levr an Notennoù nemet tevoc'h ha moulet war baper mat, an ti-embann Skridoù Breizh a ginnig deomp ul levr all, disheñvel a-grenn a-dra-sur, ken pouezus all avat, mar n'eo ket pouezusoc'h ; ul levr a zo bet savet e-pad ar brezel, saveteet diouzh ar gorventenn euzhus, ul levr a vezo diazez start hor yezh evit an amzer da zont, ul levr ret-holl da bep hini kaout, hep nep termadenn, hep mui gortoz. Al levr-se a zo e anv : **Yezhadur bras ar Brezhoneg**, gant Fransez Kervella, ar skrivagner brezhonek brudet.

Ur geriennoù bennak diwar-benn an oberour ne vo ket a re. Fransez Kervella, pe gentoc'h Divi Kenan Kongar diouzh e anv pluenn, ganet e parrez Loperc'hed, du-hont war bevonn Bro-Gernev ha Bro-Leon, a zo un den diwar ar maez emsavet da zen gouiziek. N'eo ket war dachenn ar brezhoneg hepken, met ivez war skiantoù all evel an douarouriezh ez eo anavezet evit bezañ ur mailh.

53

Uvel ha dilorc'h evel m'eo avat, me a zo sur e kav gwelloc'h dezhañ e vije graet peoc'h was gement-se. An dra-se ne vir ket outañ a vezañ brudet evel skrivagner c'hwek en hor yezh. Hag eñ paotr-araok e strollad Gwalarn, skrivet en deus bet graet er gelc'hgelaouenn-mañ kontadennoù, barzhonegoù, a vezo bepred un dudi hag un drugar evit lennerien brezhoneg...

Gant e Yezhadur avat, frouezh ul labour start, kaset da benn ez-pennek, a-hed pevar pe bemp bloavezh en em laka F. Kervella par d'ar Gonideg **Reizher ar Brezhoneg** ha da Fransez Vallée-Abherve **Tad ar Yezh**. Ha n'eo ket c'hwezañ an traoù eo a ran. Lennit ha studiit pizh ar Yezhadur Bras, hag e viot ali. En e rakskrid, e lavar ar yezhadurour deomp ez eo kentoc'h « ul labour a feiz hag a youl vat eget ul labour a ouiziegezh ». Mar ne deus ket e ouiziegezh avat, kenkoulz ha feiz, hag ouzhpenn youl vat, n'ouzon ket e pe levr all da zeskiñ hor yezh eo e vije ! Anat eo kement-se adalek ar rann gentañ : Reizskrivadur ha distagadur (ment, liv ar sonennoù).

Un alberzh a c'hellomp kaout eus an trevell m'eo bet sevel danvez ur seurt levr. Anzav a ra Kongar e-unan en deus ranket peurlenn levrioù Roparz Hemon hag « ar pep brasañ eus ar pezh a zo bet embannet en hor yezh » : skridoù an Ao. Vallée, gramadeg Guillevic hag ar Go ha dreist-holl yezhadur tregeriek an Ao. Le Clerc, gramadegoù Ernod, Hingant, ar Gonideg, Gregor Rostren ha skridoù all c'hoazh « aner o menegiñ holl amañ ».

Diouzh an tu all, n'eo ket gant levrioù hepken eo e saver ul labour a-seurt gant hennezh. Evel ma lavar : unvanidigezh ar yezh (kement-mañ a zo bet e bal) n'hell kavout font nemet war an doare ma vez komzet.

« An diazez startañ, emezañ, a zo bet evidon brezhoneg Kernev am eus desket er-vihan war

harzou ar vro-se, diouzh tu Leon ». Ha du-hont, e Mesmannig, gant e gerent, an amezeien, o labourat ganto er parkeier - rak n'eo ket nec'het Kongar da reiñ dorn d'an dud pa vez ret -, eno eo en deus sanailhet, kroueriet, keñveriet ar gerioù bev hag an troioù-lavar.

Ral a wech eo c'hoarvezet deomp kaout un heñcher evel hemañ, brezhoneger a-vihanik ha brezhonegour ampart war un dro. Den gouiziek, ya, bez' ez eo, dedarzhed diouzh douar hor bro, da reiñ deoc'h-c'hwi, Breizhiz yaouank chañsus ar benveg en deus graet a-viskoazh diouer deomp « ar re gozh » : ur yezhadur klok, gwir skeudenn ar brezhoneg evel m'emañ bremañ.

KERLANN.

54

Kanaouennoù

gant Jef Ar Penven

12 kanaouenn embannet gant B.A.S.

Meuleudi a rafen d'an B.A.S. evit al labour-se ma vefe ar yezh ennañ koulz hag ar sonerezh. Siwazh, truezus eo ar skridoù moulet, enno mankoù a-vordilh, skrivet ma'z int forzh penaos hag hep an disterañ aked : er ganaouenn gentañ, da skouer, ez eus ouzhpenn ur fazi dre boz. Pa reer war-dro ar c'hanaouennoù-pobl eo ret dibab etre an daou zoare-mañ : pe embann ar c'hanaouennoù evit ar ouizieien, hag implijout neuze an doare-skrivañ soniadouriezhel ; pe aozañ evit ma vefent kanet gant ar C'helc'hioù, hag un dlead strizh eo lakaat etre daouarn an dud yaouank skridoù savet mat ha reizhet aketus, evit ma c'hello an diskibien deskiñ a-se un tammig o yezh, na ouzont ket re en holl peurliesañ. Ober a-hend-all a zo mont a-enep-krenn da vad ar brezhoneg.

P.D.

Priz : 110 lur. P. Monjarret, straed Notre-Dame, Gwengamp.

DAOU LEVR DA LENN HA DA SRIGNAÑ

Diouer 'oa a Ievrioù bruderezh. An holl re embannet betek bremañ a oa diviet pe aet da gozh ar menozioù displeget enno.

Skridoù Breizh o deus roet deomp daou venveg talvoudus :

La Langue Bretonne et ses Combats gant Roparz Hemon. Ul levr tev, ouzhpenn 250 pajenn ennañ, rannet e div lodenn.

An hini gentañ, 5 pennad enni: petra eo ar Brezhoneg - « Diskar » ha dasorc'hidigezh - ar yezh lennegel - Kelenn ha studi - Dazoned ar Brezhoneg.

An eil lodenn : roll an oberennoù brezhonek pe diwar-benn ar brezhoneg.

Levr Roparz Hemon - un oberenn glok anezhi - a dalvezo d'an emsav da levr bruderezh evit an holl ha da levr studi evit ar re yaouank.

55

Da levr studi ha da levr bruderezh evit an hevelep tud e talvezo ivez levr Martray : **Le Problème Breton et la Réforme de la France**. Hemañ a glask diluziañ kudenn Vreizh e-keñver ar stad c'hall... ur gudenn diaes anezhi er mare-mañ !

Kalonek-tre eo bet an oberour o komz eeun diwar-benn holl venozioù an emsav breizhek hep distresañ hini ebet.

Al levr-mañ a c'hell addihuniñ an emsav « politikel » ha marteze e henchañ war roudoù aesoc'h eget ar re bleustret betek bremañ.

Alan Al LOUARN.

Notennoù

Evit kaout levrioù eus Iwerzhon

An notenn-mañ a voe embannet war an Irish Press, 1-añ a viz Here 1947 :

« Bodad-mirourien al Lenndi Broadel a zo bet kaset dezhañ goulennoù gant meur a lenndi eus Europa gwastet gant ar brezel evit adsevel o dastumad-levrioù: Pediñ a ra eta an dud a c'hell reiñ levrioù talvoudus evit ar studi, dreist-holl diwar-benn ar yezhoù keltiek, gwerinoniezh hag istor Iwerzhon, da gas anezho d'an Dr. R. J. Hayes, rener al Lenndi Broadel. Didoueziet e vint gantañ ha kaset d'al lec'hioù ma'z eus ar muiañ ezhomm anezho. Levrioù-studi ha levrioù a dalvoudegezh e-keñver ar skiant a dle bezañ kaset hepken. Al levrioù na zereont ket evit bezañ kaset d'ar broioù estren a vo kinniget da lenndioù a Iwerzhon ».

Ar re a zo e karg eus ul lenndi e Breizh pe eus ul lenndi breizhek e lec'h all a c'hell eta skrivañ da : Dr. R. J. Hayes, National library, Kildare Street, Dublin.

Lavarout dezhañ n'eus bro ebet war Douar-Bras Europa a studier traoù Iwerzhon enni muioc'h eget e Breizh ; lavarout ivez ez eo bet Breizh gwastet-spontus gant ar brezel. Ma'z eus lenndioù er bed-holl a dle kaout levrioù diouzh Iwerzhon ez eo lenndioù Breizh. Enno eo e vo graet ar gwellañ implij eus al levribù, ha brud Iwerzhon a gresko c'hoazh diwar se en hor mesk.

56

An Aimsir Cheilteach

Gallout a reer komantiñ d'ar gelaouenn **The Celtic Time** (St Ann's House, Fort Street, Cork ; 5 shilling ar bloaz) dre hantererezh an ti-mañ : Smith and son 248, rue de Rivoli, Paris 1er. Skrivañ dezho, degemerout a raint ar c'homanantoù en arc'hant gall.

Levrioù eus Kembre

Deut omp a-benn da aozañ ur servij eskemm levrioù etre Breizh ha Kembre. Setu amañ da heul roll kentañ an oberennoù a c'hellomp pourchas.

Y Ddraig Goch, miziek ; komanant-bloaz, 85 lur.

The Welsh Nationalist, miziek ; komanant-bloaz, 85 lur.

Breton Nationalism, 60 lur.

Can Wales Afford Self-Government ? gant Dr. D.-J. ha Dr. Noelle Davies, 70 lur.

Mynnwn Gymru Rydd, 25 lur.

Let us Free Wales, 25 lur.

Y Ddeddf Uno 1536, 70 lur.

Connolly of Ireland, gant Dr. Noelle Davies, 40 lur.

Paham y Llosgasom yr Ysgol Fomio, gant Saunders Lewis, 15 lur.

AE a Chymru, gant D. J. Williams, studiadennoù diwar-benn George Russell, 15 lur.

Beginner's Welsh, levr saoznek da zeskiñ kembraeg ; levrenn gentañ, 60 lur ; eil levrenn, 60 lur.

Grundtvig of Denmark : A Guide to Small Nations, gant Dr. Noelle Davies, 50 lur.

Amaethyddiaeth Cymru, gant Moses Gruffydd, 15 lur.

Ffeithiau i Gymru, gant J. E. Jones ; levr bihan leun a sifroù diwar-benn Kembre, 10 lur.

Facts for Wales, 10 lur.

Medieval Wales, gant H.T. Evans, 95 lur.

Modern Wales, gant H. T. Evans, 150 lur.

Partition of Ireland, gant David O'Neill, 20 lur.

Constitution of Ireland, 20 lur.

Kas an arc'hant, war un dro gant ar goulenn, da : Per Ar BIHAN, 6, rue du Maréchal-Joffre, Versailles (S.-et-O.) C.C. 5349-06 Paris.

Lakaat ouzhpenn un timbr 10 lur. Al levrioù a vo degemeret e-tro ur miz goude bezañ bet kemennet.

Levrioù Saoznek

Levrdi ar British Council 28, Avenue des Champs-Élysées, Paris, 8°, a brest levrioù saoznek d'an dud. Evit emezelañ e ranker paeañ 400 lur, hag a vez daskoret pa ziemezeler. Ar mizoù kas-en-dro al levrioù da Bariz a zo e karg al lenner. Prest e vefe renerien al Lenndi da brestañ levrioù kembraek ma vefe goulenn a-walc'h dezho e Breizh. Mat e vefe enta da Vreizhiz skrivañ war ar poent-se.

Keleier

Hor c'heneiled Job Ivikel ha Renea Moris a zo bet euredet d'ar 25 a viz Gwengolo e St-Wionvarc'h (Bro-Wened).

D'an 28 a viz Here, ez eo bet lidet e Gwimilio (Bro-Leon) eured Yvonna Beuzit ha Roger Gaudaire.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d'an dud nevez.

Annig Poupinod a zo laouen o kemenn ganedigezh he c'hoar vihan Berc'hed d'an 2 a viz Here.

Hor c'halonekañ gourc'hemennoù d'hor c'heneil ha kenlabourer Yann Boupinod ha d'e bried, hag hor gwellañ hetoù da Verc'hedig.

ROLL AR PENNADOU embannet war Al Liamm (Niv. 1-5)

Renkadur an oberourien hervez urzh al lizherenneg

4/44 a dalv kement ha niv. 4, pajenn 44

AL LIAMM

Bodadeg « Al Liamm 4/44

Al LOUARN (Alan)

Daou levr da lenn ha da skignañ 5/54

Ar BIHAN (Per)

Iwerzhon 1921-1929 ; ar politikerezh hag an emgann evit ar yezh 1/17

Iwerzhon en XXvet kantved : war-du an dieubidigezh 2/33

Parnell 3/25

Arboellerezh Bro-Skos 5/35

BRO-C'HALL (Charlez a V.)

Y Llydawiaid a'r Wladfa Gymreig y Mhatagonia 3/38

CARADAR (s. o. Smith)

KENON (s. o. Raude)

KERLANN

Skeud un tennataer 4/36

Yezhadur Kervella 5/52

KERUZORE (s. o. Gellig)

KLERG (Abad)

Foneddigion ac Annwyl Gydgeltiaid 4/38

Aotrounez ha Breudeur Gelt a Garantez 4/40

tr.

Y Mudiad Llydewig hyd 1914 3/40

Y Mudiad Llydewig yn ystod yr hâf 1946 3/44
Cyngres Geltaidd Sant-Brieg 5/45
Gwyliau Montrwlez 5/46

DENEZ (Per)

Wales 4/17

Kembreiz e Patagonia 5/37

Kanaouennou (Jef Ar Penven-B.A.S.) 5/54

tr.

Bro an torgennoù, Sir Drefaldwyn (R.S: Thomas) 4/19

Buhez ar gouezeleg : 1939-1945 (D. P.) 5/31

DISANV

Ar Gelted hag ar sportoù 3/36

Cymdeithas Al Liamm 1/5

Cumann Al Liamm (An Lùb) 1/6

Evit kaout levrioù eus Iwerzhon 5/55

Gluaiseacht Bhriotaineach : Samhradh 1946 3/46

Newyddion o Lydaw 1/24

O Gymru 2/39

Strollad Al Liamm 1/3

Thomas Gwynn-Jones 4/21

Un darvoud etrekeltiek 4/37

Newyddion o Lydaw 2/40

D. P.

Buhez ar gouezeleg : 1939-1945 5/31

ELIES (Fañch)

Ar c'hembraeg hag ar saozneg 1/9

Ur sell war lennegezh Kembre 1/12

Amzerioù ar c'hembraeg 2/5

Kentskrid d'ar pevar skourr 2/15

Na glas e oa va zraonienn 3/29

Dik Trevan 3/30

tr.

Ehanañ (Dik Trevan) 3/30

Yezhoù (Thomas Gwynn-Jones), 4/21
Ar paotr fall (Dik Trevan) 4/27
Bolontez an Hini Kozh (Dik Trevan) 5/38
Ur mevel (Thomas Gwynn-Jones) 5/42

GALBRUN (Erwanez)
Ar Gouelioù e kendalc'h Dulenn 5/14

GELLEG (Andrev)
An harluad 1/21

GWYNN-JONES (Thomas)
Yezhoù 4/21
Ur mevel 5/42

HEMON (Roparz)
Lizher eus Iwerzhon 5/6

C'HOUEIROU (Ronan)
An arz iwerzhonek 1/19

JONES (Griffith-John)
Cymru 2/37

LATIMIER (Andrev-L)

Darempredoù 1/2

Emsav 2/2

Dalc'husted 3/3

Kenemglev 4/3

Oberiantiz 5/3

tr.

Skosiz a ouenn vat (Gwilherm Power) 2/26

L. T.

Kelaouennoù ha kelc'hgelaouennoù e Bro-Gembre 4/20

MAC UILIS (Oscar)

Ar « c'hourrac'h », bag vroadel Bro-Iwerzhon 3/22

An Iwerzhoneg, lodenn I 4/33

lodenn II, III, IV 5/19

MERSER (Andrev)

Ar Skolioù dre lizher 4/13

MILLOUR (Glaoda)

Ur sant etrekeltiek 3/14

OLIER (Youenn)

Cysylltiadaù 1/4

PERRY (Francis Berton)

Gailck Ellan Vannin 4/41

POUPINOD (Yann)

Iwerzhon hag an diouer a labourerien-douar e Breizh 2/28

Ur sell war Gelted an 20^{vet} kantved 3/6

Divroerezh ar Gelted en amzer-vremañ 4/6

POWER (Gwilherm)

Skosiz a ouenn vat 2/26

PRADIG (R)

Pasion Bro-Iwerzhon 3/16

tr.

Ar « c'hourrac'h », bag vroadel Bro-Iwerzhon (O. MAC UILIS) 3/22

RAUDE (Alan J.)

Kembre 1/7

Er gloed eur 1/23

SKOL OBER

Skolioù kembraeg e brezhoneg 4/14

SEITE (Visant)

Goude bezañ gwelet Iwerzhon 5/12

Skol Hañv Rosko 5/49

SMITH (A.S.D.)

S. o. « Hon darempredoù » 5/47

THOMAS (R. S.)

Bro an torgennoù, Sir Drefaldwyn 4/19

TYMEN (Erwan)

En-dro da Gendalc'h Dulenn 5/16

TREVAN (Dik)

Ehanañ 3/31

Ar paotr fall 4/27

Bolontez an hini kozh 5/38